

BARR HEOL war Feiz ha Breizh



TUD AR C'HOARIVA BREZHONEG E PARIZ E 1973

Niv.78 Gwengolo 1973 Priz an niverenn. 6 lur

Lazhañ buhez

Kalz a drouz a zo bet nevez 'zo diwar-benn an diskenn-bugale en Europa hag en Amerika ha votet ez eus bet pe votet e vo lezennoù o reiñ aotre d'ar merc'hed da ziskenn o bugale, e degouezhioù 'zo; kleñved ar vamm, riskl da vugale siet da vezañ ganet, palforserezh ar vamm, diaesterioù bras evit sevel ar vugale en un doare dereat. E meur a vro ez eus klinikennoù a-ratozh e-lec'h ma vez disammet ar merc'hed diouzh «o frouezh», evit ober gant ul lavarenn bet implijet e pedennoù ar pron er c'hantved tremenet ha marteze zoken er c'hantved-mañ.

Setu m'emañ, evel pa lavarfen, kleze Damoklez a-us d'hor pennoù e-skeud al lezenn emañ Gouarnamant Pariz o tanzen : Ha n'eo ket fall dimp esa gwelout sklaer en afer-se ha barn an traoù gant ur spered kristen hag e vo un abeg da gomz eus an doujañs d'ar vuhez dindan he stummoù disheñvel.

*

Ur gudenn dezhi meur a du ez eo kudenn an diskenn-bugale : relijion, medisinerezh, ekonomiezh, psikologiezh, ha n'eo ket souezhus e vefe bet skrivet levrioù diwar he fenn. Ret eo dimp strishaat hon tachenn ha komz hepken en anv ar Relijion hag an Onestiz kristen.

An diazez kentañ eo hemañ : pep den divlam en deus ar gwir da vevañ ha da zifenn e vuhez diouzh ret a-enep d'un enebour displeal. Lezel a reomp a-gostez an droed a gemer ar gevredigezh da lemel o buhez digant torfedourien 'zo ; lezel a reomp ivez a-gostez ar brezel ha ned eo, sañset, nemet ar gwir en deus pep den ha pep kevredigezh, pe bobl da zifenn o buhez. Hag e komzomp hepken eus ar vugale ha ne dint ket ganet c'hoazh, hag a vez graet anezho krouelloù pe fetuzoù. N'eus forzh penaos eo deuet ar c'hrouelloù d'ar vuhez : priedelezh reizh, avoultriezh, palforserezh (pe gwallerezh) ez int didamall eveljust. Evel ma lavar ar bobl : n'eo ket ar vugale a zo kaoz. Ya, met unan a zaou, pe ez eo ar groueell un den gwirion pe ne deo ket. Mar deo un den gwirion en deus pep gwir stag ouzh an natur-den. Ha mar ne deo ket c'hoazh un den ? Mar ne deo nemet evel ur blantenn hep bezañ c'hoazh un den : daoust ha ne vefe permetet evit abegoù a-bouez-tras evel ar re hon eus meneget uheloc'h, «diskenn» anezhi ? Den ebet avat, daoust d'an araokadennoù graet gant ar medisinerezh ne c'hell lavarout pegoulz e teu ar pezh a zo savet diwar natur an tad hag ovulenn ar vamm da vezañ den. Met e gwirionez, emañ an holl ouizieien a-du gant kement-mañ : kerkent ha krouet en uteruz ar vamm e talc'h ar pezh a zo krouet da greskiñ etrezek ur pal resis : dont da vezañ un den emskiantek, mestr warnañ e-unan hag o respont eus e oberoù. Troc'h ebet eta en hent e vuhez. Farserezh dizonest e seblant bezañ tezenn ar re a lavar e teu ar groueell da vezañ den d'ur momed bennak, met ne deo ket adalek an deroù eus he buhez. Gouarnamant ebet gant e lezennoù, paotr ebet na plac'h ebet ne c'hell mont a-enep d'ar gwir naturel en deus pep den d'ar vuhez adalek ma vez krouet. Ha n'eo ket lezenn an dud a gement a c'hello cheñch un torfed en un oberenn aotreet.

*

Tamallet ez eus bet d'an Iliz aotren a-wechoù an diskenn-bugale, e degouezhioù dreist-ordinal evel e 1960 pa oa bet diflouret leanezed er C'hongo belgiat. Aotreet e vije bet al leanezed da zifoarañ eus ar vugale krouet evel-se ha degemeret neuze e klinikennoù, e Bro-Velgia, kerkent ha diskennet eus ar c'harr-nij. Hogen e gwirionez leanez ebet ne

oa en em gavet dougerez - ar pezh a zo reizh a-walc'h hervez ar medisinerezh, pa vez diflouradenn dre balforserezh. An Tad Troisfontaines, Jezuit, ha dean eus Kevrenn ar medisinerezh eus skol-veur Namur en deus douget testeni war gement-se er gazetenn «Vers l'Avenir», lun, 5 a viz C'hwevrer 1973.

E-kerz ar brezel diwezhañ e Polonia hag en Hungaria e oa bet gwallet hag adgwallet leanezed gant ar soudarded rusian hag e oa en em gavet meur a hini anezho dougerez. Ha setu ar pezh a oa bet divizet a-berzh pennadurezhioù an Iliz : terrin le al leanezed evit permetiñ dezho kuitaat o c'houent ha distreiñ er bed da zesevel o bugale, ne chom er goent hag e vije neuze savet o c'hrouadurioù diwar-goust o Urzh hec'h-unan.

*

Pa gomzer eus diskenn-bugale, ne reer meneg ebet eus an efed a ra ur seurt oberatadenn war ar vedisined o-unan ha dreist-holl war ar merc'hed (klañvdiouezed, amlegezed) a vez o sikour anezho pa rankont tapout krog en izili bihan ar vugale — pa ouzer ez eo graet ar vaouez evit reiñ buhez da vugale. e kompren a-walc'h pegen dinatur ez eo ur seurt oberatadenn.

En iliz katolik ez eo sklaer ar respont da reiñ : den ebet n'en deus ar gwir da ziskenn bugale, zoken ar re nevez-krouet. N'emañ ket al lec'h amañ - ha n'eus forzh penaos ne vefe ket plas a-walc'h da zegas amañ diskleriadurioù ar Pab, an Eskibien eus kement bro a zo. Hag ar Sened Meur Vatikan II n'en deus graet nemet kadarnaat kelennadurezh an Iliz a-viskoazh war ar poent-se. Reiñ, zoken dre lezenn, aotre da ziskenn ar c'hrouelled, arak, lakaomp ar c'hwec'hvet sizhunvezh douget a zo kemerout un droed ha n'he deus kevredigezh ebet.

Pa gomzomp eus lezenn merkomp an efed fall a ra ur seurt lezenn war goustiañs an dud, rak ne ra nemet direizhañ ar goustiañs, rak a-barzh ar fin, al lezenn eo a vo sellet evel ur reolenn a vuhez, da lavarout eo ar pezh aotre dre lezenn a vo sellet evel un dra permetet gant lezenn naturel an onestiz ha neuze gant Doue e-unan. En ur ger, ar Gouarnamant eo a verkfe d'ar sujidi tachenn ar vuhezgezh onest.

E-lerc'h sevel ur seurt lezenn e vefe sur-mat gwelloc'h d'ar Gouarnamantoù klask lakaat an dud da gompren pegen kaer ha santel ez eo pep buhez, sevel kreizennoù-alian, kreizennoù-medisinerezh evit kalonekaat ar mammoù prest da fallgaloniñ, stourm ouzh ar Bomografiez, sevel tiez dereat ha frank da lojañ ar familhoù, kelenn ar yaouankizoù war ar riskl a zo en o darempredoù. Ewel just ne sell ket kement-se ouzh ar Gouarnamantoù hepken met ouzh an holl dud a volentez vat hag ouzh an dud-iliz.

Hag erfin pa ne venno a briz ebet ur vamm sevel he begel emañ kement-se neuze e karg ar Gevredigezh, seul vui ma'z eo stad ar Gevredigezh eo a vez penn-kaoz alies d'an dizurzhioù e-keñver buhezgezh onest.

N'eusforzh penaos, ar re ziwizhañ da vezañ a-du gant al lazhañ buhez-se a zlefe bezañ ar vrezhonegerien, rak degemer al lezenn-se a vefe evito en em lakaat dindan, ha labourat a-enep interest o sevenadur hag o yezh.

2

Stag avat ouzh kudenñ an diskenn-bugale hag al lazhañ-buhez er stumm-se, ez eus ur gudenn all. War un dachenn all avat. Pep buhez a zle bezañ doujet. Pep seurt buhez. Ha re alies, pa gomzer eus buhez, e komzer hepken eus buhez ar c'horf. Frank-meurbet avat ez eo tachenn ar vuhez. Sellomp hepken en dro-mañ ouzh ar pezh a anver al lazhañ-pobl, pe al lazhañ-sevenadur hag e welimp he deus lezenn an onestiz he ger da lavarout hag hon eus d'ober gant un afer a-goustiañs e gwirionez. Pa vez komzet eus an distruj a

4

reas an Nazied war ar Yuzevien, pa gomzer eus ar brezel-diabarzh hag a zo oc'h ober e reuz er Mozambik emañ an holl a-du evit kondaoniñ ar seurt torfedoù, dreist-holl abalamour ma vez lazhañ-tud. Met bez' ez eus ul lazhañ-buhez hag a zo soutilloc'h dre na lam ket o buhez-korf digant an dud a al lazhañ-sevenadur. Piv da skouer e Breizh a ra un afer-a-goustiañs eus ar stumm m'emeur o tistrujañ ar vro-mañ ? Ar skolioù o tremen hep deskiñ Istor Breizh, hep kelenn ar Yezh. Ministr an Deskadurezh o nac'h degemer ar Yezh evit un Aotreegezh a-ratozh ! Ret eo en em glevout : un afer-a-goustiañs ez eo pe ne deo ket. Mar o deus ar Vretoned ar gwir d'o Istor, d'o Hengounioù, d'o Sevenadur ez eo dead strizh d'ar Gouarnamant ha d'an Iliz doujañ d'ar gwir-se.

E Breizh, hag e lec'h all, e seblant gwerc'h tachenn Teologiezh ar Sevenadur. Perak ? Bez' ez eus un abeg kuzh : al lezenn. Ewel pa vefe al lezenn ur reolenn-a-onestiz anezhi hec'h-unan. Tennañ ar gudenn diwar dachenn an Onestiz hag ar Moral evit ober ganti ur gudenn neptu, hag an holl : pennadurezhioù Breizh, pennadurezhioù-an-Iliz, tud e karg, kelennerien ha skolaerien e skolioù ar Gouarnamant evel er skolioù prevez o tremen neuze hep dere'hel kont eus gwir ar Vretoned.

Hogen war an dachenn-se ne deo ket mut evelkent an Deologiezh katolik, hag e lavar e talvez ivez eviti ar pempet gourc'hemenn : «Na lazhi ket !» N'eo ket diaes gwelout war beseurt diazezoù en em harp an Deologiezh : gwir pep den d'ar vuhez, d'ar vuhez leun evit e gorf hag evit e spered (1). Met gwelomp testennoù an Iliz.

Tri zesteni hepken a fell dimp menegiñ : al Lizher-Meur Pacem in Terris, diskleriadur ar Sened Vatikan II, hag ar Breval latin nevez (1973).

Anavezet-mat eo komzoù ar Pab Yann XXIII en e lizher Pacem in Terris o sellout ouzh ar «minorelezhioù Etnikel» (2). Daoust ma'z eus tu d'ober gwelloc'h troidigezh ec'h adlakomp amañ troidigezh Barr-Heol, Mezheven 1963, pajenn 27.

«Abaoe a XIXvet kantved dreist-holl ez eo aet war greskiñ ha war greñvaat un tamm dre-holl war an douar, pleg an dud eus an hevelep gouenn da glask bezañ mestr er ger ha d'en em vodañ evit sevel ur vroad dishual. Evit meur a abeg ez eo diaes tizhout ar pal-se bep tro ha dre-se, setu ma kaver alies e diabarzh ur vroad all, broadoù bihan gant kudennoù a-bouez-vras stag ouzh kement-se.

Fellout a ra dimp eta diskleriañ fraezh-meurbet penaos kement tra a vez graet a-enep ar broadoù-se da derrañ nerzh-bevañ ha nerzh-emeleañ ar ouenn, a ya da vat a-enep an deverioù a justis, ha muioc'h c'hoazh ma tenn ar seurt gwall strivoù da lazhañ ar Vroad hec'h-unan. Er c'hontrol avat, n'eus netra o klotañ gwell gant gourc'hemenn ar reizhder eget al labour efedus kaset war-raok gant ar Gouarnamantoù evit gwellaat stad-a-vuhez ar broioù bihan suj, peurgetket, evit pezh a sell ouzh o yezh, o sevenadur, o hengounioù, o danvezioù hag o embregerezhioù war dachenn ar arboellerezh.»

Pep ger a vefe da bouezañ, na petra'ta. Petra da skouer a dalvez ar gerioù-mañ : «a ya da vat a-enep an deverioù a justis ?» Nemet ez eo kablus ha gwall gablus ar re nabeulont ket war an dachenn-se lezenn ar justis, ha kablusoc'h a-se ez eo ar re a glask a-ratozh-kaez a-fetepañs, distrujañ ar minorelezhioù. Un afer a justis, ya, un afer-a-goustiañs.

An eil testenn a zegasimp ez eo hini ar Vatikan II (3).

«Ar Sened, a-raok pep tra, a fell dezhañ degas da soñj eus talvoudegezh peurbadus gwir naturel ar pobloù hag an diazezoù hollvedel anezhañ. An oberoù eta hag a ya a-ratozh-kaer a-enep d'ur seurt gwir, evel ar gourc'hemennoù o reiñ urzh d'o c'has da bronn, a zo torfedoù ha n'eus tu ebet da zigareziñ ar re a sent outo evel tud dali. E-touez an oberoù-se e tleer menegiñ da gentañ-penn, ar re a glask n'eus forzh evit peseurt abeg, nag e peseurt stumm, distrujañ en o fezh, ur bobl bennak, ur vroad pe ur vinorelezh etnikel

5

(minoritas ethnica) : an oberioù-se a zo da vezañ kondaonet gant nerzh evel torfedoù euzhus. Ha dleet eo pep meleudi d'an dud kalonek ha n'o devez aon ebet da enebñ a-wel d'an holl ouzh ar re a ro urzhioù evel-se.

Amañ e komzer eus «torfedoù», eus «torfedoù euzhus». Ma' an hinj na sant ket e goustiañs broudet gant komzoù evel-se e Breizh, n'emañ ket ken war dachenn an Deologiezh katolik.

An deirvet testenn a dennomp eus ar Brevial latin nevez : «Liturgia Horarum» (4), eus ar pedennoù a vez da lavarout e dibenn al Laodez pe ar Gousperoù :

Isolit evezh. Aotrou Doue, war ar re o deus da c'houzañv abalamour d'o gouenn, d'o liv, d'o stad, d'o yezh, d'o relijion, ha grit ma vo anavezet ha rentet dezho o gwirioù hag o enor.»

Ar ger troet ganimp «da c'houzañv» a zo «discrimen» e latin : an diforc'h a vez graet e-keñver an dud evit pezh a sell ouzh o gouenn, o liv. Met ar pezh a zo da gompren, anat deoc'h, eo ne vez ket graet an diforc'h a zo ezhomm e-keñver an dud disheñvel diouzh ar re all, da lavarout eo, ne vez roet dezho ar pezh o deus ar gwir da gaout. E Breizh ober e-keñver ar Vretoned, dres evel ma vez graet e-keñver ar sitoianed all eus ar C'hwec'hkogneg, a zo o diforc'hañ diouzh o hêrezh vroadel : un torfed euzhus, gouez da Vatikan II.

Merket mat-tre ez eo, evel ma welit, diazezoù un Deologiezh eus ar Sevenadur gant testennoù eus ar pouezusañ a-berzh pennoù-meur an Iliz. N'eus mui nemet donaat an Deologiezh-se ha tennañ diouti an holl sklerijenn a zo enni evit heñchañ hor stourm.

Klozadur.

A-ratozh-kaer hon eus dibabet ar ger «o diforc'hañ diouzh o hêrezh», rak e gwirionez an hevelep kudenn hon eus amañ hag evit pezh a sell an diforc'hañ-bugale ; ar vugale a ziforc'her diouzh an hêrezh sakr m'eo ar vuhez. Mar deo an diforc'hañ-bugale eo a sko ar muiañ ar spredoù hag a denn an evezh an aesañ en abeg d'e grizder, hag ivez, siwazh, dre ma vez lakaet holl venvioù-meur ar c'helaoua d'hen brudañ, ez eo arabat disoñjal n'en deus gouarnamant ebet ar gwir da ziforc'hañ ar pobloù hag ez eo un dever a goustiañs evit pep den, den lik pe den-a-Iliz embann ha difenn gwir ar pobloù, bras ha bihan, da vevañ ur vuhez onest ha kaer hervez o spered dezho o-unan. Lazhañ-buhez a zo lazhañ buhez, ne servij ket !

NOTENNOU.

(1) *M. Glanndour* : Actualités de Pacem in Terris, supplément Ar Vro, niverenn 24, Mae 1964.

(2) Barr-Heol, *Mezheven 1963*, pajenn 17.

(3) *Vatikan II* : Constitutions, Decreta, Declarationes, Const. Past. de Ecclesia in Mundo, Sectio I, de Bello Vitando, pajenn 813.

(4) *Liturgia Horarum 1973*, pedervet sizhunvezh, kentañ Gousperoù ar Sul.

A. KALVEZ

KEMBRE 1971

III

DIC JONES — BLAENANNERCH

Gwener 30 a viz Gouere.

Da 8 eur 30, evel ma oa bet divizet, e teuer da skeiñ war va dor, met savet on pell 'zo... Ouzh en em walc'hiñ e klevan ar radio oc'h embann ez eus 45 % a dud e Bro-Saoz a-du gant ar C'henvarc'had, 45 % a-enep. Lavaret em eus va breviañ ha skrivet lod eus va eniverennoù. A-raok bezañ echuet e tiskennan da leinañ. Goude va merenn, war vord an hent etre Aberteifi (Cardigan) hag Aberystwyth e c'hellin skrivañ ar peurrest.

Mont a ran en hent gant hetoù va ostizien, hag ur pakad sandwichennoù a guzhan dindan ar skabell evit ma chomint freskik, mar deo posubl, rak tomm a-walc'h eo an amzer. Pignat a ran adarre war lein Mynydd y Preselau. C'hoant am befe da arsav evel an douristed saoz, da arvestiñ ouzh ar vro en em led dirazon, ha da luc'haskevdeniñ an deved e a zo strewet warni evel bleunioù gwenn. Met ret eo din kenderc'hel gant va hent evit bezañ e koulz e Llangrannog, en Aberystwyth, ha fenoz e Pwllheli. Nec'het a-walc'h ez on, rak n'ouzon ket ha bez' am bo a-walc'h a blas d'ar pakadoù o doa lezet warlene en ur vereuri div Vreizhadez yaouank, Rivanon K. hag Ivona B., war-lerc'h ur gwall-zarvoud, na dreist-holl da glenkañ rodoù o c'harr-tan kozh a zo e kamp an Urdd e Llangrannog.

Adtremen a ran dre gêr Aberteifi a zo bihan a-walc'h, met leun he ruioù a douristed saoz. Siwazh, n'em eus ket amzer da vont da glask roudoù an Aotrou Rhys (yr Arglwydd Rhys, 1132-1197) a zegemeras an Arc'heskob Baldwin eus Caergaint (Canterbury) ha Gerallt Cymro (1143-1223) (1).

Hedañ a ran bremañ ar mor abaoe Aberteifi. Kalz a weturioù a zo war an hent, ha ret eo bezañ war evezh. Souezhet a-walc'h ez on pa lennan war an hent Blaenannerch. Renkañ a ran va c'harr dirak un ti-kenwerzh emañ ennañ ar burev-post. Antren a ran en ur garaj : «garej» evit Kembreiz, ha bremañ «garage» evit ar Saozon a fell dezho drevezañ ar C'hallaoued.

Evit bezañ komprenet mat e c'houlennan e saozneg digant an den hag anavezout a ra Dic. — O ya, emezañ, an holl amañ a anavez Dic Jones. Met un den am eus amañ a zisplego gwelloc'h e pelec'h emañ o chom. — Ha komz a rit kembraeg ? — Ne ran ket. Saoz ez on (da lavarout eo «saozneg eo a gomzan»). Ar mevel a zispleg din e saozneg pelec'h emañ mereuri Dic Jones : N'eo ket diaes. Kentañ hent war an tu kleiz, ha kentañ mereuri war an tu dehoù. Eno emañ «Yr Hendre» (an Ti kozh).

N'eus den ebet o chom er vtreuri gentañ war an tu dehoù, na skritell ebet ouzh an toull-karr. Goulenn a ran digant ur grennardenn, en ur vtreuri war an tu kleiz. Kembraeg a gomz gant he mamm a zo er gegin, hag he zad a zo er porzh. Kimidiñ a ran diouto e kembraeg.

Degouezhout a ran en «Yr Hendre». Ar wreg, yaouank a-walc'h, am degemer : «E oamp ouzh ho kortoz, emezi, an da gas va merc'h da lavarout d'am fried dont d'ar gêr.» Azezañ a ran en ur sal vihan stok ouzh ar gegin. Kembraeg a gomz an holl, nemet un nizez dezho. He zad, ur breur da Dic Jones, a zo en arme-an-aer, hag emañ bremañ o chom e Bro-Saoz. Klask a ra deskiñ kembraeg gant he c'hendivri. Ur ger bennak a oar,

met ret e vo dezhi chom pell a-walc'h amañ a-raok bezañ barrek da gomz.

Setu a-benn ar fin Dic Jones. Barzh ar Gador e oa bet en Eisteddfod Aberafan, e 1966. Un den bras, kaer, e-kreiz e nerzh, gwisket evel ur peizant eus Kemper-Gwezeneg. Ret eo din evañ te, ha d'erc'hel a ra warnon evit ma chomin da verennañ. «Lavaret em eus, emezañ, d'ar «grwp pop», an Hennesys, a orin iwerzhonat, e oac'h o tont amañ. Klevet hoc'h eus komz diouto moarvat ? — Ya, klevet em eus komz diouto war «Hamddens», «Asbri», ha klevet em eus anezho o kanañ war an «Teledu», ar sizhun diwezhañ. — Tremena reont an hañv o kanañ en unan eus ostalerioù Aberporth. E deroù miz Eost ez aint da ganañ da Vreizh, ha c'hoant o deus e teskfec'h dezho ur ganaouenn boblek vrezhonek : «Biskoazh kemend-all ! emezon. Biskoazh n'on deuet a-benn da zeskiñ d'ar Vretoned vihan kanañ, ha setu ma vo ret din bremañ ober kentel da dud a-vicher !»

Da c'hortoz an «Hennesys» e komzomp diwar-benn Kembre hag ar C'henvarc'had. Dic Jones a zo a-enep ar C'henvarc'had pa n'emañ ket o klask mad an dud, emezañ, met hini ar kapitalourien ; sevel un Europa kreñv a-dal d'ar Rùsianed ha d'ar Sinaiz hag a-dal d'an Amerikaned. Setu perak e fell dezho degemer ar germaneg da yezh ofisiel e-lec'h ar saozneg.

A-drugarez Doue ez eus ganin skouerennoù eus «Gwir Vretoned» bihan ha bras. Evel-se p'en em gav an «Hennesys» e vouskanan dezho diouzh va gwellañ meur a don. Dibab a reont «Son Julien Kadoudal» dre ma'z eo ur c'han-bale. Ret eo din kanañ ha lenn ar ganaouenn dirak ur magnetofon ha lakaat va zud d'hec'h adlenn.

Goude ar bleustradenn, e tiskennomp, Dic Jones ha me, da Llangrannog da welout karrtan va div zimezell. War an hent e komz Dic Jones eus levezon fall ar skinwel war ar vugale. Er gêr, ne gomzer nemet kembraeg, ar skol a zo divyezhek, met c'hoari a reont saozneg er porzh-skol : ar skinwel, paotred-ar-sportoù ha Tarzan a gomz saozneg. An «Hennesys» a blij dezho ha kanañ a reont evelto. Setu perak emañ ar gwir gant Cymdeithas yr Iaith. Dre forzh hejañ ur banerad patatez e teu ar re vrasañ war-varr, emezañ. E korn an hent e taolan evezh ouzhu un ti bihan koant nevez, dezhañ un anv heverk : «Nidaros» (hep chom). — Petra a dalvez kement-se ? emezon. Hag e kontas din istor fromus an anv iskis-se :

«Va mamm a zo o chom amañ. Va zad a oa rener al laz-kanañ. Marvet e oa en deiz ma tlee kanañ en Eisteddfod. Al laz-kanañ en doa kanet ar c'han «Nid aros» hep e rener.»

Saozneg hon eus komzet gant an «Hennesys». Dic Jones a zispleg din ez eo gwelloc'h va c'hembraeg eget va saozneg. Laouen ha spontet ez on war un dro. Laouen o welout ez a va c'hembraeg war wellaat, ha spontet o welout e wash a saozneg. Ha koulskoude e kavan diaes distreiñ d'ar c'hembraeg goude bezañ drailhet saozneg e-pad div eur bennak. Met ret eo sentiñ ouzhu al lezenn-aour : Nac'h komz saozneg muiañ ma c'hellin.

Ar c'harr-tan a zo war leur mêreuri Llangrannog. Krog eo dija an teal hag al linad d'e c'hronnañ, hag an difankerien da verglañ. Tennañ a reomp teir rod hag ar gouleier hag ur pezh eus ar motor da gas ganimp. Distreiñ a reomp d'ar c'hamp ar binvioù hon eus amprestet. Emañ ar vugale o tegouezhout eno e kirri-boutin. Sikour a ran ur paotrig eus «y Bala» da zougen e samm ha komz a ran un tammig kembraeg gantañ. Dic a c'houlenn digantañ petra a car diwar-benn «Sioni Wynwns», ar «Yann-an-Ognon» pe ar Joniged. Dic Jones end-seun en deus skrivet ur varzhoneg diwar-benn «Sioni Wynwns» a vez studiet gant bugale ar skolioù.

War hent an distro e tispleg Dic Jones din ez eo eürus o kemer perzh e buhez sevenadur-erl e vro, ha daremprediñ hemañ hag hennezh. Bet eo er skol-etre, studiet en deus ivez un tamm galleg ha latin, met tamall a ra dreist-holl d'ar c'helenner-istor komz hepken

eus Bro-Saoz, ha morse eus Kembre, pe zoken Alban, evel pa vefe Bro-Saoz Breizh-Veur a-bezh. E 1966 en doa gonezet ar gador evit ur varzhoneg diwar-benn an Eost. Ar gurunenn a oa aet gant ur c'heneil dezhañ. Un degemer a enor a oa bet graet dezhañ en Aberporth hag ivez en Aberteifi, rak er bloaz-se, en doa bet gonezet dija ar gurunenn en Eisteddfod Aberteifi, hag e geneil ar gador !

Kemer a ra perzh ivez en ur program-radio a vez skignet d'ar sul da noz hag adskignet d'ar meurzh. «Penigamp» (Dispar !) dindan renerezh Cassie Davies eus Aberystwyth, gwechall ensellerez er skolioù. E 1966 e oan bet degemeret ganti en he zi.

Un den desket am eus dirazon e gwirionez. Pinvidik eo e levr-oueg kembraek, hag er sal vras — hag a zo bihan e gwirionez — e weler ur piano, ur benveg-radio bras-kenan ha 25 levrenn an «Encyclopedia Britannica» e-kichen ar Bibl hag ar «Bywgraffiadur Cymreig hyd 1940» (ar Buhezskrid kembreat betek 1940). Ne gomz tamm ebet evel un den gouiziek, met evel un den hag a gemer perzh penn-da-benn e buhez e vro. Taolet eo bet er-maez koulskoude eus Kuzul ar Barrez er votadegoù diwezhañ. «Kentañ tro, emezañ, e retornin e-barzh !»

E-pad m'emaon o skrivañ e teu unan eus ar merc'hed da gemer ar «Geiriadur Mawr» (ar Geriadur Bras) evit klask ur ger.

Arabat disoñjal e tilez Dic Jones e feurm evit plediñ gant ar c'hembraeg. Mont a ra d'ober Arabat soñjal e tilez Dic Jones e feurm evit plediñ gant ar c'hembraeg. Mont a ra d'ober war-dro e loened e-keit ha ma choman-me e-pad teir eur bennak da echuiñ eñvorennoù an deiz a-raok hag an deiz hiziv. Ha laouen-kenan ez on, rak fenoz e vo ret din mont da selaou an «Hennesys».

O koaniañ ganeomp emañ Richard. Emañ o vont da guitaat ar skol-etre evit mont da zeskiñ an embregerezh-korf d'ur «Coleg» e-kichen Maesteg. A-hervez m'eo ket ampart-tre war ar c'hembraeg o vezañ m'eo e vamm ur saoznegerezh, met studiet en deus ar c'hembraeg er skol, ha komz a ra mat. Deuet eo da dremen an nozvezhiad gant ar vugale e-keit ha ma vimp-ni e «Penrallt Hotel» (Otel Pennanech) o selaou an «hennesys». Dalc'het eo an ti gant ur Iwerzhonat en ur «Plas» (palez, maner) hag ar marchosi a zo bet kempennet e sal-ostaleri. N'eus ket re a dud, hag an aergelc'h a seblant dispar. Dont a ra gant an daou zen yaouank kanaouennoù saoznek eus Kembre, Iwerzhon, Bro-Skos ha Bro-Saoz, ha kanaouennoù e kembraeg. Er sal e kejom gant c'hoar Richard a gomz saozneg gant an Itron Dic Jones.

A-raok mont da gousket e c'houlennan digant Dic Jones diskouez din e varzhoneg vrudet «Cynhaef» (Eost). Un dastumad a ziskouez din en gwirionez, embannet gant John Penry. A bep seurt ez eus ennañ : Barzhoneg evit goulenn ur benveg d'amprestañ, un-an all diwar-benn «Sioni Wynwns» am eus komzet dija diwar ha fenn, hag englyniou (barzhonegoù berr peder linenn).

ABERYSTWYTH

Sadorn 31 a viz Gouere.

Goude bezañ en em walc'het e-keit ha m'emañ ar barzh o c'horoz e saout em eus klasket lakaat an dorn war e oberoù evit adskrivañ un nebeut pennadoù. Met klenket eo bet dija al levr...

Kimiadiñ a reomp, met spi hon eus d'en em welout an Eisteddfod etre «Cynhaef y gwair» ha «Cynhaef mis Awst» (etre Eost ar foenn hag Eost miz Eost). «E gwirionez eme Dic Jones, nebeut a ed hon eus da droc'hañ, un tamm kerc'h hepken. Gwechall e haded ed evit an dud, kerc'h evit al loened, heiz evit ar mae'h.

En Aberystwyth hag a anavezant mat a-walc'h, ez an da gentañ da «Siop y Peths» (Stal

traoù an Emsav), dalc'het gant unan eus an dud yaouank a oa bet toullbac'het evit bezañ «savet un irienn». Tamallet e oa bet dezho bezañ savet «un irienn» e-doug ur vodadeg da zistruj an arouezioù (ar skritelloù) divyezhek saoznek. Un dek devezh bennak e padas ar prosez — hag a goustas kalz muioc'h eget an arouezioù distrujet — Kondaonet e voent d'ar prizon gant dale, da lavarout eo, o defe o c'hastiz da seveniñ ma vefent kondaonet adarre e-kerz ar bloavezhioù da zont. Pezh a c'hellfe c'hoarvezout daoust m'o deus divizet stourm kentoc'h bremañ evit ur «Chadenn Skinwel Kembreat».

A-drugarez Doue eo leun ar «Siop», rak ezhomm en deus ar perc'henn da vezañ skoazellet. Souezhet on gant niver al levrioù nevez kembraek ha saoznek a embanner a-benn an Eisteddfod : «Aros Mae» (Derc'hel a ra), istor Bro-Gembre gant Gwynfor Evans, rener Plaid Cymru ; «The Extremists», gant rener an dastumadenn saoznek kembraek «Planet» ; «Tan Sylw» (dindan hor sellou), un dastumad divizoù etre Gwyn Erffyl eus Teledu Harlech ha tud anavezet ; «Y Ffordd Newydd» (an Hent Nevez), un droidigezh nevez eus ar Pevar Aviel ; «Crefftwyr Gwlad» (Artizaned ar Maezioù). Met ar c'hentañ a seblant ar muiañ goulennet, en abeg da bersonelezh an oberour. Gouestlañ a ra ur pennad da grouidigezh Breizh. N'ouzon ket avat, hag-eñ e vefe an holl Gembretiz pe an holl Vretoned a-du gantañ pa striv «Trevadenn gentañ Kembreiz eo Breizh hag a-bell an hini he deus graet ar muiañ a verz» (paj. 42).

Mont a ran da glask va merenn da di Arzel Even hag e bried. «E oan just, emezañ, o vont da skrivañ deoc'h dont d'hor gwelout». Komz a ra din eus berzh Kendalc'h ar Studioù Keltiek. Souezhet eo bet gant niver ar studierien a oa war-dro hag a blede gant urzhiadur ar C'hendalc'h. Pouezañ a ra war ar spered nevez a zo bet krouet gant Cymdeithas yr Iaith hag a ro esperañs d'an holl vrogourien. «Ret e vefe deoc'h, emezañ, skrivañ ul levrig diwar-benn ar stourm a rener bremañ e Kembre ; hag e galleg, evit ma vefe komprenet gant an holl.» Anzav a ran dezhañ ez on techet da zastum dielloù — evel pa vefen atav o sevel un dezenn — hag a vez diamzeriet nebeut goude bezañ embannet.

Pouezañ a ra ivez war ar spered nevez a zo gant beleien an Iliz katolik. An Ao. Fox, ur saoz anezhañ, eskob skoazeller Wrecsam, hag a zo o chom e Llanelli, a zo bet o teskiñ kembraeg e Cwrs Carlam ar Skol-Veur (Skol vuan, skol d'ar pevar lamm !). N'eo ket barrek-kenan war ar yezh, met, da vihanañ, bolontez vat en deus diskouezet...

N'eus ket a weturioù etre Aberystwyth ha Machynlleth. A-raok Machynlleth ez eus ur strollad tud oc'h ober un tamm enklask. Ur paotr yaouank war-dro 17 vloaz a dosta ouzh va gwetur : «Siaradweh gymraeg», emezon (komzit kembraeg). Fellout a ra din goulenñ digantañ komz kembraeg. E kembraeg e c'houlenn diganin da belec'h ez an ha dre belec'h : «Ha ma vefe savet un hent-distreñ e Dolgellau hag e gemer a rafec'h ? — Ya, emezon. Ha n'eo ket hep abeg !» Tud ar strollad-enklask, ar polis en o fenn, a c'hoarzh un tammig. N'em eus ket ezhomm da zisplegañ perak. Dolgellau a zo ur gêr vihan gant ruioù strizh, daoust ma'z eo ur c'hroaz-hent etre Bala, Trawsfynydd, Harlech ha Machynlleth. Un eur hanter am eus lakaet da vont betek kreiz-kêr ! Amzer da adverennañ. N'em eus aon nemet eus un dra : e c'hwitfe din an esañs, ha diskenn a ran ar c'hrav hir hep skoazell ar motor. Goude Dolgellau e prenan esañs digant un den war an oad a anavezan. Lavarout a ran dezhañ : «N'ouzon ket a saozneg !», hag e-giz-se ne glask ket implijañ ar yezh-se. Kemend-all gant ar grennardenn a werzh din ur voestad-alumetez, er stal e-kichen, daoust ma ne wel ket-hi va c'harr-tan.

Ledanaet eo bet un tamm an hent etre Dolgellau ha Trawsfynydd, ha didrabas ez on betek Penrhyndeudraeth. Un truaj a zo da baeañ war bont Porthmadog, ha daleet da vat e vezer amañ c'hoazh. War an hent em eus merzet e oa kalz muioc'h a skritelloù div-

yezhek : anvioù ar ruioù da skouer. Anv Port-Madoc zo bet reizhet amañ hag aze, gant lizherennoù peget, e Porthmadog. Setu amañ unan eus an doareoù a c'hellfe paotred Galv kemer. Met a-raok kregiñ gant ur seurt stourm e vo ret dezho moarvat klask kompren talvoudegezh ar yezh evit ar bobl.

PWLLHELI

Degemer kaloneken Afallon gant va mignoned John ha Siani Roberts. ¹ In nebeut lizheri a zo aze ouzh va gortoz. Laouen o klevout ez a mat pep tra er gêr hag «z eus klask dija war Herve ha Nora a-boan embannet. Ul lizher a gavan ivez a-berzh Dic Jones d'am fediñ da vont betek eno ! Lizher berr a-walc'h met leun a vuhez hag a interest evel ar re all. Dres evel m'am eus anavezet an den. M'am bije bet degemeret e respont abretoc'h e vijen bet muioc'h dinec'h da vont betek eno.

Diouzhtu goude koan e tiskennan betek kêr da gomz diwar-benn an oferenn gant ar person. Kembraeg a zo ganeomp hepken, met n'eus ket kaoz etrezomp eus ar yezh. Souezhet on diouzhtu gant niver ar skritelloù divyezhek : anvioù ar ruioù abaoe ur pennad, zo, met ivez skritelloù evel «Maes parcio» (parking).

Pa zistroan, e tiskouez Siani din ar rolloù chomlec'hioù a adskriv bep miz evit ar «Welsh Nation», kelaouenn vizek saoznek Plaid Cymru ; hep dale e vo sizhuniek, hag e vo ret ober al labour gant ur mekanik. John a c'houlenn diganin displegañ un nebeut troiù-lavar tennet eus va levr, evel «péage», «portion congrue».

Sul 1 a viz Eost 1971.

E saozneg penn-da-benn e lavaran an oferenn. N'eus bet lakaet testenn kembraek ebet din. Warc'hoazh en em gemerin gwelloc'h.

Goude lein e tiskennan gant John da chapel ar «Bedyddwyr» (Badezourien). Siani a c'houlenn digant Sion ha kaset en deus gantañ peadra da lakaat er gest, Egwirionez e laka pep ezel e brof en ur golo a zoug e anv hag e niverenn. Nav chapel pe iliz a zo e Pwllheli. Amañ e pleustront hini ar «Bedyddwyr», hag en Aberdaron ar chapel «Wesla». En Aberdaron ez eo R.T. Thomas ar person. Anavezet eo evel barzh er bed saoznek. Bras eo ar chapel, nebeut a fideled, un ugent bennak hepken, holl tud war an oad, nemet daou vogel. Ar pastor a zeu d'am saludiñ a-raok kregiñ gant an ofis hag am salud adarre eus lein ar gador a-raok klozañ. A-hervez, e vez kalz a dud e chapel ar Vetodisted diouzh ar beure ha diouzh an noz.

Ouzh taol e selaouomp dibenn an ofis skignet eus Teltenn vras Bangor. Siwazh, ne gle-vomp nemet diwez prezegenn an Eskob diwar-benn ar yezh. Sur-mat ez eus bet lavaret traoù a-bouez da gentañ. Peur hor-bo-ni un eskob evel Glyn Simons pe Williams ?

Un dibab eus skingasadennoù ar sizhun. Sion ne zistag ket e zaoulagad diouzh levr kentañ Herve ha Nora a zo bet peurreizhet gantañ. Skuizh a-walc'h ez on ha mont a ran da gousket etre merenn hag adverenn.

Goude adverenn e tiskouezont din levr barnadennoù an Eisteddfod e 1966. Bep bloaz e vez embannet, ha pres a vez war an dud d'e bremañ, ar gwener da noz. Tennet o deus kuit ar barzhonegoù evit o mirout priziuz, hag o studiañ e Kêr-h Lenneg Pwllheli. Chom a ra ennañ avat, testennoù ar varmerien war «Awdl» Dic Jones en devoa kemeret al lesanv «Bryn Coed» ha roet evel titl d'e labour «Cynhseaf» am eus meneget dija. Divinet o doa an tri barner e oa bet aozet gant ul labourer-douar. Holl e oant a-du ivez evit lavarout e verite «ar gador, an arc'han hag an enor, ha ne oa ket bet gwelet un oberenn ken talvou-dus pell a oa.»

E-pad koan e komzomp eus an dañjer degaset d'ar vro gant ar Saozon binvidik a fell dezho prenañ tiez, hag eus ar gevredigezh savet gant Dafydd Iwan evit prenañ tiez bihan da Gembreiz yaouank. Hag e konter din an istor-mañ. Izili «Llys yr Ynadon» (Iez ar

Varnerien) a vez dibabet gant ar gurunenn. E Pwllheli e kaver dreist-holl tud eus al Llafur (Labour), kostezenn an Depute Goronwy Roberts a zo war-nes bezañ diska-
ret er votadegoù diwezhañ gant Robin Lewis. Nevez 'zo e oa deuet ar C'hadoriad (prezi-
dant al Lezvarn) d'ar pezh-c'hoari kinniget gant «Cwmni Theatr Cymru» diwar-benn Beca
(2). Strakal a rae kement e zaouarn ma lavaras dezhañ ur beleg anglikan : «Penaos e
c'hellit strakañ an daouarn amañ ha kondaoniñ tud yaouank «Cymdeithas yr Iaith» e
«Llys yr Ynadon» ?

NOTENNOU.

- (1) *Giraldus Cambrensis. Gwelout «Le Pays de Galles», paj. 21, levlennadurezh.,*
(1)
- (1) *Giraldus Cambrensis. Gwelout «Le Pays de Galles», paj. 21, levlennadurezh, p. 198.*
- (2) *Diwar-benn «Beca» pe «Rebecca», lenn «Le Pays de Galles», paj. 53.*
(Notennoù gant A. Kalvez).

MASKL JURIK ER BED ALL

«aner e oa Jurig. Setu perak ne oa ket krog c'hoazh da vrinañ. Penner e oa an douar avat war e vrusk. Mirout a rae outañ da skopañ. Sevel a rae ac'hano e-pad an noz, da anatañ 'leizh e skevent ha da zisammañ e vruched : damvougañ a rae.

Pa voe tavet saraç'h an haleg hag ar siprez, e spurmantis e benn gwenn dindan ar stered e-tal e vez. O tiboultrañ unan eus e vilginoù edo. Amgredik e sellas ouzhin da gentañ evel pa ne anavezfe ket ac'hano. Stardañ din va dorn a rae neuze, lirazhin. Laouen on o welout ez eus unan d'an nebeutañ o kaout soñj ac'hano; kan yan e oa palv e zorn ma redas ur gridienn penn-da-benn va c'horf. Stouñ a rae war an adreñv, steuziet e zramm en deñvalijann. Balbouzat a

rae outañ e-unan, troet etrezek ar stered. Ne gomprens mann ebet. Goude-se e stous e benn, tostaat a rae ouzhin e e ur lavarout : «O klask va linennoù-loc'hiañ amañ.» Selaou a ris gant evezh rak c'hoant bras em boa da zeskñ kevrinoù steredeg mab-den. D'an ampoent e teuas ur barrad-paz ken spontus ma tregernas ar peulioù maen-marbr gantañ. Gant mil boan e tanne e anal ha gwelout a raen e gostezennoù o stegnañ e groc'henn. Ul lamm a ris, hep soñjal, ha goude, ur gammed war-gil. Kregañ a rae em brec'h ha diskouez din gortoz : «Vad a ra din pasaat. Mouget e vezan gant ar c'hoant pasaat a-hed an daou benn-devazh dindan an douar. Ha va zroad ! Pa dro an amzer, em bez ur boan-ufenn spontus. Ar boan-se a lak ac'hano da dreñv ha da zistreiñ kement kan am eus distrujet ar c'hev.» Selaou a raen hep rannañ grik. Gwasket e oa va gouzoug ha ne oan ket gouest da zistardañ va dent. Va sachañ a rae d'e heul evit ur valeadenn-noz. An am boe : dirazon e oa gweledigezhioù iskis, heñvel a-walc'h ouzh skoudoù. Chom a ris a-sav spontet-mik.

«Bez dinec'h, boazañ a ri tamm-ha-tamm da vezañ a-touez an Anaona, amazañ 'da reiñ kalon din. Me avat ne zeven ket a-benn da welout na da glevout an disterañ tra an novezh kentañ. En em stlejañ a raen war-lerc'h ar ra all avat pa vijen bet dall ha bouzar. Gouest on da welout en deñvalijann bremañ, anaout a ran kimiezh an douar. N'eus nemet er bez eo ez on deuet a-benn da gompren Poutchkin.»

Ur skeud a ziskouezas din gant e zorn : «Hemañ a anavezaz ? Da dad eo, ken feukidik ma ne felle ket dezhañ diskenn ur banne din peogwir em boa kavet abeg en e win ruz. Feukat on bet kalz muioc'h eget pa veze tud o reiñ ha va barzhonegoù.»

Nepell diouzhimp e spurmantis ur skeud diflach en e sav. Kemer a rejomp penn un alezic stre ar beziou izel, fozon frondus o kreskiñ warno, ha stouet warno merc'hed yaouank tener :

«Liorzhoù Seurezed ar Garitezh»
«Jurig en ur chom e-sav. «Bennoz e tilouzaouant ar gweleadoù-bleuniou hag a komzant gant ar vugale marvet kent bezañ bet ganet. Sell ! nag e vousec'hoarzhont gant an silvorennoù e zeu ganto.»
Sallout a rae en-dro dezhañ : «N'emañ ket Levenez amañ c'hoazh. A-graiz ha c'halon he doa mousec'hoarzhbet ouzhin p'he devoa va gwelet en novezh kentañ. Va touzaouet he doa ar mare ma oan en ospital, klavh gant an idanijenn-skevent, ha morsa n'ha deus disoñjet ar pazh a gonten dre va ambren : kredih a rae din edon o sonañ ur pladad ragout war-bouez toazennoù hir ; kaer am boa lakeat bec'h ne zeven ket a-benn da sunañ an hilienn. Levenez a zalc'he mat d'am bolenn : he mousec'hoarzh an hini a bareas ac'hano. Nag ur plac'h ! He blev o tiskano e-fuilh betek an douar...
Gwazh-a-se pa n'ac'h eus ket degaset din va gitar.»

En ur vousec'hoarzhin e stous war va zu, hag e stagas da vousekanañ ivouazhiak :

*Gwelloc'h 'vije bet chom hep bevañ,
Gwelloc'h 'vije bet chom hep karout.*

Gouzout a ris neuze edo Jurig e karantez adarre. O lere! un alezioù frondus az eomp e-mask ar beziou. Lakeat a rae Jurig e zorn war va brec'h, ha kregañ, helavar, gant ur brezegen :

«Biskoazh em buhez n'em eus graet ur veaj ken brav evel en deiz m'hoc'h eus va zammet er c'herr-kañv. E-pad ur reuziad n'em boa c'hoant ebet da zigeriñ va daoulagad. Selaou a raen an trouz hec'h a rae ar prehad o kinniget er c'hoad gwerniset. Erruet e-tal an «Totaobirta avat, e savas c'hoant bras emmou da sellout. Bez' e oa an diste o weskah e fri ouzh gwernioù e branestr, en ur sellout gant diwegañs ouzh ar brizharbidoù-se. Ne oa ket dek a dud zoken ouzh

va heul. Hogen pa welas ac'hanoc'h-c'hwj, Gofer, Konkordat ha te — ar pennoù bras, na petra 'ta — e teuas levenez war e zremm. Treiñ a reas ha gervel. Tilka, ar plac'hig dous hag he doa va gourdroutet a-wechoù en abeg d'am farsdennoù gros. Gourc'hemennoù a oa o reiñ dezhi. Keuz bras am boe o soñjal ne vefen ket mui ganeoc'h.

Pa chomas ar c'harr-kañv a-savindan ar c'harrbont, ne c'hellis ket chom hep dirollañ da c'hoarzhin. Bez' e oa ur paotr o kazelliañ e wreg, anezhi ur plac'h kuilh evel ur glujar, hag o kontañ kaozioù flour dezhi. Kejet em boa ganto e straed ar Yuzevien, un deiz ma oant ouzhi en em gannañ didruer; ar gwaz o skeiñ gant e hanter-diegezh, hag hi savet he divrec'h ganti ouzhi e aspediñ da baouez. Droug a oa aet ennon. Ha me da dapout e ziglavier digantañ ha da skeiñ gantañ ur mell taol war e benn. Anaoudegezh vat he devoe-hi ouzhi-me, a gred dit? Huchal a reas: «ne selle ket kement-se ouzhi; ma skoe hi gwaz ganti e oa ar gwir gantañ.»

Hag e fellas dezhi tapout krog en disglavier ha vehiñ he gwaz... Setu perak ne oan ket evit tremen hep c'hoarzhin o welout an daou bried feal-se o vont e-giz daou bichen yaouank war-du an ostaleri e Ti Antonig.

Gant souezh e selaouen fentigelloù Jurig. Hen divinout a reas hag e c'hoarzhas en un doare madelezhus evel ma c'hoarzh un tad.

«Pa vezer en ur bez, ne gemmer ket kalz. Te 'oa o soñjal e lavaren dit kevrinoù bras. Arsa! paotr. Arabat bezañ romantel! Dante a oa evitañ un ifern hag ur baradoc. Disheñvel eo hor bed-ni. Ne valeomp nemet etre eskarn tud voutin, tud eus kêr. Bijkoazh n'em eus kollet va fenn! Gouzout a ouien avat ne oa netra, nemet traoù boutin, er vuhez, traoù lous-tre gwechoù 'zo. Ne laran ket n'eus ket tud amañ a vije bet gouest da lakaat dispac'h er bed: evit an darn vuiañ e weli e oant brein dija pa'z int bet interet.»

Tostaat a rejomp ouzhi ur bez marmor du. Aes, ur souezh, e savas Jurig ar maen diwarnañ, hag an deñvalijenn a ziskouezas din:

«Hennezh n'eus ket anezhañ ken. Breinet eo bet diouzhtu, en novezh kentañ goude ma oa bet siellet ar maen warnañ. E Gortsa e oamp c'hoazh mignoned; goude ar brezel avat, pa — oa deuet da vezañ rener un trust bras ha pa oa bet mouget kriz gantañ daou harz-labour micherourien, n'anavezse mui ac'hanon. Er straed e rae van da chom hep va gwelout. Gwechall e vage menozioù torfedus. E nevez-amzer diwezhañ ar brezel, e pedas ac'hanon d'e di, diouzhan noz; ur gambrig enk en doa en Alez-ar-C'hizhier. Displegañ a reas din e oa e soñj kontammañ kêr-benn an impalaered. Kaoz a oa eus prenañ un ti e rannvro Vienna e-lec'h ma tremene ar c'han-dour pennañ. Kinnig a reas din mont da chom en ti-se ha toullañ ar mell korzenn evit kontammañ an dour gant mikrobed... Er penn-kentañ e oa kollet un tamm e spered gantañ. N'eo nemet ouzhi o welout o chaokat e sigarenn hag o vousec'hoarzhin bamet ma'm boa meizet ne oa ket o farsal. Fidamoustik! En dispac'hoù e vez gwelet tud evel Erostratos o tiwan evel kebell-touseg. Ar preñved ne vezont ket pell goude oc'h ober war o zro.»

Azezañ a reas Jurig war ribl ar bez da ziskuzhañ. Diskouez a reas ur bez a oa dirazañ: «Amañ en em gav ur c'hozhiaid gourvezet ha na oa ar merc'had nemet c'hoarielloù evitañ. Breinañ en deus graet eñ ivez. Seul glañvoc'h e teue da vezañ gant e grin-bev, seul vui e selle gant c'hoantegezh ouzhi ar c'horfoù yaouank. Te 'oar ec'h anavez mat Levenez al loenedigoù doñv ha surer-buhez a vez o lojhañ e mab-den. Nag a amprevaned a bep seurt, dianav er bed-se. E-barzh da vu zoken, paotr!...»

Digeriñ a ris va divskouarn da selaou. Paouez a reas Jurig, klozañ e zaoulagad ha kas ac'hanon e-mesk ar c'hroazioù hag ar peulioù-mein betek ur bez bras. Aze e weli ur skeud o klask mont en e goaez. En em weañ a rae ha bec'hiañ, kan e teue an son en e c'henoù, met a-benn ar fin ne litiñe tamm. Anavezout a ris neuze ar ministr a oa bet un noz-vezh oc'h organdiñ e ti Judid. Gant ar souezh e trois war-du Jurig a oa eno gant ur mousc'hoarzh sioulik war e zremm. Ar ministr a oa bet gwisket ul lost-pij dezhañ; e holl vedalineri-a-enor a oa bat spilhennet war e vruched. Disoñjet o devoa avat, gwiskañ dezhañ e verfoeroù. Mev-dall e oa ar re a oa o tougen e arched, hag ar re a oa tremenet dirazañ da deurel dour benniget warnañ n'o doa ket gwelet kennebeut e oa diarc'hen. Riv en deus bremañ. Karout a rae kuzhat e dreid en e vragoù, met ne zou ket a-benn d'hen ober. Er bed, du-hont, e oa hir e zent; diskouez a rae bezañ leun a dan evit e venozioù: lakaat a rae Marks da vezañ prizet e lez ar rous, hag er hendaegoù-pobl e komze eus gourc'hemennoù Doue. Gant an arc'hant a c'honezas e c'hellas prenañ tachennoù brav hag ardennoù a-zoare.»

Ur pennadig e chomjomp dilever ha difiñv en ur arvestiñ ouzhi ar bez: «N'em bje ket i anavezet, e hiboudis da Jurig a oa o heññ e zivskoaz: «Ur rouler eus an dibab! Ar c'hanouennoù lik a bilije dezhañ ha peañ a rae mat ac'hanon pa ganen unan hennek.»

Bremaik, pa oa deuet din soñj eus Judid, n'em boa ket kredet goullenn digant Jurig hag eñ en devoa kajet ganti amañ. Treiñ avat, e voe ar c'hoant-gouzout. Luc'hañ a reas daoulagad Jurig: Erru e oa skuizh, dianalet, evel peurzstrujet, evel pa vije bet o vevañ a vloavezhioù diwezhañ e-touez an drez. Aet e oa treut he divlez ha melen ha c'broc'hen. Eus he divrec'h hag a ouie briata ken brav, ne choma ken nemet eskern. He divronn a oa heñvel ouzhi rezin sec'h. Liv ar belbi war he dremm, e veze o kantreal o klask n'ouzon ket piv. An tri berad-gwad a chome en hec'h askre, na lezent tamm peoc'h ebet ganti. Un nozvezh a-benn ar fin he doe he gwalc'h. Ober a reas he menoz echuiñ, hag evañ hec'h-ünan an tri berad.»

Dre douez an hentoù-gozez ez ambrougas ac'hanon, krog-mat em brec'h, betek ar bez dilezet e-harz ar voger. Ar goñ pri tanav a zigoras hag e weljomp eskern gwennet ur plac'h bet ken amorous gwechall. Dirak ar bez e paouzas Jurig da farsal. Mont a reas en e goaez, e chik war veilh e zorn, evel ur praderour. Dilavar e chomas, ur pennad hir, he neuze e savas didrouz ha lavarout en ur leuskel un huand: «N'eus nemet ur c'haner a gement a oar chom feal d'ur plac'h. Tout ar re all, bankerien pe c'hourenerien, mavelian pe jeneraled, a zo trubarded.»

A-daol-trumm e tross e imor. Lakaat a reas e vizied da strakal hag hervoz e voaz kozh e tremenas e doare war e zivwez. «Deomp, emezañ, emañ o vont da ziskouez dit an hini a stourm a-enep an diaoul.» Pellaat a rejomp diouzhi ar voger e voger ha mont etrezek kreiz en ur goaez.

«Keneiled-skol e oamp. Ur paotr blev ru a oa anezhañ, ha marellet e zremm gant pikoù panez. Atav e veze gant e gozh levrioù. Da c'houde, e oamp chomet bloavezhioù hep en am welout, hag hen disoñjet em boa. Dre forzh tedek bro, e tegouezhis en ur gêriadenn er menezioù, a-us da draoñienn Duhings. Un aezhenn a c'hwesha a-dreuz ar praelier glas, an oabl a ruzie ar gwez melez, pa chomis a-sav e-harz un dorgenn, da c'houllenn digant ur fetizenn a blac'h o rastellat, piv a oa person ar barrez, hag edo-eñ er gêr — Ya ha nann — emezi en ur c'hoarzhin, hag en ur ziskouez dent ken gwenn ma trois ma fenn war-du enni meur a wech. A-bôan ma oa plas evit an iliz hag ar presbital war an dorgenn, anez dezhañ diwall, e vefe ar beleg e-riski da zifragoellañ en draoñienn, un nozvezh bemak.

Un den bras e oa ar person, frammet-mat, gant un tres nec'hat warnañ. A-bik e oa e vlov rous war e bann e-giz ur broust. E-pad koan e teuas dimp soñj an eil eus egile. Komz a rae poulek, hag a leunie va gwernenn a-zoare, daoust ma ne eue e-unan banne ebet. Diwezhatoc'h en noz em boa kanet evitañ zoken. Ar c'hlaer eo am dibunas antronoz vintin. P'am boa digoret va daoulagad edo an heol o parañ warnon. Imoret-laouen e voen hag e wiskis buan va dilhad ha mont da oferenn ar person. C'hoant em boa un tammig da welout en-dro ar plac'h am boa gwelet en deiz a-raok.

Azezet e oa war ar bank kentañ ha daoust din pasaat ha derc'hel da basaat — paudra da vezañ klevet gant an holl — ne deuzvezas ket treiñ he fenn. N'am boa ket taolet evañ zoken e oa bat echuat an oferenn gant ar gorreoù; krog a oa an dud da vont er-maez tra ma chome ar person e-kichen an soter da sellout pizh ouzhi ar voger evel pa vije bet unan bennak diwelus dirazañ. Gouezet em eus diwezhatoc'h e oa boas e barrezianiz ouzhi e zoare da oferennañ. E-kerz lein, e c'houllenn digantañ perak e chome a-sav gant ar gorreoù. Sirius-mourbet ec'h anavez ouzhi e teue bopred an diaoul dirazañ en ur ober orbidoù evit mirout outañ da gomuniañ. Lavarout a reas ivez e oa bet e darempred gant meur a sant, hag e oa an diaoul bremañ ouzhi e heskinañ. Graet en doa e venoz d'e argas dirak an soter evit glesaat an iliz hag evit gellout komuniañ adarre. Hentiñ a ris dezhañ ar c'hras da goañv en disamm eus an diaoul, ha karkant ha me vev leunie va boutailh e tiskennis etrezek ar Stankann Du. N'em boa ket netra ken diwar e benn, na pensos en devoa argaset an diaouloù ha netra ken all... betek ma voe anvet da berenn e kêr. Aet e oa treut evel ur gioc'h. Touet en devoa ar paourkazh ne zouje ket dezhañ mervel kent ha n'en dije argaset Poulig korrek.

Ha ne varvas ket. Bemnoz e vez ouzhi e viligañ; ne laz tamm diskuiz ebet gant ar chalonied ha gant an eskibien. Argas a ra ar sakristed zoken eus o beziou. Lavarout a ra e flastro an diaoul dindan relegoù an iliz santal, pa n'eus ket gallet hen ober en ur c'horf bev.»

... Beuzet e voemp en ur c'harnadeg spontus pa dostajomp ouzhi ar venec'h hag ar veleien. Stelioù ru-zakarlek, soutennoù du uzet, kougouliou menec'h; holl e oant o tabutañ. E penn uhelañ ar vlog-kañv edo ar Beleg Rous o tiptlegañ en doa an diaoul dija lakaet ar Pab Gregor da gwezhall en tempadur. Ruet en devoa hemañ un tamm eus e vili da Satanaz. Sant Frañsez Asiri e-unan han gwelas en e iliz; en em ziskouez a rae dezhañ an e benit ha klask e lubaniñ. Ezaet en doa ar sant e voutañ er-maez eus e iliz dre forzh oberiñ a-ganterez ha forzh oberiñ a-binienn.

«Bodet en devoa e vreudeur all da ekaerzañ an diaoul, holl a-gwrst, met an amez. Ar Pab Inozant han kadorioz gant lidnoù bras e-karz Sened al Latran. Luter a vennas lakaet e dal korrek da blagañ met ne voe ket eus mirout outañ da vont e-barzh an iliz Disidoud. Ignas e Loloia a stourmas rouz-deiz e enep dezhañ kent annez e kalle e ban. Gwidreuz

a implijas e-unan evit brasañ gloar an Aotrou Doue hag ar Bab. Kemenn a reas ar Jezuzisted, e Sened Trent, e lakajent anezhañ e servij an Aotrou Doue...»

Troc'het krenn e voe e gaos dezhañ gant ur bolomig ha n'hellis ket anavezout. Sevel a rae e veilh-dorn askornek en ur huchal gant ar gonnar : «An dezenn, an antitezenna! An Iliz an hini he deus krouet an diaoul, an Iliz an hini hen distrujo!» Risignal a rae ar veleien gant cholori bras, ha ne zeuas ket ar Beleg-Bras a-benn da huchal kreñvoc'h egeto. Jurig a hiboudas din : «Taget e vez an Disivouderien bremañ gant Mefisto; gwelout a ri avat, e tago ar chalonied hep dale; kement ha ken bihan a gonto dezho, ken e teuint da steuziañ. Bemdeiz e teu da gemer perzh en zabatou; donet a ray e-benn ivez da serriñ o beg dezho!»

Ograouer Sant Klodowig a dostaas en ur dorodellin. C'hoarzhin a rae ken e heje e vouchig... «Ar... cir... circuitus mysticus».

Risignal a rae Jurig sioulk hag en o selaou an tabutoù birvidik. A-gostez un tammig dindan an hafegane e spurmantis ur c'hoziad prederiet-don, e varvann gweet en-dro d'e zivesker. Hen diskouez a ris da Jurig a zispiegas din a-vouezh-izel : «Blaznik kozh an hini eo, ar savor almañegoù brudet; emañ o sevel un daolenn-blanedenn vras evit pobl Slovenia.»

Edo ar skeudoù ouzh en em strollañ en-dro d'ar Beleg Rous, o pignat war ar bazioù da gemer perzh gwelloc'h a-se en tabut. Skarañ kuit a rejomp, Jurig ha me, ha mont etrezek ar Groaz ma kleved kanaouennoù bugale a tuñt diwar he zro. Dav e voe dimp chom a-sav alies rak mouget e veze Jurig gant ar barradoù-paz.

Un engroez a oa en-dro d'ar groaz. Mouezhioù c'hwek ha sklaer ar vugale a richane e-touez annezidi askornek ar bazioù. En o c'hreiz e oa ur mestr-skol war an oad a save e zivrec'h, o klask tennañ eus al laz-kanañ an tonioù flourañ. Gant ar c'hoant-gouzout e ris ur gammed wat-raok, met trumm e tavas pep tra, ha ne c'hoas adgwiliout an arvest nemet pa voe errest Jurig, dianalet; rebech a reas din bezañ pellae dioutañ. «Ur gouel emeur o kempenn, emezhañ a-dreñv din. «Lid-efvor ar soudard dizanav an hini eo. Dihunet eo bet an holl lazioù-kanañ; an den hag a zo o vleniañ laz-kanañ ar vugale, e zo gouvezet emañ abaoe kant hanter-kant vloaz. E-pad mizvezhioù ha mizvezhioù ez eus bet furchet an holl vezioù da strolleñ ar soudarded kozh hag ar bomperien, Breuriezhoù ar Verc'hez hag ar C'hourenerien, ar merc'hed gwisket e-giz ar vro ha sonerien an Orfeon. Ne vank nemet ar Soudard Dizanav; hennezh emeur ouzh e glask e pep lec'h. Kouviat e oan bet, me ivez; nac'het em eus avat, war zigarez ne oa ket va gitar ganin. Dibabet o deus memes tra ar ganaouenn bet savet ganin hervez Fleichmann.»

*Nijal a rae ul labousig bihan,
El liorz e kouezhas
Torret gantañ e askellig,
Ne c'hallas ket nijal kuit
Torret e oa e askellig,
O, ya, torret e oa.»*

Hejañ e benn a reas Jurig, dispiljet an tamm anezhañ. En-dro deomp edo pep tra oc'h advevañ. Nerzhik e valec ar bomperien hag ar c'hourenerien, c'hwizhet o brusik ganto. An dud gwisket e-giz ar vro a oa o kempenn plasenn ar gouel. Blensierien al lazioù-kanañ a rede war-lerc'h o c'henerien. Bez' e oa ur c'hoarier o teskih penaos komz evel an deourvezhieren. Edo ar gelaouennerien o kener notennoù.

Petrika a dostaas neuze ouzh Jurig da glevout e soñj digantañ. Jurig a lakas e viz war e ziwuez, farsal a reas : «Am-part-tre ez out, paotr; me avat a zo bet ganet dindan Steredeg ar Burutellat.» Chom a rejomp da c'hoarzhin, en hor c'hoazez dindan ar gwiz-siprez. Arvestiñ a raomp ouzh fourgas al lidoù-se. «Er bed-mañ emeur aoc'h eget ar bed all. Eno e velen diarc'hant bepred...» A-boan m'en devoa c'hoarzh, ma oa adarre o passat. Pa ganen em beze peadra da vevañ. Te 'oar, atav em eus kaset ar baourentez, hag a-wechoù e velen treshalet da vat pa welen Spada o c'hoari e babor gant e arc'hant hag o tegeriñ e yalc'h gant forc'h. Pegen mat e renke e vilhodoù dek, kant ha mil dinar, hag e bezhioù-aour, hag e bezhioù-arc'hant! Er mare-se e ouien talvoudegezh an arc'hant, met re ziwizhet e oa. Ar sokialourien vudet a ouie «Ar c'hevafas dindan efvor, a oa ganto — hen marzet mat em boa — kenedennoù e labouradegoù 'zo ha krignet a raent gopr ar vicherourien. Daoust ha n'eo ket bet marzet a-benn ar fin gant an Iliz na grad an dud e vertuz ebet, hag ar baourentez zoken, mar deo ur paour-kaezh den distro so a vez ouzh o c'helenn? Diarc'hant er bed m'emaout o vevañ, paotr, n'out netra nemet an hini diwezhañ e pep lec'h. Emañ n'ac'h eus ket ezhonm da furchal ez chakodoù... Evit perzh e sell ouzbin, e oan boas met bez' ar eus bed hag a devez poan o vouzañ ouzh kement-se.»

En deiz all, e oa bet douaret du-hont ur vaouez, bilhedoù mil dinar dezhi, gwriet e gouredoù he brozh. En nozvezh kentañ ez int bet krignet gant ar razhed... Smeraz gozh an devoa degaset pezhioù-aour a-vozadoù. En ur selaou anezhe e oas gouest da gompren peseurt kenwerzh eo ar vuhez. Piskur bras, pinvidikañ ha devoat den Trenovo, ne fellas ket dezhañ e vefe lakaet tachou nevez da serriñ arched e vab. Reoù gozh a oa bet o kerc'hat er c'hriegoù war an digarez ma vefent gwelloc'h... Ha koulskoude n'eus kaoz emañ nemet eus tudigoù. Ret e vefe dit klevout ar c'hevriñoù diskuilhet gant ar breizherien vras lurioù sterling; gouzout a oufes neuze pegement a vez krabanaset gant ar bleustrerien-yarc'hadoù, ha diwar peseurt had e tiwan ar gonid. Pep tra a zo mat dezho, ar santelezh kerkoulz hag al lastez. N'eus nemet bremañ a gement e komprenn perak ez eo ar gwad an dra varc'hadmetañ.

En hor meskoù-ni emañ, ne deo ar c'hoantegzh nemet un efvoren. Aour ha diamantoù 'zo laizh ar bolzioù-kall... evel lastez. Den ne daol evezh outo. Tud 'zo evel just hag o deus beziou frankoc'h eget an dud all, met emañ ne vern : emañ e c'hell pep hini bale evel ma kar. Diaes eo kredin ne zeuer da vezañ den nemet pa vezer diarc'hant. Bez' hon eus emañ ar sokialourezh arnevesañ. Gwechall e raent goap ac'hanoc'h, pa vezec'h oc'h iriennañ ar «Skajzelj», oc'h ampennañ ar prantad dibar ma vefemp holl kevatal, ha ma ne vefe mui eus ar berc'hentiezh, na zoken eus ar c'hoant-perc'hennañ. Deuet eo da wir bramañ, ha ne oa ket gaou ar ganaouenn.» Glebiañ a reas Jurig e vuzelloù, ha stagañ da skrahañ e vizied evel pa vije bet o seniñ e c'hitar. Ha sioulk, e pleg va skouarn, e kanas :

*Poanioù n'eus ket anezho eno
Na trabasoù, na brezelioù.
Gouvezet eo ar roue 'kichen ar paour-kaezh
Hep bezañ e chal gant netra all
Par d'ar re vras eo ar babored
'Vel-se 'mañ, 'vel-se 'vezo atav.»*

Roz ha bleunioù a skuilhe ur c'hwiz mezevellus; krog e oa an avel da c'hwizhañ adarre, ha gronnet e oamp gant al letar. Ur pistig a santas Jurig en e droad. Stankañ a reas e c'henoù, ha ret e voe din gortoz pell a-barzh kenderc'hel gant hon hent :

«Deomp war-du ar voger, el lec'h ma n'eus ket a lusenn, emezhañ, az an da ziskouez dit hor skeudennadur neme-tañ.»

A-greiz mont e teuas ur mousc'hoarzh fallak war e zremm. Tizhout a rejomp ur c'horn talval etre mogerioù gleb. Harp outo e oa astannet ur regennad hir a dud, a relegennoù-eskern, kroaziet o divrec'h ha reudet hizied o zreid. Skrijañ a ris, ken spontus ha ma oa an didrouz yan-skas. Anaout a ris un toullad anezho, a veze gwechall o vale e penn an dibunadegoù. Lod a oa hiroc'h, lod a oa berroc'h, distag mui pe vu o eskaro. Astannet e oant, diflech, badet evel falc'herien e-harz ar bernioù-foenn, war-lerc'h al labour start :

«N'eus ket kalz a dud emañ hag a ve gouest da chom en o sav; an holl a dec'h alemañ, n'ouzon ket pe dre zoujañ eo pe dre aon. Hennezh war an tu kleiz a zo marvet gant an dourgoellev, emañ gant klehved-ar-ukr; hini ebet na voe lazhet gant ur hold.»

«Met, bez' ez eus darn hag a zo gwad c'hoazh war o daouarn, emev e klammenn an ur dreñv war-zo emañ evit kaout ur respont. Ur filh na reas ken e zorn.»

«Ken alies e vez skuilhet gwad evit eürusted ar babl.» Ha dija e sach e'hanon kuit war-houez va milgin en ur c'hogal.

E-touez ar relegennoù-eskern e oa ur plac'hig brek dindan ur ouel gailhetez. Ur gridenn a redas em c'herc'hen. Fromet ha seizet gant ar spouron e oan : div zremm ha devoa. Santout a raen evel un dra bennak o tignenn em c'heviz hag o lezel war e lerc'h ur goull poanous. Kilañ a felle din, met ne oan ket gouest da filhval. Mouszh Jurig e gleviz : seblantout a rae dont eus pell-pell.

«Evelkent! Lavaret em boa dit en a-raok ne oa nemet ur skeudenn. Ur plac'hig kaout div zremm dezhi, Frankiz ha Justis. En em garout a raent kement, ken e varjont a-greter.» — «N'out ket mat da zont an hon touez, emezhañ c'hoazh en ur c'hoarzhin, oc'h ober gomp ouzbin dre ma palloemp diouzh ur c'horn talval.»

«Ha petra a rafas, ma ouzfas pet ha pet eus poanioù hag anezhoù-mañ-dan a zo bet marzet gant an dour-mañ?» A-greiz-holl e troas Jurig diwar an alezig ha bale war ar gaot; poan em boa ouzh o hauliañ. Da bep kammad e voe dav din diwall da gouezhañ ar bazioù don digor-bras : «A-us d'ar c'hevriñ-beziañ emomp bremañ, emezhañ en ur

chom a-sav. «Kleuz eo an dachenn-mañ evel pa vije bet turiet da vat gant gozed. N'eus amañ nemet anaoñ enkrezet.» Edomp en deñvalijenn dindan ar gwez-siprez. Du-hont war an tu kleiz e oa skeudoù o ranellat. Klevout a raed o diviz entanet eus al lec'h m'edomp :

«Du-hont ez eus ur vreutadeg peurbad diwar-benn an doare-skrivañ.» eme Jurig. «Pa vezan enoet ez an me ivez da vreaata. Tabut a zo etre ar ouiziepen abeg da c'herioù 'zqha d'ar poentadur. Bloavezhioù e pad ar rendaeloù-se ; n'eus ket a vall warno.»

D'an ampoent e klevjomp fraezh : «En noazh ez on bet ganet, hag en noazh ez in.» «Añ, ya ! eme Jurig, en ur c'hoarzhin, un dra bennak o deus a-enep Pohlin*» mar hen lakaont da fuloriñ e skolio ouzh ar groaz gant e zorn eskornek, hag e raio van da vezañ bouzar.»

Kounaat a reas Jurig un dra bennak a reas dezhañ mouse'hoarzhin :

«Gwechall e vevemp mat, zoken er bed all. Dreist-holl d'ar mare m'edon o labourat en ur burav-implij, er burev a zo e C'hradiñe hag a sko war-eeun war ar straed. Eno e roen labour d'an dud. En em c'houlennet am eus bapred, hep kavout respont ebet, perak e oa kement a chal warno da gaout labour. A-wechoù, pa vezen chomet diwezhat en noz o kanañ, e vesken pap tra antronoz. Soñj am eus bezañ lakaet ur wech ur geginerez koant da sekretourez e ti un alvokad, hag ur mekaniker arbennikaet da vestr-kaginer e ti un eskob. An dud ne glemment ket, ha ne raemp-ni nemet c'hoarzhin. Kaset e oan bet neuze da gazern Sant-Pêr, da di ar re vac'hagnet. Eno e veze graet war-dro ar c'horfoù goude ar Brezel Bras.»

Kuitaat a rejomp teñvalijenn ar siprez ha kerzhout war ar geot ; ar glizh a santen dindan va zraid. «Amañ ez adkavan ur bern traoù eus ar prantad-se. Evel ma weli, ez eo bet tennet digant lod o falsizili ; ha lezet gant lod all. Marc'hadourezh mat, labour kompenn hag a-zoare.» En em gaout a raemp gant tud iskis. Hemañ a lakae e c'hlin dir da wigourat ; hennazh a bourgempenne eskern e zivhar gant e vizied nikel. En ur bez e welis relegoù un den : ur c'horf-kenn-houarn evit e gostazennoù hag ur gorzenn-gaoutchoug ma tenne e anal drezi gwechall, ar peurrest a oa bet kuzumet gant an douar.

«Pemp bloavezh buhez en devoas gonezet evel-se», eme Jurig, «kent echuiñ dindan un disac'hadenn, e Doberdob... An hini harpet ouzh ar groaz-koad a oa bet startaat e c'houzoug gant neudennoù sour evit ma c'hellje treiñ e benn. Gloazet e oa bet a-kichen Nadvorna.»

Va c'halon a grogas da frailhañ. Ne selouen nemet an hanter eus ar pezh a lavare Jurig. «Tu a a oa bet da renkañ pep tra», emezañ, «nemet an daoulagad.»

Ur relegenn-eskern a spurmantis, korzennoù-dizourañ souezhus en he c'hof. «Sell, eme Jurig c'hoazh, bouzellou adarre.» En ur haugin e c'houlennis : «Daoust ha ne sant an dud netra ? » Souezhat bras e sellas ouzhin : «Perak ? Ar re sentusañ ez int. Soñj o deus c'hoazh un tammig penaos e oant bet save- teet ; idioñjet o deus ar peurrest. Na pet kanaouenn o deus bet desket ganin e-keit na ma vezent o c'hortoz o falsizili e kazern Sant-Pêr. Ur bloavezh a-bezh em boa labourer eno ; bountet e oan bet er-maez gantañ goude-se.»

Tevl a reas Jurig ; diase e oa gant en av'enn dispiljus. Ur pennadig goude e vouse'hoarzh he menoz kuzh ebet. «Amañ emañ astennet an holl re a zo bet o vrezeliñ e pep korn eus ar bed evit an holl impalaerien, Distrujet e vez bremañ ar bezioù a zo bet o vrezeliñ enno tud Andrejka, re vrezel Mec'hiko, ar baotred bet o stourm dindan urzhioù Zulaj ha Radecki, du-hont e Bro-Busia...»

Jurig a chomas a-sav dirak ur bez e oa bet digoret an douar anezhañ ; hag e tiskouezas din daou askornig dister : «Dal, setu relegoù diwezhañ ar Soudard Dizanav. Pell amzer on bet ouzh e glask ha deuet on a-benn d'e gavout. Hennañ, kludet war ur pezh-kanol, e Stifferino, a gane evit ar re all... An all a vank dezhañ un troad, egile e ziv vrec'h...»

C'hoarzhin a reas Jurig adarre 'reizh e c'henoù : «Te'oar ; tuchantik em eus lavaret nann da Betrika a-zivout ar Soudard Dizanav. N'en deus nemet klask !»

C'hoant spontus am boe da dec'hout ac'hane ; met mont a-eis da haul Jurig a stous «greiz-holl, a splujas, e dreid a-raok, hag a stousias dindan an douar. Lammet krahv a reas va c'halon pa stagis da ziskenn war e lerc'h. Pegañ a reas ar pri ouzh va danarn, tra ma klasken va hent dre un toull strizh. Prest e oan da vougañ. En-dro din e kleved trou-

* Unan eus ar yezhonourien slovenet kantañ.

zioù iskis. Bep an amzer e fiñve ar pri. Gourlammat a ris trumm pa santis dindan va bizied ur vuzhugenn hir ha lontek. Ne ouien ket e oa Jurig amañ ganin nemet dre an trouz a reas. Stouet e oa hag edo adarre o vouse'hoarzhin : «Ar re-mañ o deus tremenet o búhez en toullou-bac'h, ha ken boazet ez int ken ne deont morse er-maez ac'halenn. Chom a reont da skoachañ e don o foullou ha neuze fistilhat. E frankiz mab-den o deus kredet gwechall, ha klasket o deus cheñch penn d'ar vuhez. Bremañ avat e laront ne c'heller kaout kredenn nemet pa vezer dindan an douar. Hag e vez a-wechoù boudoù laouen war an douar !»

Pa voe an em c'hraet va daoulagad diouzh an deñvalijenn fetis, e spurmantis en-dro din en douar, ur seurt tud heñvel a-walc'h ouzh preñved. Koll a ris neuze va anaoudegezh. Hafvalout a raed din edon o kouezhañ, dre va humvre, en ul lec'h pell ; ur boan griz a santen em fenn ; ne oan gouest da fiñval na gar, na brec'h. A bep tu e tisac'he an douar, en ur vaskañ war va divlezh ha war va bruched ; e-pad ur pennad e klaskis huchal : an douar a leunias eus an toullou ma-zevelluse : «Perak e felle dit dont d'am heul dindan an douar pa n'out ket evit gouzav kement-se ? N'eus nemet tud seder amañ.»

Badaouet ha trefuet da vat e straboten war-lerc'h Jurig a ziskoueze din ar re a oa en-dro dimp, an ur vouse'hoarzhin splann :

«Unan eus va mignoned vat e oa hennazh. E anavezet em eus pa oan en ospital. Degaset e oa bet diwar ar straed, gant e gof toullat. A-ratozh-kaer e veze louzaouet ar gorrekañ ar gwellañ gant Levenez evit na vije ket kaset re abrad d'an toull-bac'h. Ur saliad tud eus e zoare a oa en ospital ; na farset hon eus gant se ! Soñj o deus c'hoazh eus kanaouenn ar brizonidi am boe savet evito :

Ne glevet ket o kantreal

Tra-war-dro d'an ti :

Ar fiked eo sur !

Spontet e voen gant kanaouenn Jurig er foz c'hleb, ken e oa ur c'hwezenn yen warnon. Na oan ket evit tac'hout ; dav e voe din en em stlejañ war e lerc'h ha selou e vouezh drant : «Ar pantr yenuank-mañ a anavezant abaoe e yaouankiz. E vamm hen ganas en toull-bac'h, hag a varvas eno. D'e driwezh vloaz, e voe kaset d'an toull, ur bourvezh bennak, hag eno e kavas e varv eñ ivez.»

Chom a reas a-sav en un trapas ac'honoc'h ha sellout ouzhin die'hoarzh : «Hep ur garantez vras pa ur gasoni vras, n'eus ket a vuhez wirion.» Sellout a ris en-dro din ha meur a zremm a anavezis er skarroù. Didrouz ha difiñv e oa gouzvezet ar varzhed o doa bet kement a ziaesterioù war an douar, en abeg d'o feiz diañj er gened. Dremmoù splann ha kaer, iv ar peoc'h warno, ha klopannoù krignet a welis. Takennoù douar-c'hwez strinkennet war o divoc'h, kreizhennoù, gloazioù en o bruched, hag o diweuz staenet gant an die'hoarzh : «Kizidik e oa o c'halonou ouzh ar wirionez, hag alies en em zifretet en o reuzdegezh ; evel-se ec'h anavezant dia ar poullou-bez war an douar. Bremañ emaint gouzvezet a-gevret hag e selouont gant evezh ouzh an amzer o vont e-biou hag e tic'blac'baront an douara, a zisplege Jurig a-vouezh-izel. Izaloc'h c'hoazh e c'houlennas diganin er wech-se : «Anaoz a reas hemañ ? Pa oa bet degaset e oa ludo en e vruched e-lec'h ur galon. Hag hennañ, kollet e skiant-vat gantañ en abeg da dailloù ganas mab-den ? Amañ hep ken ez eo deuet e-barzh. Hogen bevec ma vez komzet diwar e benn, er bed all, e tifret amañ gant ar benn. Lavaret a ra e sant en e ziabarzh an anken spontus...» Darbet e voe din semplañ. D'an ampoent avat, en em gavjomp adarre dindan ar stred, hep gouzout din penaos. Distanet e voe d'am fenn gant an aval yen. Skulzh e selante Jurig bezañ ivez. Huanadiñ a reas. A-greiz-holl, en ur vouse'hoarzhin, e stagas da ganañ, gant ur vouezh c'hwak ha tener, diskan ar ganaouenn a blije dezhañ :

Torret e oa e askellig.

Torret e oa.

«Aze ez on kustum da azezañ pa vezan skulzh o vales, eme Jurig en ur ziskouez din ar bank e-kichen ar voger. Stad e oa annon ouzh e glevout a-nevez hag o welout e benn gwenn.»

Chom a reas a-sav, lizhin, dirak ur bank e oa azezet warnañ ur plac'h yaouank gwaket gant ur sae du, hag ur mouchouer gwenn war he fenn. Ne oa ket bet bouc'het he maez kaer gant an douar : «Levenez ! », a hiboudas Jurig, «vouezh-izel, ha fromet-holl — heñvkat tr» ec'h azezas en he c'hichen. Sellout a reas hi outañ gant he denvidiged teñval : «Jurig !». Stralulhet e voe Jurig hag e fiñvas e zraouen an douar dizampert : «Na breu en ! Perak ne deo ket d'e welout ? e azezi, hiraezhus he mouezh. Jurig a blegas e benn hep rannañ grik. Mouse'hoarzhin, en douar

dezañ : «Promet din ez i d'e welout. M'ar 'hanouenn a gani dezañ», emezi.

Sevel a reas e benn neuze hag e selaou anezhi gant ur mouc'hoarzh-bugel : «N'ouzout ket, emezi, pegen brav eo dezañ bremañ ; soñjal a ra en e vevadur n'eus ket pell e lavare din e felle dezañ trec'hiñ war ar marv da grat war an tevenn da saludiñ diwar al laez anezhañ ar sav-heol. En traoñiennoù ne c'helle ket tennañ e anal. A ! pegen brav eo dezañ, ha pegen eürus ez eo !» Jurig ne flache ket, ken aketus e oa da selaou ar pezh a lavare-hi. A-benn ur reuziadig, e krogas da gomz fonnus. En ur voutc'hoarzhin e selaoue Levenez anezhañ ; hag eñ a gomze dibaouez : «Biskoazh n'on bet eürus na gwalleürus, aliesoc'h on bet drant eget n'on bet trist. Er skol e vezemp lakaet ar c'horn da bep kentel war-bouez nebeut, Barbka ha me, peogwir e vezemp dizaban o c'hoarzhin. P'am beze ezhomm a arc'hant evit an arnoddennoù, ez aen da C'horista da labourat evel sekretour-abiennet ; evit gwir, ne oan ket gwall-varrek war ar vicher-se ; gwelloc'h e kaven kanañ, ha dreist da bep tra. Pa zeuen en-dro eus Tomaj diouzh ar beure — merc'hed koant a oa eno — ha pa sanke va daoudroad en dour ruz, etre ar gwini e bleuñv, ne baouezen ket da ganañ, tra ma c'hwezhe sioulik an aezhenn diwar du ar mor. Dizoloet o devoa neuze pegen donezonet e oan evel kaner. Alvoakeded yaouank ha barnerien, e vab en o zouez. Bemnoz e teuent d'am c'herc'hat ; va c'has a raent gant o c'harr-tan da Steverjan, gwechoù 'zo, da Renie gwechoù all, d'ar gwiniegoù ma veze graet gwin mat. Mont a raen an nozvezhioù e-biou evel pa vije bet an amzer o teuziñ. E Aober e oa un ostaleri diganvez. Pa veze tomm a-walc'h an noz, e chomemp dindan ar gwiniennoù da c'hortoz tarzh an deiz. Merc'hed an tavarnour a c'hwirine evel kezekenned stag er marchosi. Darlipat a raemp silzigennoù poazhet er gwin. Ken birvidik e kanemp ken na dorre kerdin ar gitar. Eh a damalle din bezañ kollet e vab. Met ne oa ket gwir kement-se. Me an hini a oa bet kollet gantañ, ken am boa kemeret ar pleg da ganañ en tavarnioù. E-pad ar Brezel Bras, a ris tro an holl ospitalioù e Bro-Hungaria, e Bro-Vukovina, e Bro-Roumania, e Bro-Vohemia. Kement a gansouennoù a zekis ma vne vanke hini abet din evit ar c'hañv, nag evit an degouezhioù eürus. E burey an implijoù e oan bet goude, ha goude-se e kazarn Sant-Pêr. Ober a reas din neuze paeañ dizurzhioù e vab, en em veñjiñ a reas warnon. Disohjet en dous pep tra bremañ. Azezet omp bet meur e wech endev war ar bank-mañ, evel pa ne vije bet netra ebet. Galloudus e oa gwechall ; mestri e oa war buhezioù an dud. Kouezhet eo bremañ ; n'ous ket pell e fare din n'en doa ket komprenet ar bad. Goude m'en devoa va c'haset d'ar bas, ne c'helljen mui bevañ nemet a zeiz da zeiz. Karer e oan gant va mignonad, met en ostalerioù hepken. A-barzh ar fin, ne ouezis mui tevel hag e tec'hjont diouzhin. Pa'z aen d'o gwelout, o devoe an disamm ac'hanon dre ginnig din silovits. N'eo ket boeson avat an hini a vezen o klask. Anaout a raen an holl hag e ouien kalz a draoù. Re zuken. Kerkent ha ma veze va gitar etre va daouarn, e tisoñjen pep tra. Aon am-boa bepred rak ar marv. Dreist-holl goude bezañ komzet gant Cofer. Bremañ avat, am befe oan kentoc'h da vezañ kaset en-dro d'ar bed all.»

Mouc'hoarzhin a ras daoulegad Jurig tra ma selle ouzh Levenez. Ur ganaouenn a zifluka eus e vruched :

Gwelloc'h 'vije bet chom hep bevañ
Gwelloc'h 'vije bet chom hep karout
Chom hep da anavezout
Penaos 'ta e tisoñjin ac'hanout ?

Selaou a ras Levenez esmaet, he fenn etre he daouarn. Pa voe echu e pedas anezhañ a-vouezh-izel : «Kan 'ta evitañ ivez, ur wech bennak, Jurig, a Stouñ a reas Jurig e benn a-nevez ha tevel. Prederiet-holl e lavaras c'hoazh Levenez izeloc'h :

«Jurig, deus d'am gwelout alies. A-benn nebeut amañ, ne vin ket gouest ken da sevel. Ta 'oar, ar wezenn-vezv hag a gresk war ma bez, a viro ouzhin. Ne rin nemet selaou neuze. Brav eo an amzer diouzh ar beure pa fistilh ur c'houblad tintered war ar gerzenn japanata.

Jurig a sevas e benn ha selout dirazañ, humvraüs. Skuizh ha moue e oa e vouezh : «Bez' am eus c'hoazh da gerzhout pell. Kaout a rin hir an amzer.»

Steuzañ a reas Levenez neuze. Gwelet e voe he blev hir ha fuilh o wagenniñ e-us d'an ilioù. War va zu e stouas Jurig :

Gwelloc'h 'vije bet chom hep he c'harout
Gwelloc'h 'vije bet chom hep hec'h anavezout
Penaos 'ta e tisoñjin ac'hanout ?

Tevl a reas ar ganaouenn : «Deus c'hoazh ha degas da c'hitar evit na velen ket enoet. Aet eo bremañ da selaou an tinter a zo o vont da ganañ evit e bar ez.

Un damskleur a roudennas en oabl. Treiñ a ris. Va-unan-penn edon. En ul lec'h bennak, du-hont, e klevis al laboused o tihuniñ. Pa zivatis, e oa beuzet ar beziou gant ar gouloù hag e kane an tinter a-zevri. Ne ouezis ket neuze hag-eñ ez eo er bed-mañ pe er bed all eo am-boa bet ar weledigezh eus Jurig. Kuit e oa aet ar c'haner.

der hag ar Garantez.

paj. 20 bis

(1) *La Partie et le Tout*, Albin Michel.

(2) *La Course à la Mort*, mouladur Le Seul.

(3) Aliañ a ran al lenneien da bremañ levr Ivan Illich, anvet «*Retrieving Society*», da lavarout eo «binvioù nevez evit ar gevredigezh», m'eo embannet ar stumm kentañ anezhañ er gelaouenn *Esprit* (meurzh 1972).

Soaz an Ilie

keginerezh

Soubenn ar c'hranked bihan

Un toullad kranked bihan zo bet pesketaet gant an dud en dou. Grit soubenn gante.

En ur bodez da vont war an tan lakaet ar c'hranked, div werennad gwin gwenn, ognon, karotez, tin, lore, persilh, holen ha pebr ha dour evel just. Poazhañ ha lezel da yenañ.

Dibab kig ar c'hranked, e flastrañ ha meskañ gant ar soubenn bet silet.

Adtommañ ha trempañ gant bara (grihet ma kerer).

Keusturenn lapin gant pruneo.

1 lapin
1 werennad gwin ruz
karotez, ognon, chalotez
tin, lore, persilh
pruneoz (kement ha ma kerer)
un tamm amann

Rouzañ an tammoù kig en amann. Ober ur «rouz» gant bleud ha dour (gwelloc'h gant bouilhofs). Holen, pebr, gwin hag an traoù all.

Poazhañ goustad. Un hanter-our a-raok servijiñ lakaat ar pruneoz er pod. Servijiñ tomm gant avaloù-dour da heul.

Skorn gant chokolad

1/2 litrad laesh
2 loiad vras kakao
3 melen vi
1 podad koaven
sukr

Lakaat al laesh da virviñ gant div loiad kakao hag ar chokolad.

Meskañ ar melen vi hag ar sukri gant ur mesker betek ma teuo eonek.

Lakaat war un tan izel ha meskañ hep ehan betek ma teuo tev.

Arabat lezel da virviñ.

Meskañ koaven ar pod bihan gant ur mesker hag e lakaat e-touez ar c'hoaven all.

Lakaat er yeneres.

AN TORT BIHAN

Ur wech e oa, ur wech ne oa hag ur wech e oa bepred... Ur wech eta e oa ur roue hag en doa tri mab hag unan anezhe a oa tort. Ar roue a oa intañv ha setu en un deiz da addimeziñ. A-benn ur pennad e voe lavaret d'ar vugale o'dije ur c'hoar vihan. Ar plac'h kozh a yae da vale ar vugale he doa klevet lavarout ma c'hanje ur c'hoar vihan d'ar baotredigoù, ar re-mañ a vije lazhet. Ur wech e lavaras d'ar vugale : — Prestik, bugale, ho pezo ur breurig pe ur c'hoarig ha war ar pezh am eus klevet, ma vez ur plac'h e vefet lazhet gant ho lezvamm. Aon a grogas er baotred vihan o klevout kemend-all. Met an hini gozh a lavaras ouzhpenn : — Evit gouzout pe baotr pe plac'h e voe, e vo lakaet war wel ouzh ar prenestr bras, ur gontell mar bez ur plac'h, ur c'hoarigell mar bez ur paotr. Bemdez pa zistrofet diouzh ar skol, sellit ervat ouzh ar prenestr ha ma tegouezh ganeoc'h gwelout ur gontell, en anv Doue, tec'hit eus ar c'hastell, hag it kuit da glask ho c'hañs.

Dizale e teuas da wir komzoù an hini gozh. Un deiz o tistreiñ d'ar gêr e weljont gant nec'hamant ur gontell a-istribilh ouzh ar prenestr bras. Spontet hag aon bras cante rak o lezvamm, e troont kein d'ar c'hastell.

Bale a rejont e-pad pell amzer ken na zegouezhjont e-kichen ur c'hastell. Eno oa ur sorsor o chom gant e vamm. Ken skuizh e oant ma c'h antrejont en ti. Ur pikol tantad tan a oa en oaled. Ne oa den war-dro, ha faezh evel ma oant ec'h azezjont e-tal an tan da ziskuihazh ha da dommañ. War an tan e oa ur pod-houarn hag ennañ peadra da zebriñ. A-benn ur pennad e weljont war an daol tri asied hag ur pod-houarn : — Ma tebrfemp, emeze. Hag int da zebriñ rak naon du o doa a-benn neuze. Goude ar pred e teuas c'hoant kousket dezhe. Ha kerkent ur c'houlouenn a ziskouezas dezhe hent ur gamb e-lec'h ma oa tri gwele. Mont a rejont enne hag int diouzhtu da gousket.

An deiz war-lerc'h e weljont c'hoazh ar pezh tantad tan bras ha nikun en e gichen. Lein a oa prest. Pa oant evit mont kuit e weljont ur plac'h kozh hag a lavaras dezhe : — Chomit amañ, bugaligoù. Ar vugale a sentas, rak soñjal a raent anezhe o-unan : Amañ pe e lec'h all : ingal oa dezhe. Amañ da vihanañ e ouient petra o doa. Ar plac'h kozh avat a lavaras dezhe diwall mat ha sarvie an tan, rak neuze e oa ar marv evite ivez.

Ar baotred n'o devoe mann d'ober nemet d'erc'hel an tan e-stad vat. An hini bihanañ, an tort bihan, a veze karget d'e ziwall hag e-keit-se an hini henañ hag egile a yae da chasael d'ar c'hoad. An tort bihan a dremene e amzer o lenn ; o kerc'hat dour hag o tiwall an tan. Ne rae mann all ebet e-pad an deiz.

E-pad pell amzer — chom a rafen da lavarout deoc'h betek warc'hoazh ar beure, e-pad pell amzer eta e voe an traoù evel-se. Un devezh avat, e welas an tort bihan o tont d'ar c'hastell, ur plac'h koant eus ar re goantañ. Lavarout a reas e oa o klask he zri breur, o deus kuitaet, emezi, ti o zad, hag e vije laouen da gavout anezhe. Pa lavaras an tort bihan e oa en unan eus he breudeur, en em vristajont laouen, stad enne. Hogen ma oa stad ennañ o welout ar c'hoar, e vreudeur hag a oa aet da chasael, int marteze ne vije ket kement a stad enne hag en da lavarout d'e c'hoar mont da guzh betek m'en devefe komzet gant e vreudeur.

D'an abardaer e tistrojont d'ar gêr, hag an tort bihan e-pad koan da voulc'hañ kaoz ar c'hoar vihan ha n'anavezent ket c'hoazh.

- Ma, eme an hini bihan, me 'garfe gwelout anezhi. Ha te ? a c'houlennas digant an eil.
- Me ivez, eme an eil.
- Ha te ? a c'houlennas digant ar c'hoshañ.
- Ha, eme hemañ, me a lazhe anezhi.
- A rafes ? eme an daou all, souezhet-mik.
- A, ya ! Lazhañ a rafen anezhi.

— Arsa, petore droug he deus graet dit evit ma lazhes anezhi ?

— Hini ebet. N'eus forzh, ma welan anezhi, he lazhañ a rin.

— Arsa, eme an tort bihan, ur wech c'hoazh — goude kant gwech marteze —, me 'garfe gwelout anezhi. Ha te ? emzañ d'an eil.

— Me ivez, eme an eil.

— Ha te, emezañ d'ar c'hoshañ.

— Ya, emezañ, karout a rafen gwelout anezhi.

Ha neuze en em ziskoachas ar plac'hig hag en em daolas e kerc'henn he breudeur. Adalek neuze en em garent bemdez muioc'h-mui ha n'houlent ket ken kuitaat an eil egile. Ar c'hoar vihan a veze lezet bremañ er gêr d'ober war-dro an ti, hag an tort bihan a c'helle mont ivez da chasael gant e vreudeur. A-raok mont kuit e lavare d'e c'hoar vihan : Diwall mat da lezel an tan da vervel, emezañ.

— N'az pet ket aon, a lavare-hi.

E-pad an deiz, n'he deveze netra d'ober nemet d'erc'hel an tan ha kerc'hat dour d'he breudeur evit en em walc'hiñ diouzh ar beure. A-hend-all e veze o lenn, rak eno e oa ur bern levrioù dudius. Ur wech e lennas kement ma varvas an tan. Pa welas an tan marv, e redas kuit. Kement e rede ma tarbe dezhi kouezhañ da bep kammed. En un hent strizh e welas ur plac'h kozh — mamm ar sorsor an hini a oa —. Homañ o welout dremm' taubuilhet ar plac'hig, a zivasas :

— Lezet ac'h eus an tan da vervel ? a c'houlennas.

— Ya, eme ar plac'hig, gwall-nec'het.

— Dalit an tamm glaouiadenn-mañ ha redit buan d'ar c'hastell, a-raok na vo distro va mab, rak anez da se, ar marv 'zo evidoc'h.

Redek a reas hep distag betek ar c'hastell, bec'h warni, un nebeudig amzer hepken a-raok ar sorsor. Mann ne ouezas an tri baotr. Hogen a-benn ur pennad amzer, o welout o c'hoar o kastizañ hag o vezañ trist e c'houlennjont diganti ha lezet he doa an tan da vervel.

— Nann, a respontas dezhe.

A-benn ar fin an tort bihan nec'het a c'houlennas adarre.

— Arsa, c'hoarig vihan, lezet ac'h eus an tan da vervel ?

— Ya, emezi, en ur zirollañ da ouelañ.

— Na rit ket ken kement all, rak neuze ne welfet ken ac'hanomp biken.

— Ne rin ket eken, eme ar plac'hig.

Ur pennad goude, en em ankounac'haas ar plac'h da lenn c'hoazh, ken n'he devoa ket kerc'het dour evit he breudeur memes. Prim a-raok o distro, ez eas d'ar stank a oa dirak ar c'hastell, d'oust ma oa bet difennet mat dezhi chom hep kemer dour dioutañ.

An deiz war-lerc'h pa savas he breudeur evit mont da chasael, e skuilhas dour war daouarn an hini koshañ evit o gwalc'hiñ. Ha kerkent, en er-maez dre ar siminal. Pa welas an dra-se, e spontas ar plac'h o welout petra he doa graet. Hogen an tri breur a ranke en em heuliañ, hag e rankas ar plac'hig skuilh dour war daouarn an eil ivez. Hag en kuit evel egile dre ar siminal. O welout stad truezus e c'hoar, e lavaras an tort bihan dezhi e c'helle c'hoazh o adkavout ma sentfe outañ.

— N'eus forzh petra a rin evit adkavout ac'hanoc'h, emezi glac'haret.

— Respont d'an neb a gomzo ouzhit «ya», mann all ebet nemet «ya». Klevet mat ac'h eus ?

Ha neuze gant poan-galon e rankas skeiñ dour war daouarn an hini bihanañ hag en er-maez evel ar re all dre ar siminal. Neuze en ur ouelañ, ez eas d'he c'hamb. O sellout er-maez, e welas ur marc'heger o tremen. O tistreiñ eus ar brezel e oa hemañ. O welout ur plac'h ken kaer, e komzas outi.

— Hola ! Dimezell. Brav an amser !

- Ya, emezi, trist a-walc'h.
- Karout a rafen kaout evit gwreg ur plac'h ken kaer ha c'hwi.
- Ya, emezi, tristoc'h c'hoazh.
- Mar kirit, diskennit, ha deuit war va marc'h.
- Ya, emezi.

Aet e oa en dizesper, met prometet he doa lavarout «ya» bepred evit adkavout he breudeur. Hag hi da ziskenn, glac'haret-mik.

Mont a reas gant ar marc'heger da di e vamm hag eno e timezjont. Degouezhout a reas d'ar marc'heger mont d'ar brezel ur wech all c'hoazh. Leun a boan-spered en deveze-efi ivez o welout ar plac'h kaer-se ha ne lavare nemet «ya». Lavarout a rae d'ar wreg ma karfe e c'hellfe koulskoude lavarout gerioù all. 'Iomañ avat, a oa he fenn gant traoù all, ha dreist-holl edo o soñjal penaos e c'hellje dont a-benn da adkavout he breudeur kaer.

Ar wech-mañ avat, ne zistroe ket ar marc'heger eus ar brezel. 'Ya mamm hemañ a soñjas e oa marv. 'Ya neuze ne blijje ket nemet dezhi he merc'h-kaer gant he fenn trist ha ne lavare ouzhpenn nemet «ya». Un deiz graet ganti he soñj, ha droug enni ken e oa, e lavaras d'he mevelien goriñ ar forn evit lakaat anezhi. Ar re-mañ avat, ne felle ket dezhe poazhañ gwreg o mestr hag e rejont an neuz e-pad c'hwec'h miz da c'horin ar forn. Droug a yae avat, muioc'h-mui, er vamm-gaer. Ar vevelien a aspede ar plac'h da gaozeal, pa ouient, emeze, e oa kap da gomz evel an holl. Daoust da se ne lavare bepred nemet «ya».

E-pad an amzer-se, ar brezel a yae en-dro. En em gannañ a rae ar marc'heger a-enep e enebourien. Gantañ en em gavas an tri breur a oa aet ivez d'ar brezel. Degouezhout a rae gante komz alies asambles. Ur wech, ec'h erruas gante ar gaoz war ar plac'h yaouank.

- Bez' em boa ur c'hoar goant, koant eus ar re goantañ, eme an tort bihan.
- Me ivez am eus ur wreg koant ha kaer, eme ar marc'heger, met n'he deus lavaret din biskoazh nemet «ya». Koulskoude on kazi sur eo kap da gomz evel an holl.
- Hor c'hoar eo, eme an tri faotr asambles.

Echu gant ar brezel, pres oa war ar baotred distreiñ da welout o c'hoar evit ar breudeur, hag e wreg evit ar marc'heger. E-pad pell amzer e valejont a-raok erruout el lec'h m'edo ar plac'h o chom. Pan errujont e oa goret ar forn hag e oa ar plac'h o vont da vezañ bountet e-barzh, pa glevas ur mevel o lavarout e oa o paouez antren e porzh ar c'hastell pevar den war varc'h. Neuze e lammas er-maez da welout hag e kouezhas e kerc'henn he fried hag he breudeur.

Pa glevjont petra a oa o vont da c'hoarvezout ganti e rojont urzh da lakaat ar plac'h fall er forn e-lec'h an hini yaouank.

Ma ne oa bet pred ebet a-raok, an taol-mañ avat e voe graet ur friko bras evit an holl.

Dastumet gant V. D.

AR Vombezenn atomek

E-touez an holl zavvoudoù o tegouezhout er bed, n'eo ket aes gouzout en araok pere a zo ganto kaiz a bouez. Dibabet em eus koulskoude, komz diwar-benn ar vombezenn atomek, rak abaoe ur pennad 'zo ne weler nemet-se war ar gazetenn, o vezañ m'emañ ar C'hallaoued o paouez lakaat o hini da darzhañ e Mururoa. Evel just, a-benn ma vo bet resevat ar gelaouenn gant lennerien *Barr-Heol*, e vo tremenet pell 'zo an darzhadenn, hag ankouaet pep tra, kement a gelaier a vez skuilhet war hor penn en amzer a-vremañ. Daoust da se, e fell din lavarout va soñj diwar-benn an afer-se, pa ne vefe nemet evit lakaat al lennerien da zispakañ o hini. Rak n'hell ket an dud a-vremañ chom diseblant dirak seurt darvoud. Evel m'hen displeg ken mat, ar prederour alaman Karl Jaspers en e levr *Die Atombombe*, e pouez an dra-se war spered an dud, diabarzhet ma'z eo bet ganto abaoe tarzhadennoù Nagasaki hag Hiroshima, un anken divent n'hellont ken argas anezhi eus o c'halon. Evel ar c'horioù a-wechall e pazhioù-c'hoari Esc'hulos, e vezer enkrezet-don, dre ma raksanter pebezh trajedienñ a zo ouzh hor gedal. Merzet e vez kement-se dreist-holl war dachenn an arz hag e preder an dud a skiant. Betez ar brezel diwezhañ, e veze gwelet ar Skiant gant ar re-mañ, evel an hent nemetañ war-du an Araokaat. Echu eo gant ar vojenn-se. N'hon eus nemet lenn da skouer *La partie et le tout* (1) e-lec'h ma ro Werner Heisenberg un testeni heverk eus ar spered nevez a zo gant ar skiantourien abaoe Hiroshima, pe c'hoazh levr R. Clark anvet *La Course à la Mort* (2). Bremañ 'zo eizh vloaz 'zo, e oa dicheñset din mont d'ober va zourist e Broioù an Alpoù, hag o vezañ ma n'em boa netra d'ober nemet bale, e oan aet un devezh da welout un diskouezadeg tabezerezh eus Lurçat e kastell Annesi. N'ankouain biken pegen fromet e oan bet gant al livadurioù-se. Lakaat a raent splann dirazomp e peseurt bed diskiant an em gavemp : bed an aon ~~brava~~ bed ar spouron, ur bed e-lec'h m'emañ follentez an den war var da buluc'hañ pep tra. Skoet on bet ivez gant ur film brudet *Hiroshima, mon amour*, bet aozet gant ur breizhad eus Gwened, Alain Resnais, hag a zispak dirak hon daoulagad, gant taolennadurioù skrijus, pegen kriz eo bet, d'ar c'houlz-se, planedenn Japaniz. Met lezomp an traoù-se a-gostez, ha krogomp gant ar gudenn.

AR FEDOU

Afer Mururoa.

Bremañ 'zo un toullad bloavezhioù e teue Tuariki, dileurid tahitian Bro-Bolinazia, da welout ar Jeneral de Gaulle evit lavarout dezhañ e nac'he e vefe dibabet e vro evel lec'h an arnodennoù nukleel. Hogen ne servijas e strivadenn da netra. Eno e voe graet memestra an ensavadurioù atomek. Abaoe neuze e deus kendalc'het dileuridi ar vro — da vihanañ ar re anezho a oa a orin tahitian evel ar c'hannad Francis Sanford hag ar Senadour Pouvanaa Copa — da sevel o mouezh a-enep d'ar raktres-se. Met en aner bep gwech. Setu perak er bloaz-mañ, gant an izelaet hag an digalonekaet ma oant o klask difenn en un doare ken difedus ur vro bell m'eo saotret enni tamm-tamm an aer, al leoned, an dour hag an dud, o deus pedet un nebeut mignoned eus Bro-C'hall da zont d'o skoazellañ. D'an 18 a viz Mezheven 1973, e loc'he kuit en-kuzh un dek bennak a dud, en o zouez politikourien vrudet evel J.J.S.S., kannaded sokialour, evel an Ao. Jocalin, anazhañ ur breizhad, beleien evel an Tad Avriil, an Ao. Toulet, hag ur pastor protestant, Yann-Vari Muller... hep ankouaet an hini anavezetañ anezho-holl : ar Jeneral de la Bollardiére.

Diouzh o zu, gouarnamantoù ar broioù a zo an testañ ouzh Mururoa, e-lec'h ma tlee ar vombezenn tarzhañ, da laret eo, gouarnamantoù Bro-Australia ha Bro-Zeland, o deus kroget gant ur strom diplomatel ha pleustrek. D'an 25, e c'houlenne an Aotrou Kirk, kentañ Ministr Bro-Zeland, digant Pempidour derc'hel kont eus ar varnadenn douget gant Lez-vern DanHaagen a c'hoar-hemenne dezhañ paduz gant an arnodennoù nukleel. E-giz respont, e resavas ul lizher o reiñ dezhañ da c'hoarvezout e oa mannet groll Bro-C'hall da gregiñ gant an tennadegoù ragozet ganti. Neuze, o vezañ ma oa bet kaer da sutal,

e tivize an Aotrou Kirk kas war dachenn an arnodadurioù ar fourgadenn «Otago», warni 250 merdead hag ur ministr, holl bolonterien. Er memes amzer, e rae o mennoz ar Jeneral de la Bollardiére hag un toullad eus e genseurad, merdeñ etrezek Mururoa en ul lestr dre lien anvet «Ar Fri», goude bezañ diskleriet ganto e felle dezho chom war al lec'h evit herzel ouzh an arnodennoù.

N'eo ket echu afer Mururoa d'ober trouz. Savet ez eus bet zoken tabut etre pennoù-bras gouarnamant Bro-C'hall hag an eskibien c'hall a-zivout ar vombezenn atomek (Ret eo anvaz ez eo krog ar re-mañ d'en em zigabestrañ diouzh ar Stad ; gwelet notenn an 13 a viz Ebrel diwezhañ diwar-benn kanwerzh an armoù).

Da zeiz ar «14 juillet», e tispake e soñj en un doare dichek a-walc'h an Amiral Joybert, mestr penn-garter ar Vredeadurezh, war eilvet chadenn ar skinwel gall, en ur dagañ dreist-holl an Aotrou Riobé, eskob Orleañs. Hervezañ, n'o deus ket an dud-a-Iliz d'en em veskañ e seurt kudennoù teknikel, e-lec'h ma n'anavezont netra, dreist-holl p'emañt dindan ur Stad a zo leun a zoujañs ouzh an «fañvadegezhiou speredela». Dre o micher ne zleont ket bountañ o fri er politikerezh ma n'hellont lavarout nemet sotoñioù ha rentañ servij fall d'o bro. Betek-hen n'eus bet nemet ar C'hardinal «jeuist» Danielou, e-touez kargidi an Iliz, evit mont a-du gant seurt savboent. Evitañ, an implij eus an armoù nukleel n'eus netra da welout gant ar voraliez, n'eo kement-se nemet ur gudenn deknikel. Rak-se, n'he deus ket an Iliz da gomz diwar-benn an dra-se.

N'eus forzh penaos, daoust da bep tra, ez eo bet lakaet ar vombezenn da darzhañ gant ar gouarnamant gall... gant un tamm dale, gwir eo, met hep na seblantfe bezañ gwel drechalet gant ar skoilhoù kavet gantañ war e hent.

ARGUZEREZH AN DIV GOSTEZENN

Petra soñjal diwar-benn implij an armoù nukleel ?

O vezañ n'on ket un arbennigour, e lezin kentoc'h da gomz ar re a zo sañset anavezout ar gudenn. Meneg a rin dreist-holl lev Jean Toulat, *La Bombe ou la Vie*, embannet e ti Fayard.

Menez Messmer.

Aet eo da gentañ Jean Toulat da welout Messmer, a zo unan eus «Tadoù ar vombezenn atomek». Displegañ a ra hemañ menozioù pennañ ar re a zo karget da zifenn an arm-se. Setu amañ ar rentañ-kont eus an diviz :

— Ha soñjal a ra deoc'h e servij an arm atomek da viout ar peoc'h ?

— Koazhet eo bet ganti ar riskloù-brezel, da vihanañ ar brezelioù bras. Ma n'omp ket bet kaset betek ar penn pellañ, abaoe ugent vloaz 'zo, ken stenn ma oa an traoù etre an URSS hag ar Stadoù-Unanet, m'he deus gallet Europa bevañ e peoc'h, daoust dezhi da vezañ daouhanteret, ez eo en abeg d'an armoù atomek. Ken krañv eo ar spouron a ziwan eus an armoù-se ma ne gredfe gouarnamant ebet en em gannañ a-snep d'ur stad a vefe barrek d'ober implij anezho. Setu ar pezh a anver an «dizarbenna», an «diskuzuliañ».

Ouzhpenn-se ez eus ul levezon bolitikel gant an nerzh atomek. Pa vez divizoù etrevroadel, e tegas ar re-mañ muioc'h e bouez d'ur vro hag a zo pourvezet gant ar re-mañ.

— Met kavout a ra deoc'h n'eo ket re goustus an nerzh atomek ?

— Hervez ur vojenn o redek, ez eo an armoù atomek heñvel ouzh ur Moloc'h, prest da lonkañ pep tra, betek ar vugale. E gwirionez, ne da ket da geroc'h budjed Bro-C'hall eget hini Bro-Alamagn, da skouer. Evit an nerzh atomek, c'hoant am eus da laret ez eo marc'had-mat.

N'hoc'h eus nemet keñveriañ ar briz anezhañ gant dispignoù all ; ne goust ket kalz muioc'h eget an dispignoù evit al louzaer-bravaat. Koulskoude, ne zeufe war sperec den ebet rebech d'ar merc'hed ober implij eus ar ruz-muzelloù hag eus ar poult-riz.

— Hag e-kaher lezenn ar vuhezegzh, penaos e c'helle klotañ ar raktes «enep-kêrioù» gant Divizoù

Geneva a c'houlenn ma vefe diwallet an nann-soudarded ?

— Gant seurt reolenn ez eus riskl da zistrujañ, ken buan all, tud ar gouarnamant, pennadurezhioù an arme ha mererezh ar vro. Kavout a ra din ez eo ur vammenn ouzhpenn a beoc'h hag a reizhder e c'hellefe ar gouarnamant hag annezidi ar c'hêrioù bezañ lazhet kenkoulz hag ar soudard izelañ.

— Sened Vatikan II a ziskleir : «kement taol-brezel a denn da zistrujañ kêrioù a-bezh pe rannvroioù ledan en o fezh, gant o annezidi, a zo un torfed a-enep Doue hag an den e-unan. Petra a soñjit-c'hwil diwar-benn ar gondaonidigezh-se ?

— N'eo ket hepken an arm atomek a gement a vefe tamallet gant an diskleriadenn-se. E Dresd hag e Hambourg o deus ar bombezennoù saoz hag amerikan lazhet muioc'h a dud eget bombezenn A Hiroshima, nemet o deus lakaet kalz muioc'h a amzer evit hen ober. Va mestr penn-garter a-wechall, ar Jeneral Ailleret, a lare : «Ar c'hleze, ar gontell hag ar goaf o deus diouennet kalz muioc'h a dud, a varched hag a vugale, da vare an aloubidigezhioù bras, eget an armoù atomek en deiz a hiziv. E Hiroshima hag e Nagasaki, he deus diskouezet ar vombezenn pegen efedus e oa en ur lakaat Japaniz d'en em rentañ. Adalek neuze, ez eo deuet, gant gwir abeg pe get, da vezañ an arm nemetañ.

— Ne vije ket poent paouez ?

— An Istor a laka splann dirak hon daoulagad ne zeuer kammed en-dro, war dachenn an armerezh evel war hini an deknikelezh dre-vras. An arbalstr, ur wech m'eo bet ijinet, n'eo ket bet dilezet evit distruañ d'ar wareg, daoust d'ar Pañ da vezañ e gondaonet. Diwezhatoc'h, n'eo ket bet lezet a-gostez ar c'hanoliererezh, daoust d'an nerzh-distrujañ a oa gantañ, nag adkemeret an doareoù kozh evit lakaat ar seziz war ar c'hreñlec'hioù. Ha bremañ, ur wech bet krouet an arm ken galloudus-se, n'heller ket mont war-dreñv. Rediet e vezer da vevañ gantañ, hag e ranko an Iliz moarvat adwelout he c'hellennadurezh war an danvez-se.

Enebourion ar vombezenn.

Gwelomp bremañ arguzenn ar re a zo a-enep d'ar vombezenn.

Tri abeg a zeu dreist-holl gant ar re-mañ : *didalvoud eo, koustus eo, kontanmus eo.*

Menez ar Jeneral Stehlin :

UR VOMBEZENN DIDALVOUD

Goude-se ez eo aet Jean Toulat da weladenniñ ar Jeneral Stehlin a zo bet Mestr penn-garter an Aerlu etre 1960 ha 1963.

« N'omp ket difennet, emezañ. Un utopienn eo, d'ar c'houlz-mañ, evit Bro-C'hall, krediñ e-barzh un difennerezh hag a vefe broadel nemetken. An «dizarbenna» a zo diazezet war daou dra : nerzh an armoù, hag ar youl d'o implijout. Kavet e vez an eil hag egile gant an Amerikaned hag ar Rusianed. O-daou e vankont dimp.

Kemeromp da gentañ, ma fell deoc'h, hon nerzh atomek. Dister eo e-keñver hini an daou ramz. D'an hirañ-tout e vo ganimp, war-dro 1975, un nerzh atomek a dregont megatonenn. Hini ar Stadoù-Unanet a sav a-benn bremañ da 30 000 megatonenn hag hini ar Rusianed da 25 000, war-dro mil gwech muioc'h egetomp. Pe, mar karit, e 1975, ne vo ket hor galloud-distrujañ a-us da nerzh unan eus ar 615 nijerez-amerikan «B 52» a zoug pep hini anezho betek peder bombezenn H a zek megatonenn. E gwirionez, n'hallimp ket pisaouañ araok 1980 peadra da wareziñ Bro-C'hall. Pelec'h e vo degouezhet an daou ramz a-benn neuza ?

Ne baouez ket an toullvez da ledanaat etrezo ha ni. Heñvel omp ouzh ur reder-tangarr a vije set da gmer lod er «24 h du Mans» hag a welje, goude pep trôad, e talc'h da zilañsañ.

Da skouer, hor «Mirages». Lakaomp ne valent ket tanfoeltret war an zerborth, ha krediñ a ra deoc'h e vefe tu dezho da dizhout Moskov hag Oleska ? Ret eo dezho bezañ adpourvezet apad m'emañ o nijal. Ha gwel difennet eo an aer an URSS !

Har bannlec'hioù e Provensa-Uhal. A-benn ma vezint prest, e vo deuet an enep-bannadelloù (ant-

missiles) da vezañ efedus-tre. Ne vefe ket diaes d'an nijerezed enebour skeiñ bombezennoù warno. Evit pezh a sell ouzh ar splujerezed atomek (en Enezenn-Hir), hag int koustus-meurbet, n'eus ket a-walc'h anezho.

Tremenomp bremañ d'an silvet poent : hon youl d'ober implij eus an nerzh atomek ? Penaos lakaat da grediñ e vefemp mennet-start d'hen ober ? Lavarout a ra Bro-C'hall, n'eus forzh penaos, ne grego ket da gentañ. Anat eo. A-hend-all, ez afa ar bed-holl a-enep dezhi. Met neuze, ma'z eo kont evel-se, daoust hag-ñ e vefe laosket amzer a-walc'h ganti d'en em zifenn, pa zegouezhe dezhi bezañ taget ? Empennit petra a zeufe da vezañ hor bro goude an tarzhadennoù termo-nukleel, e peseurt stad van-trus ez en em gavfe. Lakaomp e tichañse d'unan bennak eus hor «Mirage» mont betek Moskov, diouzhtu goude, ec'h adkroge Bro-URSS gant hec'h eilvet tagadenn. Peurzistrujet e vefe Bro-C'hall . . .

UR VOMBEZENN GOUSTUS

Petra bennak ma'z eo diefedus bombezenn ar C'hallaoued, e teu homañ da ger. Pa voe echu gant brezel Aljeria, e vije bet soñjet e vefe bet skañvaet an dispignoù-brezel. Ar c'hontrol eo a zo c'hoarvezat. Evit ar prantad 1965-1970, e oa merket etre 145 ha 150 miliard evit budjed an arme. D'ar bloaz 1969, e save hemañ da 26 miliard, da laret eo 17 % eus ar budjed broadel. Mann nemet evit 1973, ez aio budjed an nerzhioù atomek da 5 396 milion, da laret eo 15,5 % eus an holl dispignoù-brezel (gazetenn *Le Monde*, 10 a viz gouere 1973).

A-benn ar fin, daoust d'ar gouarnamant tevel war ar poent-se, e komzer eus kant miliard evit an arc'hant gouestlet betek-hen d'an arm nukleel (*Le Monde*, 21 a viz gouere 1973).

* Arabat bazañ souezhet e chomfe war-lerc'h ekonomiezh Bro-C'hall (evel hini Bro-Saoz) e-keit m'emañ ar maout o vont gant ar broioù bet trec'het er brezel diwezhañ : Bro-Japan, Bro-Italia ha Bro-Alamagn.

* Arabat bazañ souezhet kennebeut ez afe war frankaat an touflez etre ar broioù pinvidik hag ar broioù paour. Er bloaz 1967, ez eo savet skoazell ar gouarnamant, lakaet e-skoaz gant levoù ar Stad, da 1,02 % e-lec'h 1,24 % e 1964, ha 1,76 % e 1962. Un digresk sklerijennus, neketa ! Ha c'hoazh an drederenn eus an arc'hant-se a ya d'ober war-dro an departamantoù tramor. Ha war ar marc'had, ne glaskan ket gouzout pelec'h e tremen an arc'hant-se. D'an nebeutañ, ne gred ket din e vefe anezhañ un donezon bur !

UR VOMBEZENN GONTAMMUS

En e brezegenn er skinwel, d'an 12 a viz Here 1964, goude emglevid Moskova a-zivout ehanañ gant an tarzhadennoù nukleel, e lavare ar Prezidant Johnson kement-mañ :

«Gant an emglev-se, e vo harzet na greske pelloc'h an adkouezhadurioù skinoberiek, ma veze kontammet ganto hon douar, hor boued, an aer hag al laezh evet gant hor bugale. 'Var greskiñ ez ae an elfennoù skinoberiek e dent hag en eskern an Amerikaned yaouank. Er bed-holl e teue ar c'hontamm-se da lakaat buhez an den en arver. Bez' a oant muioc'h-mui un danjer evit ar vugale a oa da vezañ.»

O vezañ ma n'em eus ket studiet an afer-se, n'hellan ket mont pell er gudenn ha ret din anzav em eus kalz a ziafiz ouzh arguzennoù ar re a hej ar spontailhoù, alias gwech evit abegoù politikel kentoc'h eget traoù all. Ar pezh a zo sur, e c'heller kaoutiziañ e komzoù Prezidant ar Stadoù Unanet ! Evel just, bep tro ma vez lakaet se bombezenn da darzhañ, e vez embannet gant ar gouarnamantoù «e vez bet kemeret an holl ziarbennoù». Koulskoude, ec'h ankousont lavarout a vez skoet en aer, bep gwech, ur c'hementad a elfennoù skinoberiek, kaset-degaset gant an avelioù hag an doureier, hag a ya da gouezhañ en tu bennak. B'Derc'heil a ra ul lodenn eus an dilerc'hiadennoù-se da vezañ nozus e-pad pell amzer, betek 28 vloaz evit ar strontioñ, 30 vloaz evit ar sesiom 137, meur a vil bloaz evit ar c'harbon 14.

AR C'HLOZADURIOU

1 Tud 'zo a damallo din bezañ un den a youl fall. Perak, emezo, bezañ dalc'hmat war gain Bro-C'hall ? N'eo ket hi an hini washañ. Bezañ a zo broioù hag a zastum etre o daouarn holl nerzhioù atomek ar bed, hep na vefe rebechet dezho ober gaou ouzh an denelezh. Homañ, er c'hontrol, a zo anezhi ur vro vihan hag a zo ret dezhi en em zifenn ar gwellañ ma c'hell ha kemer lod e redadeg an armoù nukleel.

Gwir eo ez eus broioù kablusoc'h c'hoazh eget Bro-C'hall, met n'eus tu ebet da gsout levezon warno. Soñj am eus da vezañ lennet er skrid embannet gant an eskibien a-zivout ar c'henwerzh-armoù e oa ar veleien «evel gedourien evit ar broadoù» m'edont gwirizennet enno. Kaer am bo ober todian, n'hellan ket cheñch an traoù er bed a-bezh. D'an hirañ-holl, e c'hellan komz evit ar vroad m'eo eret hor c'har outi c'hoazh.

2 Tamallet e vo din ivez ober ur fazi-spered, dre ma seblantan skouezh ez eo ret da bep bro sevel un nerzh-emzifenn, hag ez eo d'ar Stad, o vezañ ma'z eo karget da bourchas ar c'henvad, da zibab pehini eo ar stumm gwellañ dezhi da wareziñ ar boblañs.

Ret eo din notañ emaoamp amañ gant ar gudenn diaesañ da zirovestañ. Teir avezhiadenn a rin :

a) Da gentañ e respontin e rankan anzav da bep bro ar gwir - zoken an dever - da lakaat war droad un difennerezh sirius. Hogen ha talvoudus e vefe d'ar vroad dister evel Bro-C'hall fiziout en un nerzh atomek dieub, anezhañ 2 % eus nerzh atomek ar bed ? Met, a lavarot, a-walc'h eo dezhi bezañ gouest da skeiñ ar bombezennoù war ar c'hèrioù bras e-lec'h m'emañ diazezet muioc'h-mui buhez ekonomikel ar broadoù (hervez klevet, ez eus ganti peadra da zistrujañ tregont kâr a 100 000 annezad). Koulskoude, evit an abegoù roet ganin dija em fennad, ne gredan ket en arguzerezh-se. Rankout a rafed neuze urzhiañ un difennerezh europat, evidomp da gomz a-zevri eus ur galloud nukleel gwirion. Memestra a zo bet skrivet gant an Ao. Rocard en e bennad diwezhañ war ar gazetenn *Le Monde* (23 a viz Gouere 1973) : «ne servij da netra, emezañ, nerzhekaat pe «galeataat» ar bombezennoù, ma teu e-pad ar c'heit-se ar bannadelloù-enep-bannadelloù amerikan ha rusian da vezañ resisoc'h-resisañ o galloud-bizañ».

b) Evelato, daoust ha ne gouezher ket aze en ur pech : hini an efedusted ? Evidon, n'eo ket ar gudenn, a-raok pep tra, ur gudenn a efedusted, ur gudenn voral ne lavaran ket. Graet eo va soñj ganin war ar poent-se. N'hon eus ket ar gwir d'ober implij eus armoù a-seurt-se, a vefe barrek da lakaat ar bed-holl da vrankellat, ha da riñsañ an denelezh a-bezh. Gout a ouzon e c'hellan respont penaos n'emañ ket tamm ebet e soñj pennadurezhioù ar gouarnamant lakaat o nerzh nukleel da dalvezout, anezhañ un nerzh-dizarbenn nemetken. Ar c'hempouez dre ar Spouron, evel ma lavarar. Dres, ne gredan ket er c'hempouez dre ar Spouron. Ken aes eo din krediñ e ve savet ar bombezenn H evit plijadur balafenned er «Pafifik». Petra 'fell deoc'h, ne ganson ket an daou c'her-se. Un tammig heñvel eo an doare-emzifenn-se ouzh hini Marcellin pa ginnig dont a-benn eus diaesterioù ar gevredigezh dre greskiñ an nerzhioù-polis.

E-lec'h klask pareiñ ar c'hleñved, lazhañ ar c'hlañvour. Un hent dall ma'z eus unan, na gaz nemet da washaat an digempouez. A-dra-sur, ma ne zeu ket ar c'hempouez eus ar spouron, e teulo ar spouron eus an digempouez. An dahjerusañ eus ar bombezennoù eo «bombezenn ar Vizers», evel ma lavar Dom Herbert Camara.

c) a-benn ar fin, d'ar mare m'emaomp degouezhet, ez omp tonkat da glask hentoù nevez. Merzet a vez d'ar mare-mañ ez eo bresk an ensavadurioù a seblante bezañ peurbadel : menoz ar Stad, da skouer, ha zoken menoz an tiegezh, evel ma'z eo bresk an talvoudegezhioù m'en em harpe warno betek bremañ sevnadur ar C'hornog : diorroerezh an ekonomiezh, ar gounid, an arakaat, ar Skiant. (1) Memestra a lavarfen evit an doareoù d'en em difenn. Aze ivez e tleer dizoleiñ hentoù nevez : Hini an nann-feulster, da skouer. Rak n'eo ket war armoù a zegas an distruj hag ar marv e c'hellomp diazezañ ar peoc'h evit an Da-zont, met, er c'hontrol, war armoù ar Sklerijenn, da laret eo war armoù ar Reich-

un devezh war ar maez

Pa gomzer din eus «un devezh war ar maez», e soñjan diouzhtu em c'hornig-bro. Ret eo din kontañ deoc'h un dra ez on boazet d'ober abaoe an oad a zek vloaz hag a ran c'hoazh hiziv gant kalz a blijadur : hadañ patatez, avaloù-douar, mar deo gwelloc'h deoc'h e-giz-se.

E miz C'hwevrer e vez lakaet patatez da c'hlañañ war ar solieroù goude bezañ bet divou-tet, da lavarout eo, dilamet ar boutoù fall. Boutoù all neuze a zeu war ar patatez, — berroc'h ha gwakoc'h ; ar re-se eo ar c'horz-patatez diwezhatoc'h.

Ar et, temzet hag aozet mat e vez ar park a-raok ober roudennoù e-lec'h ma vez hadet an avaloù-douar e miz Meurzh.

Diouzh ar beure e vez aozet an holl draoù : ar patatez troc'het ha lakaet e kasedoù, ar gwano, an treñch, ar rastelloù, ar paneroù-koad hag ivez ar boued evit an dud. pa vez re bell ar park diouzh ar gêr... Ar c'harr a veze stlejet gant ur gazeg anvet «Kina». Truez am beze outi rak an dud ivez a grape e-barzh ar c'harr. Kanañ, c'hwitellat, c'hoarzhin a raemp war an hent. Brav e veze an amzer, plijus an devezh-labour a oa ouzher gortoz.

Degouezhet er park, e veze diskarget ar c'hasedoù, un toullad e pep penn eus ar park, un toullad all er c'hreiz evit diwall da balemiñ re an douar, hag ivez da goll re a amzer pa veze goullor hor c'hased.

Distaget e veze ar gazeg ha lakaet d'ober roudennoù en ur sachañ war ur mekanik bihan, anvet un traser, ha goude-se e veze lakaet da beuriñ war vord ar c'hleuzioù.

Unan a drese ar pennoù graet fall gant un trañch, hag unan all a fote gwano er roudennoù. Prest e veze al labour evidomp-ni, an haderien. Hag aze e kroge ar redadeg : ret e oa gwelout pehini ac'hanomp a zegouezhe da gentañ e penn e roudenn. Plegat war hor c'hased en un dorn, gant an hini all e lakemp ar patatez en douar. A bep seurt patatez a veze hadet : «Dismuzenn» pe «Bintj», «Uto» pe «Fin de siècle» ; re abred ha re ziwezhatoc'h anvet «Abondañs».

Hed ur votez-kaoutchoug e veze graet dimp leuskel etre pep tamm : «Na re stank, na re bella», evel ma lavare hon tad en ur dremen gant e banerad gwano pe en ur c'holeiñ anezho gant ar rastell : «Mari-Ann, sell un tamm ouzher da labour, mezh out pe betra ? »

Ken prim ez aen ken ne sellen ket pelec'h e lakaen ar patatez. Ar roudennad patatez a oa a-hed hag a-dreuz, heñvel ouzher n'eus forzh petra, met nann ouzher regennad patatez. Ur wech an amzer e ranken chom a-sav evit eünañ ma faour kaezh kein brevet, pe neuze ec'h azezen e penn ar roudenn a-raok kregiñ gant un all.

Ne daemp ket d'ar gêr evit debrñ : astennet e-tal ar c'harr, an heol a-us dimp, an vned o kanañ, na pebezh plijadur ! Kalz muioc'h a naon hor beze er park evit er gêr.

— Goude adverenn e vezo cheñchet seurt patatez, eme ma zad, o sachañ war ur vazh-vutun e-lec'h debrñ un dra bennak. Ret e vo deoc'h leuskel un tamm hiroc'h etre pep patatezen — pep fritenn evidon ! — Ha te, an hini vihan, taol muioc'h evezh ouzher ar pezh a rez. Kalz bravoc'h e vez ar roudennoù da welout, pa vezont eün. 'Ja soñj un tamm 'barzh ar blijadur am bo me o tourañ anezho, ma vez ur gorzennad amañ, unan all du-hont !...

C'hoarzhin a raen 'drek e gein ; me a gave mat ar pezh a raen...

Pa sone an Anjeluz, e veze point tostaat d'ar gêr. Dastumet e veze hor c'hasedoù, kaset d'ar solier hag adkarget 'benn an deiz war-lec'h.

Ma «Devezh tremenet war ar maez» n'eo ket un devezh tremenet da bourmen, da zastum bleunioù pe da sellout ouzher kaerder ar vro, met da labourat. Kalz plijusoc'h eo an doare-se, rak gwelet e vez ar gopr un toullad mizioù goude gant plijadur ha levezenn.

AR BALAN

Balanegi burzhudus va bed bugel ma tirañsen diouzhoc'h an aour a-varlennadoù. Ar bleuñv trellus ma tastumemp a sac'hadou, ni bugale ar skoi, evit Sul ar Sakramant ! Pelec'h int tremenet ? Drouklazhet evel inosanted santel gant ar mekanikoù diaoulek... Drouklazhet evel kement tra n'eo ket profitus, eme an deknokrater. Evit an aotrunez-se avat, eo «profitus» ar seurt dismantroù...

Balanegi madelezhus a roas bod ha repu d'ar Chouanted gwehall. Balanegi benniget a roe ken brokus danvez d'an dudigoù d'ober toennoù war o lojeiz, tiez ha krevier loened. A roe danvez tan d'an teroueroù paour ma save enno nebeut a goad. A roe danvez skubellennoù d'an dud diwar ar maez ha zoken da dud ar bourkoù ha da zarn eus kêr. Rak mont a rae, hervez klevet, ar baizanted da werzhañ skubellennoù bezv ha balan en kêr ha d'ar sitreadoù na daolent ket a valan.

Istimet e oa ar balan evel gor gant ar fornieren ha dreist-holl gant ar wastellerien er c'hêrioù evel Lanuon, da skouer. — Ar bezv ivez, hervez —. N'ouzon ket re vat evit pe abeg.

Em yaouankiz 'oa stank ar balanegi. E pep menaj, dre amañ, e veze dalc'hmat ul lodenn douar dindan balan, an douaroù skañv ha diaes da zaremprediñ. Ret-mat 'oa kaout balan evit an toennoù. Na bade ket keit un doenn-valan hag un doenn-blouz. Met re vihan 'veze ar plouz alies er feurmioù bihan evit diouerout a-walc'h da deñ.

En glas pe hanter-weñvet 'veze implijet ar balan-to. Graet am eus alies ar vicher krennañ balan d'an toer. Gant ar falz da zrailhañ keuneud war ar pigos 'veze troc'het ar begoù, bod ha bod, ha graet fagodennoù kempenn anezho. An treuñchoù 'veze adamarret ivez ha berniet evit bezañ dêvet dre bep ma veze ezhomm. Tan nerzhus kenan a ra ar balan. Met arabat eo dezho bezañ louet pe na bader ket gant c'hwez kreñv ar moged. Ha koulskoude 'veze graet implij evel louzoù gant moged balan glas evit ober d'ar saout koeñvet glaourenniñ ha poursat, ar pezh o sikour da zigoevniñ.

Merzet am eus ivez ez eo sot-nay ar c'hezeg kozh gant ar balan dreist-holl pa vez bleuñv enne. Pa dremenont a-rez ur bod balan e trammont ur c'henaoued en ur dirañsañ ar bleuñv pa c'hellont. O anien ! Gouzout a ra al loened gwelloc'h eget an dud petra a zo mat evit o yec'hed. Ha setu : er balan 'zo un dourenn anvet «spartein» hag a vez implijet evit kleñvedoù ar galon.

Ar gwenan avat n'eont morse war ar bleuñv balan. N'int ket mat d'ober mel. D'al lapined eo mat reiñ ur wech an amzer bodoù balan da grignat. Ar c'honikled gouez a grign kalz ar balan bihan.

Daoust ha bez' zo un nerzh hud bennak ivez er balan ? Perak e touge an dud a soursie eus dimezioù, ur vazh-valan ? Perak eo gant ur bod-balan 'veze frotet ar peurliesañ ar vugale ? Perak 'veze plantet bodoù balan glas e-touez ar c'haol-pome pa zeue chapelouzed warne ? Perak 'veze

eus dimezioù, ur vazh-valan ? Perak eo gant ur bod-balan 'veze foetet ar peurliesañ ar vugale ? Perak 'veze plantet bodoù balan glas e-touez ar c'haol-pome pa zeue chapelouzed warne ? 'ha peñk ivez 'veze foetet delwenn santez Radegonda gant ur bod-balan pa na zegase ket ar pare d'ar c'hlañvour a 'n em erbede outi ? — Anavezet 'm eus em yaouankiz un amezeg deomp a yae da Radegonda da c'houlenn ar pare d'e wreg goulet. Klevet 'm eus bet anezhañ o kontañ d'am mamm e kaeze gentañ, emezañ, ur bod balan da foetañ ar santez. Me hag a oa desket din ez-vihanik kaout un doujañs vras evit ar sent a veze gwall-estonet ha drouksouriet end-eeun gant ur seurt prepos... Ar pezh on sur

ne oa ket talvezet d'an Teo foetañ Radegonda. Marvet oa e wreg, Doue d'o fardono tout bremañ.

Met evit distreiñ war ar balanegi, setu penaos e c'hoarveze. Ar balan 'veze tennet gant un trañch-displantañ, ledet ur pennad amzer da weñviñ. Amarret neuze gant kevreoù dibabet e-touez ar bodoù munut hir ha gweñv. Graet am eus alies ar jeu-se. Savadellet 'veze neuze ar fagod pa vezent reutaet un tamm 'n ur weñviñ.

War-lerc'h ar balan 'veze hadet ed-du ar bloaz kentañ war gozh, sañset. An eil bloaz, segal en distro-gozh, d'an trede, kerc'h. Ha goude 'veze lezet adarre ar park da reiñ balan, a save o-unan e-touez an ed(dre natur an douar, a lavare ar re gozh). Ral 'oa lakaat traoù-hañv na foenn er balanegi. Ur red-ed ha balan a b'ep eil.

Pa eo bet dilezet ar produiñ balan, dre m'en doa kollet ar balan o abeg bezañ, ret eo bet traezhañ ha temziñ solut ar balanegi ha pell eo bet dalc'het ar balan bihan da ziwan en trevadoù hadet. Pell-amzer a vir an had-balan o galloud kellidañ.

Ur wech all, mar plij gant Doue, e kontin' deoc'h un istorig fentus «Istor ar balan gwenn». Re wziezhat on fenoz rak div nadoz va orolaj a zo o krapat etrezek an hanternoz.

23 Gouere 1973

BALAN GWENN istorig gwir

Kentañ 'm boa gwelet balan gwenn 'oa e liorz ar Seurezed, e Tregrom. Eus a belec' o doa ar Seurezed pratiket ar bleuñv dudius-se ? Se n'am eus ket soñj kaer. Marteze eus Kastell ar Gouer pe eus Keroual ? Pe eus Kastell Des Cognets ?

Kaer dreist-par bepred 'oa an div vodenn valan-se, e-kerz sul ar Sakramant, goloet-holl gant ur pil-pavez bleuñv gwenn, ha dezho ur greizenn du — pe da vihanañ brun ken teñval ma seblante du — ur wir vleunienn vreizhat, daoust ma touge an anv «Balan gwenn Portugal».

Pa oa darev an had, evel just am boa bet va lod. Hadañ 'ris anezho en ur gozh chidourenn faout leuniet gant douar skañv. Froudennus eo an had-balan da ziwan, ha kalz kizidik-oc'h ar balan gwenn eget balan ar vro ouzh ar sec'hour hag ouzh ar yennienn.

Teir blantenn 'oa deut da vat. Ha daou vloaz goude, am boa d'am zro, balan gwenn. N'edont ket stank c'hoazh er vro. Er bloaz kentañ 'oa bet nebeut a vleuñv, ha nebeut-oc'h c'hoazh a had, rak bet 'oa troc'het bodouigoù d'ober bokidi. An toulladig greunennou chomet da zareviñ 'oa bet hadet adarre, ha roet ivez — dre voder avat — d'ar vignoned a c'houlenne.

D'an trede bloaz 'oa bec'hiet va daou vod balan a vleuñv, ha deut 'oant da vezañ bras. An drede bod 'oa bet sullivan gant ar skorn. Ma oa bet bleuñv, had 'oa ivez a-leizh : o dastumet am boa pizh, ha serret un tamm brav, profet d'ar vignoned, hadet adarre. Chom a rae ganin un tamm sac'had war-dro ur c'hartouron emichañs.

Gwelet am boa war «gatalog» Vilmorin priz an had balan gwenn : ur gramm, ugent real. Che, emezon. Sed aze ur fortun en tamm sac'h bihan-mañ ! Dont a reas din ur soñj droc'het pe get ? «Ma, goulenn a rin 'ti «Potô» ha prenañ 'rafe va had balana». Ur marc'hadour haderezhioù eo. Prenañ ha gwerzhañ a ra kement seurt had, ha kement seurt plant 'vez produet er vro. Prenañ 'rae end-eeun d'ar mare-se had-lann digant ar glaskerien. Hadet 'veze c'hoazh lann-pil evit ar c'hezeg.

Un deiz eta ma oa bet ezhomm tra pe dra eus ti Potô, 'oa aet ganin va had-balan. Ha war ar memes tro am boa goulennet ha tu 'oa da werzhañ had fleur balan gwenn 'n tu bennak.

— Balan gwenn ? eme Loeiz. C'hwi ho pije balan gwenn ? Dre amañ n'eo ket stank ar seurt-se avat.

— N'ho-c'h eus ket e-touez ho pakadoù bihan had-fleur ?

— Nann, emezañ, betek-hen n'am eus ket goulennet.

— Ma, m'ho pije disamm, me 'garfe gwerzhañ ar sac'hadig-mañ.

— Marteze a-walc'h, emezañ.

Ur marc'hadour zo ur marc'hadour : Prenañ marc'had-mat ha gwerzhañ ker. Ar gwellañ stumm d'ober fortun e berr-amzer ! 'Oa ket peadra 'velkent da goll amzer o varc'hata 'vit ken nebeut. Pevar ugent lur a roas Loeiz din evit va zammig had. Mat 'oa din... E lakaat a reas war un estajerenn e-kichen daou pe dri damm sac'had had-lann nevez (prene michañs digant ur c'hlasker pe gentoc'h ur glaskerez kozh bennak.

Daou vloaz goude. Un deiz 'oa paret va sellou war-du chapel Krist : derc'hent ar pardon 'oa ; ha spurmantin 'raen dija an teltennoù stignet evit an ostelerioù. Pelloc'h a-grap tosen Lann ar Gonsorted am boa merzet un dra bennak iskis. Un dra divoas. Ur park brizh-wenn e-touez lannegi melen-aur.

Kaer am boa frotañ va daoulagad, 'oan ket gouest da gompren petra 'foeltr 'c'hallje bezañ er park-se. Nann, 'oan ket gouest.

Daou pe dri devezh goude, oc'h ober ur sell etrezek Keravel, e welis ar memes brizhella-dur 'n ur park da Adrian. 'Oan ket muioc'h avañset. Petore trevad a c'hiz nevez, emezon, eo krog an dud da lakaat dre 'r vro-mañ ?

Prestik am boa bet an diskoulm. Un deiz, ar yaou emichañs, o vont d'ar C'houerc'had, erru tost d'am fark anvet «Park Loeiz» war ar c'hadastr, met graet outañ bepred «Park an ti-guard», e welis o tiflukañ eus Lanneg ar Bourdellez ur bagad merc'had bihan gant bec'hiadoù bleuñv gwenn... Un taol lagad d'al lanneg. Marellet 'oa gant ar balan gwenn savet e-touez al lann-pil — un tamm douar skañv nevez laket dindan lann.

Biskoazh kement all ! Ar balan gwenn dudius, o had ken ker, a save 'ta bremañ e kreiz al lannegi en douaroù gagn-se ?

Daoust din da gaout, evel ma lavar ar C'hallaoued, «la comprennoire un peu lente», am boa kavet prim a-walc'h alc'houez ar gudenn.

Va fakadenig had balan-gwenn bet laketa gant Loeiz war an estajerenn, e-kichen ar pakadennoù had-balan ? Petra oa deut da vezañ ?

Ac'hanta ! ya. Se 'oa. Mari-Sent, mamm Loeiz, erru war an oad, un tammig en he bugale-aj, a zeue da lakaat urzh — sañset — e stal-genwerzh he mah. Tanlet he doa sur-mat da 'n em heul ar sac'hadigoù lann ha balan mesk-mesk, e besel an had lann-irvin, hañval ma oant an eil rumm ouzh egile, ha mat pell 'zo !

Met paotred o lann-pil avat 'oa reuz enne gant ar vugale o vont da vac'hañ o lann da zatum bleuñv balan-gwenn.

Pell 'zo avat, eo kollet ar balan-gwenn-se, rak ur wech troc'het ne addiwanont ket.

LEVRIOÙ

Pierre de la Condamine : Pontcallec. Une étrange conspiration au coeur de la Bretagne. 360 p. Cahélais. Saint-Molf 44350 Guérande.

Gant darvoudoù an F.L.B., ken F.L.B. 68-69, ken F.L.B. 72, gant e brosez e 1972, eo bet dihunet marteze (marteze hepken) c'hoant ar Vretoned da anavezout tra pe dra eus o istor, dreist-holl ar stourmoù kaset en-dro evit saveteiñ gwirioù ar Vro ; emsavadeg ar Bonedoù Ruz hag irienn Pontkalleg. Souezhus eo, a-hend-all, ez eo dilezet gant ar ganerien a-vremañ emgann ar Chouanted, un emgann ma voe ennañ evelato perzh ar beizanted (ar bobl...) brasoc'h eget e irienn Pontkalleg ; un emgann a badas dek vloaz, ha ket ur bloaz evel hini ar Bonedoù Ruz ; ur stourm a-enep ar veli : ar veli avat n'oa ket mui hini ar Roue, met hini ar Republik.

Dec'h, ur pezh-c'hoari diwar-benn ar Bonedoù Ruz (hep lavarout tra eus ar c'hanaouennoù) ; hiziv, ur studi diwar-benn Pontkalleg. En daou stourm-se, e kaver an hevelep abeg : emsav taer a-enep gwask an telloù, en anv Feur-emglev 1532. Buan e teu ar c'hentañ da vezañ un dispac'h-pobl, n'eo ket hepken a-enep beli ar Roue, met a-enep pep beli ; dispac'h kevredadel muioc'h eget dispac'h broadel. Kriz e voe mouget, daoust d'ar stourm bezañ bet ivez kriz ha gwadek.

Marteze e chome eñvor ar c'hastiz didruze-se, daou-ugent vloaz goude-se. Rak, e 1719, ne finvas ket poblañs Breizh. N'eo ket da lavarout e vefe bet diseblant : rak da grediñ eo e kompene n'eo ket o mad dezho o-unan eo e klaske an irienn-se, met mad ha gwirioù ar Vretoned. Evit ar bobl, e oa bet mervet ar baotred-se 'vit ar Vro : kanet e voent e gwerzioù ma tassone enno ene ar bobl. Diwezhatoc'h e voe tennet ac'hano danvez romantoù : evel-se Alexandre Dumas père, ha Raoul de Naverly. N'eo ket bet ankounac'haet an darvoud-se gant Kervarker, o tastum e ganaouennoù-pobl. Hiziv e vez dibabet alies gwerz Pontkalleg gant ar ganerien.

Nevez 'zo, ur skrivagner, mailh war ar vicher, P. de la Condamine, en deus embannet ul levr-studi diwar-benn irienn Pontkalleg. Sterniet-mat eo an darvoudoù e-barzh istor Breizh hag istor Frañs ar mare-se : ar « Régence », Frañs gwastet gant brezelioù Loeiz XIV, ret dezhi kreskiñ an tailhoù, zoken e Breizh, en desped da ali Breujoù Breizh. Ac'hano, an droukrañs gant an noblañs o welout an dispriiz war wrioù ar Vro, ha neuze irienn, divizoù gant Bro-Spagn a oa o vrezeliñ ouzh Rejant Bro-C'hall. E penn an irienn avat, rener talvoudek ebet ; ha buan emañ an traoù o vont war fallaat. Dinerzhet eo meur a irienn, hag e tilezont ar stourm. Flaterezh. Mont a ra ar pennoù-bras d'ar broioù estren. Harzet eo avat meur a hini, ha toullbac'het ha dibennet pevar anezho.

Dibunañ a ra pep levr-istor Breizh an darvoudoù-se ; ha koulskoude, n'eo ket oberenn La Condamine un adlavar eus al levrioù all. Furchet en deus, drezañ e-unan, en dielloù. Evel just, goude an dispieg, e lavar a veno. N'eo ket ret d'al lenner degemerout ar meno-se hep burutellañ : re c'harv e hañval barn L.C. war ar reizhdez eus stourm noblañs bvihan Breizh. Ober a ra nebeut a stad eus divizoù Feur-emglev 1532 ; kavout a ra mat e c'hoarife ar roue diouzh e c'hoant. Evel just, ma seller ouzh interest ar Stad evel diazez reizh, n'eo tra da lavarout ; met n'eo ket aze emañ mammenn ar Reizhder, ar Gwir. D'ar Gwir eo gouarniñ a-enep an nerzh hag ar galloud ; setu pennañ elfenn ar sevenadur. Ma n'eo ur

feur nemet un drañhenn-baper, da zilezel pa'z eo sparlus, war zigarez ne c'hell ket ur feur bennak bezañ peurbadel, neuze ne c'hell emglev ebet padout. Ma rog an eil ur rann eus ar feur, perak e vefe dalc'het egile da chom feal e-unan d'ar feur. Marteze e oa embregret fall ha dievezh dispac'h an dudjentil vreizhat ; met direizh ? Nann !

Bezot pe vezet, plijus eo an danevell. L.C. a skriv mat, o c'houzout dibunañ ha buhezkaat ar skrid, displegañ ur marevezh pe un den, hag ober diouzh plijout d'al lenner. Diaes eo skuizhañ o lenn ar pa-

jennou-se.

Ma krog ar spered da huñvreal, e teu eñvor an F.L.B. Aze ivez, niverus e voe faziigoù ha taolioù dievezh. Evit d'ar riskloù bezañ bihanoc'h : hevelep doareoù-enklask ha goulnata gant fals-promesaoù, hevelep gwanded hag anzavioù diframmet aes digant ar brizonidi, o kentañ kement tra anavezet ganto. Edont oc'h esperout trugarez ; ha dre-se, gwerzhet, ur mantr, e voe meur a hini gant e mignoned : hegedrik kentoc'h eget digalon. N'anavezont tra diwar doareoù an emgann-kuzh. Prosez Pontkalleg : ur farserezh trist ; barnedigezh divizet en araok gant ar Stad, difenner ebet, galv ebet, ha marv diouzhtu goude ar varn. Perak neuze ul lez-varn ? Da vichañ e voe roet tu da baotred an F.L.B. d'en em zifenn hervez ar gwir ; hag e voent dieubet holl goude ar varn. Moarvat, e oa aet skuizh ar Rejant gant ar re a eneba ouzh e veli, hag e fellas dezhañ reiñ ur skouer. D'ar Vretoned da baeañ : ne vezo ket ar wech diwezhañ ma vezo aberzhet mad Breizh da vad Pariz...

Gant derc'hel kont eus an evezhiadenn-se, e kav dimp e roio oberenn L.C. c'hoant da anavezout muioc'h Istor Breizh. Rak n'anavez ket ar re yaouank (nag ar re all, siwazh !) Istor reizh o bro.

J.C.

Christian Durandet : Les Maquis bretons. 250 p. 20,40 F. Ed. France-Empire, 68, rue J.J. Rousseau 75001 Paris.

Touellet eo un tammig al lenner gant titl al levr. N'eo ket emañ ur sell klok, ur studi resis, o kentañ ganedigezh, framm, buhez hag emdroad ar « Résistants » e Breizh, met hepken ul labour a-gelaouenner, skrivet buan, o tibunañ tra pe dra eus ar pezh en deus klevet. N'en deus ket gwelet e-unan mamm ebet,

babig ma oa en amzer-se. N'eo ket breizhad : deuet eo er Vro da aetersiñ ha da skrivañ ; n'en deus ket reizhet, siwazh ! an anvioù-lec'h, klevet mat, skrivet fall : dre skouer, e vez graet eus Cohiniac *Coignac*, eus Boqueho (Boskov) *Boaucout* (perak ket « bocaux » ?) h.a. Gwazh-a-se evit ar furcher !

Evel just, e vez kanet penn-da-benn klod d'ar stourmerez-kuzh. N'eo ket deuet, evit ar maro, an amzer ma c'hellfe bezañ disklariet ar wirionez penn-da-benn, ya, ar wirionez. Koulskoude, e vefe talvoudus mont da gutuilhañ, emañ hag ahont ivez, eñvorioù ar re o deus gouzhañ en abeg d'ar Résistants, en abeg da dorfedoù a-enep droed an den, chomet digastiz dre an distaoliadeg. Ne veze ket ken brav pep tra ! E bro an Uhelgoad, e troc'h ur « Makizard » divskouarn, — tremenet goude un orjalenn drazo — ar re en doa e-unan barnet ha drouklazhet. E Tregloù noù, p'edo an Amerikaned o tastaat ouzh Brest, ul letanant (?) F.F.I. a zedenne re yaouank ar vourc'h ; kemer a rae paotred 16-17 vloaz (n'o doa bi-koazh tapet krog en ur fuzuilh), da argadiñ ur blockhaus alaman : marv asuret evit ket ha netra : un torfed, marteze ! Medalenet ez eo ar paotr hiziv ! Chom a ra avat stav an traoù a-seurt-se un danvez sakr, un « tabou ». Evit an istorour, ul levr evel hini Durandet n'eo talvoudek nemet e toufe dielloù all da glokaat anezhañ.

Met plijus eo da lenn, anezhañ un dastumad danevelloù berr, skrivet aes ha lennet aes. Digoret al levr, e kerzh buan al lenner betek an dibenn ; ha n'eo ket re hir. Bamet e chomo ar re yaouank gant an darvoudoù-se ma'z a avat berzh-mat ha stourmerien gadarn keñver-ha-keñver. N'eo ket kal da lakaat an entremar an istorioù brav, pe gaerzet tamm-ha-tamm gant an amzar, danevellet gant ar gadourien gozh (eus 14-18 hag all). Ret eo d'an istorour kavout meur a dra all da varn ha da sevel un istor a dalvoudegezh eus ur brezel.

J.C.

Levrioù Al Liamm. Mille J. Queillé, K.R.P. 1136-22 Roazhon.

Goude *Gwreg an Toer*, embannet gant Al Liamm, niverenn 158, Mae-Mezheven, setu o tont er-maez a bep eil pezhioù all Tangi Malmanche : an *Intañvez Arzhur*, drama e pevar arvest, war Johannot niverennet : 25,00, war baper all : 18,00. Ha neuze : *Buhez Salaun, levanet ar Foll*, drama e tri arvest, war Johannot : 25,00, war baper all : 19,00.

Oc'h ober war-dro dornskridoù Malmañch emeur ivez : *Marvailh an ene naonek, Gwreg ar Marc'heg e-trañjour, ar Baganiz, an Antekrist*.

Sur-mat e fello d'an holl pourchas an oberennou-se, darn diembann betek-hen ha moulet kaer dre aked rener Al Liamm. Ra alies e lenner traoù troet diwar ar yezhoù all ; en dro-mañ avat, ez eo traoù eus ar gêr eo a servijer deomp.

L. ANDOUARD REIÑ LANÑS D'AR C'HOARIVA

Na pet gwech e vo ret lavarout hag adlavarout, skrivañ hag adskrivañ, e c'hellfe hor c'hoariva brezhonek bezañ bev-mat na, zuken, bev-buhezek, ma karfe ar Vretoned. Rak m'emañ e par ar marv, n'eo ket abalamour hepken d'ar gouarnamant, pe d'an Iliz, pe c'hoazh d'ar skolioù a vac'hom ac'hanomp, met dre wall ar Vretoned o-unan eo dreist-holl.

Pezh a zo gwashoc'h, kemend-all a c'hellfe bezañ lavaret diwar-benn ar yezh hec'h-hunan, met n'emañ ket em soñj komz eus kement-se hiziv.

Evit dont en-dro d'ar c'hoariva, diskouezet hon eus, va mignoned ha me, ha diskouezet mat, me 'gred, ecc'hellfe bevañ. Diskouezet hon eus, va mignoned ha me, penaos e ranke bevan. Rak, aner e vefe gor-toz ma vefe graet un dra bennak evit hor c'hoariva, er mare-mañ, gant ar c'hoarierien a vicher evel ma vefe aner dispign arc'hant bras evit sevel abadennoù lorc'hus, war skouer pezh a vez graet er broioù bras en-dro deomp.

Bez' e c'heller avat, kavout ha bodañ tud, yaouank ha kozh, paotred ha merc'hed, dedennet gant ar c'hoariva, hag a venn labourat evitañ dre garantez evit ar brezhonek. Ar brouenn a zo amañ gant an dud a zo hiziv em c'hichen. A zo muioc'h, aet eo hor strollad war greskiñ ha, zoken, war yaouankaat, dre ma tremene an amzer, kement ha ken bihan m'on bet lakaet gant va mignon Jermen Breton, er strollad skoazell, en «adstrollad», evel ma vez lakaet tud 'zo, er vro m'emaomp enni hiziv, en «adrepublik». Eval-se 'ta, Jermen ha me e lakaet a-gostez hag e vo displeget ar pezh-c'hoari, en dro-mañ, gant pevar den yaouank hag, ouzhpenn, ur vaouez hag ur gwaz e-kreiz o brud. Edon o vont da zisñjal — salokras ! — ez eus c'hoazh en adstrollad ganeomp ur plac'h yaouank a zo deuet d'hor sikour, nevez 'zo, p'edomp o prientiñ an abadenn-mañ hag ivez, ez eus bet roet un tamm sikour deomp gant Bretoned 'zo eus ar bannlev. Mil bennozh Doue dezho holl ! N'oufen ket lavarout pegen anaoudek ez on-me dezho evit ar skoazell dalvoudus o deus roet din ha pegen plijet on bet o kenlabourat gant tud ken kalonek ha ken spredet-mat.

Taolomp, mar plij ganeoc'h, ur sellig en a-dreñv. A-drugarez d'hor strollad e vo displeget, ur wech ouzhpenn hepken, pevar bloaz a zo, er sal-mañ end-eeun, «*Un den a netra*», gant Roparz Hemon. Tri bloaz a zo e vo tro ur pezh-c'hoari a Vro-Gembre : *Ar c'houmoul a dec'h*, da vezañ displeget amañ hag e Ti ar

Yaouankiz, e Sceaux. Warlene e voemp laouen-dreist da vezañ gouest da c'hoari «*Gwreg an Toer*», ur pezh nebeut anavezet, disprizet gant tud 'zo, ha na oa ket bet biskoazh c'hoariet dirak an dud. Kement-se a oa dileet mat da Dangl Malmanche, e oberour awenet, ha lorc'h a zo ennomp da vezañ c'hoariet anezhañ ken e Pariz, ken e Sceaux ha ken e Kemper, evit digoridigezh ar 25vet Kamp Etreketiek ar Vrezhonegerien.

Da eo din hiziv degas da goun d'hor c'henvroiz e voe Jarl Priel un dramaour bras anezhañ ha, moarvat an hini nemetañ, e-touez hon dramaourien vrezhonek, da vezañ desket ar vicher gant unan bennak eus dramaourien vrasañ e amzer. Evit enoriñ anezhañ, war-lerc'h R. Hemon ha Tangl Malmanche, hon eus dibabet, ar bloaz-mañ, evit e zisplegañ dirzoc'h, «*Ar Baleer-bro*», ha da eo din degas da soñj deoc'h e voe c'hoariet dija e Bro-Dreger, war-dro fin ar brezel, hag e Pariz, un ugent vloaz a zo bennak. Setu, eta, m'emaomp o vont d'e grouiñ en-dro.

Eaun steuenn ar pezh-c'hoari. Ur vaouez, o terc'hel menaj e Bro-Dreger, he deus daou vab, unan yac'h-pesk, Job, hag egile e par ar marv, Alan. Hemañ a vo zimeziñ gant ur plac'h yaouank, Marivon.

P'emañ ar medisin o paouez damlavarout n'eus mui spi ebet da saveteiñ ar paour-kaezh Alan, e teu en ti ur baleer-bro a zo degemeret garv gant Job. Ra ziwallo hemañ, rak n'eo ken nemet an Ankoù deuet da gerc'hat Alan. Hogen, dirak glac'har ar merc'hed, e plij dezhañ, evit ur wech, bezañ madelezhus. Lezel a ray, eta, e vuhez gant an den toc'hor, ya, gant ma teuo un den bennak all gantañ... Ma teurvez-zit selauou aketus hor c'hoarierien, ne zaleot ket da c'houzout penaos eo bet diskoulmet ar wall-gudenn-se.

Graet hoc'h eus dija anaoudegezh gant lod eus hor c'hoarierien. God ar Briz, ar vamm, e vo Tereza 'r C'horr, a voe, bloaz 'zo, gwreg ken fromus ha ken gwirion an Toer. N'eus arvar ebet e vo ken fromus all bremaik. Marivonig Dagorn e vo Soazig Senechal. Sell 'ta, warlene na oa anezhi nemet Katou, ur vatezhig gwidreus hag aonik, ha bremañ, setu hi aet da bennhêrez... A-walc'h war se, avat. Dre besurt burzhud eo aet Bruneau, ur pabor a «sigoñ-mestr», ar wech diwezhañ, d'ur medisin dic'halloud dirak ar c'hleved ? N'oufen ket hel lavarout. Ha setu bremañ tri c'hoarier nevez-flamm, daou anezho nemet-ken war o c'hentañ lamm, rak n'eo ket ar wech kentañ d'an Itron Senechal, mamm Gatou, salokras ! Soazig, da sevel war al leurenn. Labourer he deus dija evit ar c'hoariva brezhonek, met e Plougastell e oa, p'edo yaouank-flamm. Darn a gavo, sur a-walc'h, eo gwall yaouank J.S. Delom evit c'hoari an Ankoù. Perak, avat, ne vefe ket yaouank an Ankoù, peogwir eo bapred ken akuit ha ken akuit war e labour. Ha setu, erfin, Yann-Glaoda Emeillat, ur gwir Leonad anezhañ, tonket a-viskoazh da vezañ Job, ur paotr a zo stamp e dreid gantañ war an douar.

Ra lavarin ivez ez eo hor mignon Bruneau en deus, gant skoazell e verc'h Mona ha Padrig ar Gallaou, unan eus e skoldi eus Athis, ijinet ha treset kinkladur al leur-c'hoari.

N'eo ket gwall-gozh ar pezh-c'hoari-mañ, peogwir e voe savet gant Jarl Priel, un tregont vloaz 'zo bennak. Ha koulskoude, n'eus arvar ebet ez eus c'hwez ar c'hozh gantañ, dreist-holl p'e lakaer e-skoaz gant pezhioù-c'hoari a c'hiz nevez displeget er broioù all. N'eo ket se, avat, digarez a-walc'h evit chom hep e c'hoari, peogwir hon eus aze ul labour eus ar c'hentañ, savet en ur yezh vev gant ur mailh war ar vicher. Penaos, a-hend-all, e c'hellfe hor skrivagnerien sevel pezhioù a c'hiz nevez, pe merat enno kudennoù hon amzer, ma ouzont, en a-raok, n'o deus c'hañs ebet da vezañ c'hoariet ? Kerkoulz eo dezho sevel ur pennad-skrid bennak pe ur gontadenn ! Penaos e c'hellfe ur *Benedetta* bennak difoupañ en hon touez-ni, ma n'eus ket, amañ hag a-hont, e Breizh pe er-maez anezhi, strolladoù tud o strivañ a-zevri da reiñ buhez d'hor c'hoariva. Da nebeutañ, ez eus amañ, e Pariz, ur guchennadig tud o taskiñ ar vicher hag o vont war-raok a galon vat. Saliv ma talc'hint gant o labour rak o poaniañ hag o strivañ, evel ma reont, e roont, d'am meno, ur-skouer dibar d'o c'henvroiz, ur skouer a vezo heuliet, dez pe zeiz. Rak, ma rank hor yezh hag hor sevenadur derc'hel da vezañ, na welan ket penaos e c'hellfant tremen hep ur c'hoariva a zo seul retoc'h deomp n'hon eus, koulz lavaret, na Radio na Skinwel brezhonek. Ezhomm hon eus ivez da adsevel ur vuhez kevredigezhel brezhonek, da lavaret eo, e gerioù eeunoc'h, hon eus ezhomm, ni, brezhonegerien, d'en am gavout asambles, d'en am damañ, a-gevret, da santout hor c'halonou o lammat a-unan. En ur ger berr, ret eo deomp adkavout ene hor bro. Bez' e c'hell ar c'hoariva hor sikour da dizhout ar pal-se.

Echuet 'm eus. Dav d'ar c'hoari.

Pariz, d'ar 7 a viz Ebrel 1973.

Emglev an Tiegezhioù

Niverenn 14
1973

EMGLEV AN TIEGEZHIOU

30, plasenn al Lisou
35000 Roazhon

En hor yaouankiz eo bet fiziet gant
Doue amzer da zont hor bro.

KELEIER EMGLEV AN TIEGEZHIOU

Y.V. PERROT

Ober ar pezh a zo tu da ober
gant ar pezh a zo,
evit an dud, evel ma'z int.

Troet kenañ e vez an dud gant doareoù breizhek e kement degouezh a zo.

Tresadennoù, bannieloù, arouezioù a vez ganto war o c'hirri, o c'hwiled-tan, o mirc'hi-houarn ; war o seier, o chupennoù...

Anvioù brezhonek a lakont d'o ziez, d'o chas, d'o c'hizhier... hag aliesoc'h-aliesañ d'o bugale.

Un taol-arnod a zo bet kaset da benn gant *Emglev an Tiegezhioù*, e reter ar Vro :

A-drugarez da renerien an div gelaouenn *Nantes-Expansion* ha *Le Carillon 35*, eo bet moulet un embann da ginnig ur rollad anvioù-badez d'al lennerien.

Kantadoù lizheroù a zo en em gavet ganeomp da c'houde.

Da gantadoù a diegezhioù eo bet kaset rolladoù anvioù ha paperennoù all o tisplegañ doareoù «Skol Ober» hag un toulladig traoù brezhonek all ouzhpenn...

Distar, marteze, an darempredoù savet etre E.A.T. hag an tiegezhioù nevez-se (1).

Darempredoù talvoudus int koulskoude, rak :

Kement takenn a ya da ober ar mor,
Kement fulenn a ya da ober an tan.

War ar gelaouenn *La Bretagne Immobilière*, eo bet kinniget anvioù tiez diwar labour Garmenig Ihuellou. Krog eo ar goulennoù da zont.

Kantelioù brezhonek a zo bet roet dindan anv *Emglev an Tiegezhioù*, e Brest.

Paotred yaouank n'o doa ket gallet kaout kourioù brezhoneg en o skol, ha ne oa ket posupl dezho mont da gentelioù un oaled e kêr. Deuet int da c'houlenn penaos ober. Gant-se en deus E.A.T. kemeret en e gerg ober war-dro ar c'hentelioù brezhoneg-se.

Katekiz brezhonek

Pell amzer 'zo, n'eus ket ken katekiz brezhonek er parrezioù, nemet en unan bennak marteze. Hag en tiez-gezhioù brezhoneger, penaos e vez katekizet ar vugale ?

Abaoe bloaz pe zaou, eo bet divizet en hor bro lakaat an tadoù ha mammoù d'ober ar bloavezh kentañ katekiz d'o bugale. Pa ne c'hell ket, pe ne venn ket ar gerent ober katekiz, neuze e vo graet gant laiked

all. Roll ar veleien ha seurezed er bloavezh kentañ-se n'eo ket ober katekiz war-eeun, hogen hañchañ ar gerent. Ar bloavezh kentañ katekiz a glot gant ar C.B.I (10vet klas). Seizh pe eizh vloaz eo ar vugale d'ar poent-se.

Daoust ha n'eus ket amañ un dachenn digor d'an tadoù ha mammoù da reiñ boued ene d'o bugale e brezhoneg ? Un doare da ziskouez ez eo evit gwir ar brezhoneg ar gwellañ benveg evit displegañ personelezh hor spered.

Da c'houde, evel just, e c'heller ober katekiz brezhonek er gêr da eilañ ha klokaat katekiz gallek ar parrezioù ha skolioù. Tud 'zo a ra moarvat dija ?

Gant peseurt testennoù avat ? Ar c'hatekiz nevesañ eo moarvat hini Kemper ha Leon embannet gant Tolra e 1943. Kavet e vez e galatrezioù ar presbitalioù, skolioù pe e ti «Pilhaouerien Emmausa», trokaterien 'zo. Pe e familhoù 'zo ivez. Forzh pegen dic'hizet e seblant bezañ ar paper, eo prizioù-kenan kement katekiz brezhonek gant an imprimatur : ar feiz ne cheñch ket, implijet e c'hellont bezañ. Nevez 'zo ez eus bet profet da E.A.T. un dek katekiz Tolra bennak, «*Va c'hatekiz krenn*», Bennozh Doue d'ar brofourez ! Bez' e c'hellont bezañ goulennet digant kreizenn Vrest E.A.T., 25, straed Leon-Harmel, 29200 Brest, 4 L. *kuir* a vizoù-kas.

Un dra servijus kentañ d'ar familhoù a vefe embann follenoù katekiz da c'hortoz e vefe kreñv a-walc'h katoliged Vreizh da embann adarre ul lev'r katekiz en hor yezh.

Estreget ar c'hatekizoù, e c'heller implij ivez da sikour hor bugale da vont war-raok : an Testamant Nevez, embannet gant Al Liamm, al leksionaloù ha levrioù lidoù ar sakramantoù gant Barr-Heol, al lev'r oferenn hag al levrioù diwar-benn al liderezh sakr embannet gant Studi hag Ober.

N'eo ket testennoù a vank evit neb a venn stagañ pe genderc'hel gant al labour !

Ul levrenn gategiz eeun ha berr a zo ezhomm da gelenn ar vugale. Gant piv e vo kinniget an testennoù hag ar skeudennoù ? Embannet e vo gant E.A.T.

* Lev'r oferenn ha levrioù :

* Lev'r oferenn ha levrioù liderezh sakr :

«Studi hag Ober»

Levrioù ar Bibl

(Dimezell St-Gall de Pons, Louaneg 22).

* Leksionaloù ha levrioù liderezh sakr :

«Barr-Heol»

(M. Le Clerc, Buhulien 22300)

* Va c'hatekiz krenn

(Kreizenn Vrest E.A.T., 25, straed Leon-Harmel, 29200 Brest).

AR VOGALENNOU

Ronan, selaou 'ts A A A

Tour iliz Landeda A A A

'Zo chomet da vegañ A A A.

Ha gwir kement-se E E E

E grediñ a rin-me E E E

Pa welin an tour-se E E E.

'P eus nemet mont di I I I

E Landeda 'weli I I I

Iliz tour outi I I I

(1) Aliesik a-walc'h e tageromp da c'houde lizheroù all o c'houlenn keleier hiroc'h.

Tour iliz a zo 0 0 0
Ha gwir betek hirio 0 0 0
Beget pegen teo 0 0 0.
Er gêr p'on erru U U U
Ganin e oa echu U U U
Va c'hanaouenn, setu U U U.

Bennoz Doue da Zeneza Mager he deus roet deomp gerioù ar ganaouenn-se. Kanet he deus ivez an ton. Evit ar re n'hen anavezont ket, e c'hell bezañ kanet «war un ton anavezet», pe distaget evel ur rimadell. Anavezet e oa gant kalz tud dija ? Dasket da veur a vugel en E.A.T. ?

Emvod an nevez-amzer a zo bet e Bulien, stok ouzh Lannuon, d'ar Yaou-Bask, 31 a viz Mae. Bennoz Doue d'an Aotrou Klerg, Person, d'al leanezed ha da dud ar barrez evit an degemer hegarat ha laouen bet graet deomp-holl.

Ur vicher nevez.

Lerc'h-ouzh-lerc'h ez eus bet goulennet e Brest, merc'hed o c'houzout brezhoneg d'ober war-dro bu-gale yaouank.

Enklask.

Ur studieraz eus Kolmar (Elzas) a zo deuet da Vreizh e-doug ar goañv tremenet. Edo oc'h ober un enklask diwar-benn an Emsav sevenadurel breizhat. Lojet eo bet gant Emglev an Tiegezhioù.

Istor Europa evit ar vugale.

Savet gant horc'heneil mat Yann Brekilien, a zo bet roet da renerien ar gelaouenn «Skol», da vezañ moulet. Trugarez bras dezho da vezañ disammet ac'hanomp eus ul labour ken pounner evit E.A.T.

Gwellat hor brezhoneg.

C'hoarvezout a ra da dud 'zo, da familhoù 'zo, e vefe un tammig disec'het, un tammig askornek ar brezhoneg a reont gantañ. Un doare mat da lakaat lipig ha druzoni en-dro dezhañ eo mont da chom ur pennad e tiegezhioù 'zo, e Kastell-Paol : lojet ganto, bevet ganto, o labourat ganto er parkeier, ha brezhoneg leun an divskouarn. Ar re o dije c'hoant d'en em vataat eus kement-se, ra skrivint da :

« Kelc'h Brezhonegerien Vro-Leon »
Ti-Kâr,
29250 Kastell-Paol.

Eürusted, yec'hed ha santelezh da Glen-Erwan-Efflam, mab da Yann Jegou ha da Lena Louarn, bet ganet d'an 13 a viz c'hwevrer e Roazhon.

Buhez eürus, levenez, yec'hed ha santelezh da Herve Durand, bet ganet d'an 19 a viz gouere e Roazhon. Gourc'hemennoù kalonek d'e dad ha d'e vamm !

Gourc'hemennoù laouen, eürusted ha santelezh da Valo Louarn ha da Françoise ar Goff, a zo bet benniget o eured d'ar 15 a viz Ebrel, en Argol.

WANIG HA WENIG

Kelaouenn ar vugale

Kelaouenn ar stourmerien da zont

Lakaat ho pugale da lenn ha da gas skridoù ha skeudennoù dezhi.

Ez homm 'zo moulañ adarre traktoù da reiñ brud da E.A.T. Nebeut-nebeut a chom. Setu amañ testenn an trakt evel ma'z eo bet kavet mat gant pennemvod Kemper. Ma c'hellit hen ober, kasit arc'hant da :
Y. Souffez-Despré
C.C.P. 806-13 Marseille.

Hervez an arc'hant bet degemeret, e vo niver an traktoù moulet.

Ha soñjal a rit
en amzer-da-zont ho pugale ?

Ha c'hoant hoc'h eus reiñ dezho o heritaj penn-da-benn, dezho da vezañ tud a zoare ?
Neuze eo mat komz brezhoneg outo hag o sikour da c'houzout ervat o yezh !

Neuze, kemerit perzh e buhez :

Emglev an Tiegezhioù

Hag a zo liamm ha kenlabour etre ar familhoù brezhonek.

Ha ma n'oc'h ket dimezet, kenlabourit ivez gant Emglev an Tiegezhioù, evit mad ar vugale. Emglev an Tiegezhioù a zegemer kelennadurezh an Iliz Katolik.

Emglev an Tiegezhioù :

... (chomlec'hioù ar c'hreizennoù).

DOUJANS DA VUHEZ AN DUD

Tud « Emglev an Tiegezhioù », bodet e Bulien :

* O verzhout ar bruderezh diroll ha mac'hom a vez graet a-du gant an diforc'hañ-bugale,

* Oterc'hel kont e tegemer an Emglev Kelennadurezh an Iliz Katolik,

* O c'houzout ez eo bet embannet adarre gant ar sned meur ha, nevez 'zo (Kerzu 1972) gant hon tad santel ar Pab ez eo ur redi-rik kaout doujañs d'ar vuhez hag ez eo ur muntr lakaat diforc'hañ a-ratozh kaer,

* A ziskleir a-wel d'an holl e rank pep den kaout doujañs da vuhez e nesañ adalek ar poent ma krog betek ar poent ma varv ez-natur, hag ez eo un torfed lazhañ ur c'hrouadur e kof e vamm,

* A ziskleir ez eo un dever-rik evit an dud a-hiniennoù hag evit ar c'humunioù, ar pennadurezhioù relijiel ha laik, an dud o c'houarn ar broioù, pep hini hervez e c'halloud, reiñ tu da vezañ en un doare dereat d'ar mammoù gwasket gant enkadennoù ar vuhez hag e riskl da lakaat d'ar marv ar bugel a zou-gont : lojeiz, labour, sikourioù arc'hant, medisinerezh,

* A zegas da soñj ez eo kefridi pep Stad gwarezin buhez an dud ha n'eo ket reiñ aezamantoù d'o lazhañ, ha, diouzh ret, kemer en he c'harg ar vugale dinac'het gant o mammoù,

* A c'houlenn ma vo diwallet da reiñ ton d'ar bornografiezh.

Mennad divizet gant Emglev an Tiegezhioù en emvod Bulien, d'ar yaou-Bask 1973.

Emglev an Tiegezhioù 30, leurgêr al Lisoù 35000 Roazhon.

OKITANIA

1 Liderezh nevez.

Aotr

Aotreet eo bet an implij eus an okitanegévelel ma ouzer, hag aozet a-benn bremañ troidigezhioù droist-holleveit an oferenn. Setu penaos e oa kont e dibenn miz Mezheven 1973.

Antroidigezhioù da vezañ implijet a zo heñvel evit an holl rannyezhoù, daoust ma vez dalc'het kont eus doareoù ispisial pep hini. Ar geriadur a zo heñvel, n'eus bet kudenn ebet war ar poent-se, ha klotañ a ra an holl destennoù silabenn-ha-silabenn, evit ma c'hellfe ar veleien ne vern eus pe rannvro hag en ur zistagañ pep hini en e stumm, kenofereñañ asambles. Evel just ez eo un tamm iskis evidomp, met en Okitania e c'heller ober kement-se. Embannet ez eus bet dija ul levrig : *Messa en lenga nostra*, gant Felibrij Bro-Brovensa ; ennañ ar peder Bedenn-Veur hag un toullad pedennoù : an *De Profundis*, an *Ave Maria*, hag ar *Gloria Patri*. E gwerzh emañ e ti Roudelet Felibren dou Pichoun Bousquet, 24 bd Debord, 13012 Marsilha (Marseille).

Ul levrig all, un tamm disteroc'h, e gwaskoneg, gant div bedenn-veur hepken a oa dindan ar wask e Montalban. Dalc'het ez eus bet kont strizh eus kenglot ar silabennoù / beleien o komz yezh Ok peurunvan, provenseg ha gwaskoneg a c'hello kenofereñañ.

Ar mouladur en Okitaneg peurunvan a vo an hini klotañ : Ordinal an Oferenn (gant ar Pedennoù Eukaristiel), daouzek pe trizek oferenn a-zevosion-pedennoù, diskleriadur war ar yezh, ur geriadur, pep tra en okitaneg, ur roll anvioù sent (re an Iliz a-bezh ha re Okitania). MO

Moarvat e vo moulet e Menez-Serrat. Evit kaout doareoù resis, skrivañ da : Librairie occitane, 32, rue Grenouille, 47 Agen.

M. K.

2 Afer al Larzac.

D'an 25 ha d'ar 26 a viz Eost ez eus bet aozet ur gerzhadeg etrekeal al Larzac, en Okitania, gant labourerien-douar ha strolladoù-harpañ evit enebañ ouzh raktresoù an arme a fell dezhi kemerout an uhelgompezenn-se ha skarzhañ kuit neuze ar boblañs. «Gardarem lo Larzac» (Mirout a raimp al Larzac), evel ma hucho an dud, deuet di niverus-tre (50 000 anezho), ha kalz a Vretoned en o zouez.

Ne oa netra a folklore er vanifestadeg-se, m'en deus kemeret perzh enni ar Jeneral de la Bollardière hag a zo bet straket an daouarn dezhañ, goude m'en devoa displeget e venozioù a-zivout an enebañ hep feulster.

Echuet eo bet ar vanifestadeg gant ur gouvel poblek e-lec'h ma voe klevet aozourien eus Bro-Okitania hag eus a lec'h all. Marti an Okitaniad gant e ganaouennoù-brezel, Koleta Мадри, ur c'hallez anezhi, o kanañ ifern ar galeoù, ha neuze Graeme Alwright, un nevez-zelandañ, krog abaoe ur pennad da ganañ galleg.

Un devezh a-bouez evit Okitania.

F. K.

BRO-FRIZIA

Troidigezh nevez eus ar Bibl hag ul Levri-Imnoù.

E miz Ebrel 1966, e voe divizet gant pennoù Ilizoù Bro-Frizia ober un troidigezh nevez eus ar Bibl e Frizeg, ha lakaat al labour-se da vezañ kaset da benn gant Protestanted ha Katoliked a-unan. Izili an bodad a dabutas da c'houzout hag adwelet e vefe an troidigezh implijet betek neuze ha bet echuet, tregont vloaz 'zo, gant an Dr. G.A. WUMKES hag E.B. FOLKERTSMA, pe e vefe adgraet un troidigezh nevez penn-dre-benn. Goude ur pennad brusatadenn e kavjont furc'h ober hervez an eil stumm. An holl a oa a-du evit lavarout e oa troidigezh Wumkes ha Folkertsma tost-tre ouzh ar skrid-orin ha mat-tre e-keñver lennegezh. Met kalz a gavas dezho e poa he yezh un tamm a c'hiz kozh. Pouezañ a

42

rejont war ar fed e oa ret da yezh ar Bibl bezañ fresk, sklaer ha nevez, ma tlee ar Bibl bezañ lennet ivez er-maez eus an Iliz.

An troidigezh nevez a gemerje, war a greded, pemp bloaz da nebeutañ. Abaoe avat eo bet astennet an termen-se da eizh vloaz bennak. Spi a zo bremañ e vo embannet an troidigezh e-nevez klok e 1975. Bez' e vo anezhi al levrioù kaniki

e vo anezhi al levrioù kanonikel hag adkanonikel. E miz Meurzh 1971, e voe embannet an *Aviel hervez Sant Lukaz* dindan stumm ul levrig a oa e titl *De Helpende Hân* (an Dorn o sikour). Ma'z a an traoù, evel ma soñjer, e vo tu da gaout an Testament Nevez a-benn bloaz (1974).

E miz Meurzh 1973, e kelaouenn an *American Bible Society Record*, e oa ur pennad diwar-benn stad al labour war-dro an troidigezh nevez, gant ar Rev. B. Smilde, sekretour ar C'huzul evit troidigezh nevez ar Bibl e Frizeg. Titl ar pennad a oa : «Un troidigezh nevez eus ar Bibl an nesañ ar gwellañ d'ar saozneg». Ennañ e lavar ar Rev. Smilde :

«Bremañ ez eus c'hwec'h troour hag a zo karget eus al labour kentañ ; met frouezh o labour a vez reizhet gant c'hwec'h ispisialour war ar Frizeg, gant tri doueoniour ha gant daou zen barrek war gudennoù yezhoniel an troidigezh-mañ. Ouzhpenn-se, ez eus daouzek den hag a lenn an troidigezh gant evezh, evit gwelout ha troet eo bet an destenn en ur stumm naturel hag ivez hakkomprenus ha taolennus eo ar yezh. Lakaet e vez ivez notennoù — ar pezh a zo ret d'al lenner-etre ha na c'hallfe ket kompren darn eus an darvoudoù pe an doareoù stag ouzh sevenadur Bed ar Bibl.

Ul Levri-Imnoù nevez evit Ilizoù Bro-Frizia a zoddindan ar wask. Embannet e vo er bloaz-mañ moarvat (1973). An Imnoù nevez, koulz ha troidigezh ar Bibl, a zo ul labour ekumenek. Daoust ma ne oa katolik ebet o kenlabourat, e oa tost an holl rummadoù protestant ouzh hen ober. Al levri a zo ennañ 500 imn pe war-dro, tennet eus 2000 bloavezh a gristeniezh, adalek ar re skrivet gant Tadoù an Iliz, evel Sant Ambrozius, Sant Augustin, betek reoù skrivet gant barzhed bev c'hoazh en deiz a hiziv. Bez' ez eus el levri 160 kanenn o tont eus al levri kozh bet embannet e 1938. 330 a reoù nevez a zo bet lakaet ouzhpenn. An darn vrasañ anezho a zo bet troet e Frizeg gant tri barzh meur : Gerben Brouwer, Douwe Tamminga ha Bernard Smilde. N'eus ket pell ez eus bet embannet gant unan anezho, Gerben Brouwer, ul levri-barzhonegoù : *Preludium*. Ennañ ez eus un toullad barzhonegoù relijiel hag a vo kavet el levri-Imnoù. Dre e berzh el levri-Imnoù, dre e berzhioù uhel e-keñver spered hag e-keñver lennegezh, e vo, spi hon eus, *Tjarkaboek* nevez Bro-Frizia un dra a dalvoudegezh.

(diwar ar saozneg *Frisian News Item*, May 1973).

H. K.

BRO-SEMBRE

1 Eistevod.

Brazañ gouelioù an hañv, e Kembre, ez eo an Eistevod a vez graet e deroù miz Eost hag a bad ur sizhun-vezh. A bep eil e vezont graet en Hanternoz pe er C'hreisteiz. Er bloaz-mañ ez int bet graet an Hanternoz, le Rhuthyn, e traoñienn ar stêr-Gloued (Dyffryn Clwyd) : 5-12 a viz Eost. Ken frejus ez eo deuet ar gouelioù da vezañ ma vez goulennet digant ar c'huzulioù-kêr votiñ yalc'hadoù da sikour. Krog e oa darn eus ar c'huzulioù d'ober penn-fall, war zigarez ma veze implijet leurren an Eistevod d'ober politikerezh. Evel m'emañ ar c'hiz, e vez kouviet un den a rank uhel, pe ur skrivagner, da vezañ prezidant un devezh bennak, unan eta evit pap devezh, hag e ra an den-se ur brazegenn da zisplegañ e venozioù war un danvez o sellout ouzh Kembre : yezh, sevenadur, an Eistevod hec'h-unan, h.a. Ne veze ket difennet outo komz eus politikerezh, met en abeg da c'hrognadeg darn eus ar c'huzulioù, ha gant an eta ne vije ket votet ganto ur skoazellad-arc'hant, e oa bet divizet hevlene ne vije ger ebet a politikerezh. Lloyd George, koulskoude, kent ar brezel diwezhañ hag ar brezel kentañ, ne vanke ket da gontz a-du gant e venozioù ! Daoust ma'z eus ivez avel a-benn, e vez dalc'het grous d'ar redienn-diazez : Kembraeg hepken evel yezh ofisiel ar gouelioù, nemet eur krog da ober evit an dud digembraeg estrenien, saozon, gant an troidigezh war an taol.

E Breizh, e c'heller aes-tre heuliañ dre Radio ar gouelioù, da vihanañ en Hanternoz Breizh. Da skouer : kurunidigezh ar Barzh, ha kadoridigezh ar Barzh, d'ar Meurzh da 14.30, ha d'ar yaou da 14.30 ivez. Ha

43

bemnoz e vez roet un diverrañ eus an devezh.

Er bloaz-mañ, ez eo an hevelep hini en deus gonezet ar gurunenn hag ar gador. Kement-se ne oa ket c'hoarvezet abaoe 1912 ha 1915, pa oa bet gonezet an eil hag eben gant an Dr. T. H. Parry-Williams, d'an oad a 24 bloaz (e 1912). Er bloaz-mañ, ez int bet gonezet gant ur paotr yaouank, 25 bloaz, marc'hadour levrioù ha pladennoù kembraek, er Bala, Alan Lloyd Roberts. Ne oa ket ar wech kentañ dezhañ da c'honit prizioù, rak e meur a eistezvod rannvroel, e oa bet dija «kurunennet» ha «kadoriet». En amzer-mañ, emañ o treñ e kembraeg barzhonegoù ar barzh gallek Beaudelaire, hag en e soñj emañ

ivez stagañ da zeskiñ brezhoneg.

Un neventiz a-bouez e-keñver an Eistezvod : renerien ar gevredigezh-se o deus divizet holl a-unan tennañ en-dro an arc'hant plaset e Bro-Saoz evit o fiasañ e Bro-Gembre, da lavarout eo war-dro

L 100 000, ur 100 000 000 bennak a lurioù gall (kant milion) ; un nebeut bloavezhioù evel just a vo ezhomm evit diblasañ an arc'hant-se.

Gwashañ kudenn avat a chom ganto da ziskoulmañ ez eo homañ : daoust hag e vo dalc'h et da cheñch bep bloaz lec'h an Eistezvod gant ar mizoù bras-direizh a vez da heul, pe e vo klasket sevel ur greizenn stabil. Abegoù a-du hag a-enep a zo evel just.

2 Cymdeithas yr Iaith.

Daoust ma'z eus kalz o tamall da dud yaouank Kevredigezh ar Yezh o doareoù, e ranker anzav ez eo krog o bruderezh hag o labour da lakaat mesk e Kembre. Ret eo dezho paeañ kement-se avat : tellou-kastiz ha toull-bac'h. Teir sizhun goude bezañ bet dimezet da verc'h Gwynfor Evans : Meinir, en deus ranket Ffred Fransis, bet sekretour ar Gevredigezh, mont en toull adarre evit ur bloavezh ; nac'het en deus ober galv pe apel, rak n'anavez ket ar gevredigezh lezennoù Bro-Saoz ha prest ez eo an izili anezhi da c'houzañv diglemm ar barnedigezhioù douget en o enep. Gwell eo ganto, n'eus forzh penaos, mont d'ar prizon eget paeañ an tellou-kastiz.

3 Priz Kuzul an Arzoù-kaer.

Er bloaz-mañ, en deus *Cyngor y Celfyddydau* (Kuzul an Arzoù) savet ur genstrivadeg-troidigezhioù da binvidikaat lennegezh Kembre ha da zizoleiñ war un dro danvez troourien akuit diwar ar yezhoù estren. E-touez ar re o deus bet ur priz, hon eus ar blijedur da venegiñ an Itron Rita Williams-Morgan, kelennerez war ar Brezhoneg en Aberystwyth hag anavezet mat e Breizh : dibabet he devoa ur gontadenn gant R. Hemon. Hor gourc'hemmennoù dezhi.

4 Orin ar Bibl kembraek.

Ur yalc'had e 100 Lur saoz ar bloaz a zo bet roet d'ar Reverant I. Thomas, kelenner e Skol-Veur Bangor, da studiañ istor troidigezh an Testamant Nevez e kembraeg (1551-1620). Ret eo dezhañ sellout ouzh an testennoù gresianek hag an troidigezhioù e latineg, germaneg, saozneg ha gallek o devoa servijet evel diazezh d'o labour da William Salesbury, Richard David, Thomas Huet, Richard Parry ha William Morgan. Spi en deus an Aotrou Thomas e vo embannet frouezh e enklaskoù e 1975, dres a-benn ar bloaz n'emeur e-sell da embann troidigezh nevez an Testamant Nevez. M. K.

BREIZH

An Aotrou Kudeneg. (1888-1973).

En noz ar gwener d'ar sadorn 20 a viz Gouere, eo bet marvet an Aotrou Alfoñs Kudeneg, bet person Bulien e-pad tri bloaz : 1943-1946. Daoust ma ne oa ket chomet pell amzer er barrez-mañ, ez eo unan eus ar veleien hag zo bet dalc'h et soñj ar muiañ anezho. Bloavezhioù diaes en devoa bevet eno,

peogwir e tegouezhas e Bulien e miz Genver 1943, da lavarout eo pa oa amizioù kriz an dibenn-brezel o tigeriñ.

Kement ha sikour un istorour bennak da skrivañ e vuhez, merkomp e oa bet ganet e Plistin e 1888, hag e oa bet kure en Eviaz hag e Gwengamp, goude ma oa bet beleget, a-raok mont da berson da Lokenvel, da Sant-Neganton ha da Louergad. E-kreiz ar brezel e c'houlennad e cheñchamant, hag e trokas parrez koulz lavarout, gant an Aotrou Penven a guitaas Bulien evit mont da Louergad. Eus a Vulien, e tlee mont e 1946 da berson d'ar Vinic'hi, e-lec'h ma chomas betek ar bloaz 1964, pa gemeras e retred en askont d'e yec'hed.

Un den eus an hegaratañ e oa, ha sur-mat n'eo ket stank an dud o deus bet hen gwelet fached pe fuloret. Ordinal ur minc'hoarzh gantañ, dreist-holl pa groge da gontañ un istor evesk bennak, rak ur bern a ouie. Met evel just, n'eo ket poltred an Aotrou Kudeneg evel den nag evel beleg emañ lennerien Varr-Heol o c'hortoz, met ur ger bennak diwar-benn e labour vrezhonek. Sellit e levr Abeozen : Istor al Lennegezh Vrezhonek, ha ne welot nep lec'h ebet anv *Mabig Efflam*, daoust m'en deus ar Mabig Efflam-se strewet e varzhonegoù e *Kroaz ar Vretoned*, e *Breizh*, hag ivez e *Felz ha Breiz*.

Sant Efflam, evel ma ouzer, a zo unan eus Sant Bro-Blistin, ha setu perak en devoa an Aotrou Kudeneg, pa oa kloareg yaouank, kemeret «Mabig Efflam» evel e lesanv-pluenn, kerkent ha ma oa bet kroget da aozañ barzhonegoù.

Ar pezh hirañ skrivet gant «Mabig Efflam» a zo un droidigezh diwar ur pezh gallek, savet gant an Ao. Chaloni Danteg, embannet a-bennadoù war ar journal *Breizh*, etre ar 25 a viz Kerzu 1927 hag ar 15 a viz Gouere 1928.

Sant Efflam ; pezh-c'hoari en pemp Arvest distroet en Brezoneg (gant ôtre) diwar hini an Otrou Chaloni an Danteg, gant Mabig Efflam. Tra-walc'h e vo reiñ amañ roll ar c'hoarierien evit gwelout petra a glasker taolennañ dre ar pezh-se :

C'hoarierien
Sant Efflam : Prin breizad
Marzin : Arc'hdrouiz
Medeg : Map hanan Marzin
Mederig : Map yaouank Marzin
Meriadeg : Drouiz, mignon Marzin
Morvan : Map hanan Meriadeg
Quintius : mignon Morvan
Riwall : Drouiz, mignon Riwall
Kelenner : paour-kez war an aluzen
Bugale mignoned Mederig, Drouized, Ovizien, barzed, kourerien.

Ar c'hoari a dremen demost da Blistin, war al Leo-Dréz.

E-keñver yezh, n'eus ket kalz a dra da lavarout, rak yezh Mabig Efflam a oa yezh yac'h ha pinvidik Bro-Blistin, embreget gant ur skrivagner hag en devoa studiet ar yezh, hep mont koulskoude don-meurbet ar studi-se.

Dav merkañ amañ marteze un dra bennak diwar-benn ar Chaloni Danteg-se. Genidik e oa eus Plistin ha bet kelenner war ar skiantoù e klerdi bihan Landreger. Ur furcher hag un ijiner e oa : pell amzer a-raok ma oa bet komzet eus Bleriot, en devoa ijinet ul lapous hag a nije a-dreuz porzh ar c'hoardi, gant ur winferell a lake divaskell al lapous da flapañ evit e gas war-raok. Savet en doa ivez ur raktres heisoù kemm-digemm o malvinier, met pa ne felle ket d'ar Stad C'hall ober he mad eus kavaden ar beleg e oa chomet e baperoù en e diretinier ken na zeuas un doiz bennak spourien d'o goullenn digantañ d'o studiañ : biskoazh evel just ne oant bet retornet dezhañ ; hag ouzhpenn, e oa bet implijet e gavadenn da baramentiñ listri an Alamaned. Ha prosez d'ar paour kaezh beleg, evel just. Met n'o devoa ket bet ar varnerien kalon a-walc'h d'e gondaoniñ, pa weljont pegen divlam hag eeunek e oa.

Ma ! ar Chaloni Danteg-se a oa ar skrivagner brezhonek. Diaes eo gouzout petra en deus bet embannet. Met embannet en deus da vihanañ ul levrig en un dastumad : *Burzudo c'hoaveet er c'hanved zo o ren*,

François Makary, amunuzer er gêr a Lanvaur, Tours, Alfred Gattier, levrier, 1884 ; 96 pajenn. Troet aeo ar skrid diwar *Itron Varia Lourda*, levr Henri Lasserre. E sell edo an Aotrou Danteg da embann levrioù all evel-se hag implijañ ar c'honidegezh «en kerz ar vugale galvet gant Doue d'ar velegiañ» (sic) hep kaout pe-a-dra d'ober ho studi». Met, war a seblant, ne voe embannet levrig all ebet. D'ar furcherien da glask.

Yezh an Ao. Danteg a zo traegeriek, se 'zo sklaer, ha gwevn-meurbet. Met bezet a vezo ! Ne blijje ket nemeur moarvat ar Yezh uhel rak p'en devoa an Aotrou Kudeneg goulenet digantañ aotre da dreñ e bezh-c'hoari e brezhoneg, en devoa lavaret ya, met gant ma vije en ur yezh poblek.

Evel ma oa ar c'hiz, e rae an Aotrou Kudeneg kanaouennoù evit degouezhioù a bep seurt, evel, lakomp, pa veze gouel gant ur c'henvreur bennak dezhañ : oferenn-nevez, kadoridigezh, jubile. Rimañ a rae aezet hag e veze e holl draoù war un ton anavezet. Derc'hel a reas da yezh Treger, hep mont da heul e gevroad, c'hwec'h vloaz koshoc'h evitañ, Paotr Juluen, An Aotrou Sklison, hag a oa aet war ar yezh peurunvan, kerkenet ha ma oa bet diazezet e 1941.

Bet o deus lennerien Barr-Heol un tañva eus e werzioù, un nebeut bloavezhioù 'zo : traoù troet diwar latin Sant Anselm, en enor d'an Itron Varia. Ma l Goude bezañ troet levr Sant Anselm penna-da-benn en devoa adlakaet al labour war ar stern ha klasket neuze heuliañ reolennoù (un tamm a-dreuz 'm eus aon) ar yezh peurunvan. Traoù kaer a zo deuet gantañ, rak estreget ur rimadeller e oa anezhañ, ur barzh gwirion, ha spi a zo ne vo ket lezet e skrid da louediñ e-touez dornskridoù ul levr-oueg bennak.

Disoñj avat ez eo ar veleien, rak ma oa bet kantikoù ha pedennoù e latin, deiz e obidoù, e oa bet ar peurrest er yezh a ouzoc'h. Ur merk ouzhpenn eo aet tuzum da vat kizidigezh an dud-a-iliz. Ne santont ket mui zoken petra eo an doujañs e-keñver ar re varv.

Koulmig Arvor.

D'ar 15 a viz Gouere 1973, ez eus bet gouelioù e Bonen, en enor da Filomena Kadoret, bet marvet hanter-kant vloaz a oa. Dindan baeroniezh ar Bleun-Brug e oa bet laketañ traoù ; e yezh ar vro e oa an oferenn, ha sur-mat evit un degouezh evel-se, ne oa ket ezhomm da lodennañ ar brezegenn e div rann ha degas kement-se a c'halleg war ar partolo ; gwir eo e oa pouezusoc'h ar pezh a oa bet lavaret e galleg eget ar pezh a oa bet e brezhoneg.

Goude an oferenn, e oa bet benniget ur monumant en envor da Filomena Kadoret (Koulmig Arvor), gant an Aotrou Bourdellez, aluzener an ospital e Gwraze, ha Chapalan Marc'eh gant an Aotrou Bourdellez, aluzener an ospital e Gwraze ha chapalan Marc'heien Urzh-Veur Malta. En abadenn, goude kreisteiz, e oa bet kanet ar pep bravañ eus kanaouennoù Koulmig Arvor gant kanezezed brudet, evel Kristina Allenou, eilet war an delenn gant Soazig Noblet, Mari Kadoudal, Tinaig Lusia, Janed-Loeiza Roualen.

Notenn : Ar re o defe c'hoant da gaout dre ar munud an tenor eus ar gouel a c'helle skrivañ d'Aotrou Person Mellioneg-Bonen, da c'houlenn e gannadig-parrez eus an 22 a viz Gouere 1973. M. K.

Nac'h bezañ soudard.

D'ar gwener 24 a viz Eost 1973, ez eo bet kondaonet da zaou vloaz toull-bac'h ur skolaer yaouank eus Landivizio, an Aotrou Henaff, evit bezañ nac'het gwiskañ dilhad-soudard ha troc'hañ e vlev. Teir gwech dija en doa goulnet bezañ sellet evel emvour-dre-goustiañs : «Evit lakaat va oberoù da glosañ gant an Aviel, e fell din nac'h kenlabourat e nep stumm gant an arme». Tamallet ez eus bet dezhañ ober politikerazh ha nac'het outañ bezañ lakaet war listenn an emvourien. E-touez an dud-a-iliz deuet d'e brosez, e oa an Tad Besret eus Boken. Poent eo d'ur Riobe bennak ober un diskleriadur war sujed an emvourien-dre-goustiañs. F. K.

An Aotrou Lec'hvien.

Divizet e oa bet e vije savet ur groaz el lec'h ma oa bet alazhet an Aotrou Lec'hvien, person Kemper-Gwezenneg, d'an 10 a viz Eost 1944. Prenet e voe bet an dachenn zoken en anv «Kevredigezh Eskoptiek Sant-Brieg» ; met chomet e oa an traoù abaoe war o c'hement all, dre ma vije bet, a-hervez, tud eus ar stourmerez-kuzh en eskopti o c'hourdrouz ober freuz mar bije bet savet ar Groaz. Bez' ez eus darn hag en em c'houlenn hag-eñ n'eus ket tra-walc'h gant ar blakenn gaer a zo en Iliz-patrez Kemper-Gwezenneg :

An Aotrou Per-Mari Lec'hvien, bet person ar barrouz-mañ e-pad seizh vloaz, goude bezañ karet Doue hag ar Vretoned, en deus gouzavet ur maro kriz an 10 a viz Eost 1944. Ar Pastor mat a ro e vuhez evit e zefved.

Dizarempred e oa deuet da vezañ al lec'h ma oa bet peurlazhet an Aotrou Lec'hvien, friket e oa bet zoken ar groaz vihan marbr lakaet en andred ma oa bet kavet e gorf, e-kerz un diboullañ-koad. Dre ha spenn hag haleg zoken a oa savet en hent-karr ha ne oa tu ebet ken da dostaat. Ranket ez eus bet dic'harzhañ ha teurel louzoù-dic'hizañ. D'hor meno, e vefe mat d'ar Vretoned kustumiñ mont di ha darc'hel bev evel-se an envor eus ar Merzher santel, ha pa vo deuet ar mare, e vo savet ar Groaz — ket ur monumant, evel just — zoken ur groaz-vaen kozh.

Ur bobl hag a ankounac'ha he zud veur a zo war hent an ankounac'h hec'h-unan. M. K.

Herve ar Menn (1899-1973).

Anavezet mat e oa Herve ar Menn e Breizh hag e Pariz, en abeg d'e labour war dachenn ar sonerezh hag ar yezh. Gantañ e oa bet degaset giz ar sac'h-ninioù bras e-lec'h ar biniou kozh. E 1932, e savas Kenveuriezh ar Sonerien, a-unan gant Marsel Aodig, Dorig ar Voier, Cheun ar C'hann, gant harperien impart, evel Eflamm Kaven, eus Sant-Vég. E 1942, ec'h embannas ul levrig tonioù biniou, met ar pezh talvoudusañ a reas, e voe moulañ, e 1959, kanaouennoù ar C'horal Bourgeois, chomet diembann betek neuze. Kenlabourat a reas da veur a gelaouenn, dreist-holl d'ar Bed Keltiek hag a vo ret dastum ar pennadoù-se d'o moulañ, rak traoù a-bouez a zo enno e-keñver istor e barrez c'henedik, Hañveg, hag e-keñver gizioù ar Vro.

Evel kalz a Vretoned, en devoa ranket divroañ da Bariz, goude ar brezel bras kentañ, e 1925, mat en ur zerc'hel da labourat evit gonit e vuhez, e talc'he don en e greiz ar soñj eus e barrez kement ha ken bihan m'en devoa prientet istor e barrez a zo da vont dindan ar wask dambrast.

Buan-tre avat, ez eo dilamet digant karantez e dud, ha deuet e oa e gorf da interañ da Hañveg, d'ar yaou 9 a viz Eost 1973. An ofis penna-da-benn a voe graet, evel ma oa dileet, e yezh ar Vro. Deredet e oa d'an obidoù, dileuridi eus Bodadeg ar Sonerien, ar Falz, Kendalc'h Pariz, ar Bleun-Brug, ar C'hour-saz, Bretoned Pariz, Emglev an Tiegezhioù, hep kontañ ar skrivagnerien hag ar gelennerien, evel Per Denez, kelenner e Skol-Veur Roazhon, Ronan Huon, rener Al Liamm.

Er vered e voe degemeret e gar c'horf hag ambrouget betek e vez gant daou soner biniou ha bombard, ha goude ar pedennoù diwezhañ, e lavaro Alan al Louarn kenavo d'an hini tremenet en anv Emglev an Tiegezhioù. Goude salud Kaouisin a-berzh Bretoned Pariz, e lavaras Kourer-Kalonden Pedenn ar C'horsez dirak an arched.

Pijet gant familh Herve ar Menn, an Itron ar Menn, Gwennole ar Menn hag Erwan hag o ziegezhioù degemer gourc'hemenn a gongañ Barr-Heol. M. K.

DOARE SKRIVAÑ AR BREZHONEG

DIELL

Karvez, d'an 12 a viz Mae 1973.

E-doug an unnek bodadeg-studi bet dalc'het etre dileuridi an daou zoare-skrivañ implijetañ evit ar brezhoneg, eo bet savet ha degemeret roll ar poentoù a zo bet emglev diwar o fenn.

1) Lakaat *b*, *d*, ha *g* e-lec'h *p*, *t*, ha *k* e dibenn ar gerioù, hervez an deveradur, hep diforc'h ebet etre anv-kadarn hag anv-gwan.

2) Kudenn ar *c'h*.

Skrivañ *c'h* war-lerc'h *ar*, *ur*, *er*, *er* gerioù o kregiñ gant *k*. Chom a ra ar peurrest da vezañ studiet.

3) An dibenn verboù.

a) skrivañ *-mp* e-lec'h *-m* (gwelomp e-lec'h gwelom);

b) skrivañ *-añ* (preañ), *-iñ* (debrîñ) e-lec'h *-a* (prena) hag *-i* (debrî);

c) skrivañ *ema* e-lec'h *emañ*.

4) Skrivañ *-añ* (gwellañ) e-lec'h *-a* (gwella) en derez uhelañ.

5) Ar ger-mell.

Skrivañ *un*, *ur*, *ul* e-lec'h *eun*, *eur*, *eul*.

6) Chom hep skrivañ ar c'hemmadurioù *S/Z*, *F/F*, *CH/J*, *C'H/H*.

7) Al liesterioù en «ou» pe «ou».

Skrivañ *-où* (stumm ret evit al levrioù-skol).

8) An *-ao-* / *-ô-*

Skrivañ *-ao-* (paotr e-lec'h pôtr).

9) An *-ae-* / *-ê-* / *-ee-*

a) skrivañ *dâel*, *impalâer*, *pâeron*, *mâeron*, *dâer* (dâeroù), *lâer*, *mâer*, *kâer* gant *-ae-*;

b) skrivañ *-ae-* en holl anvioù nemet ar re bet meneget uheloc'h;

c) er verboù, skrivañ *-ae-* e-lec'h *-ee-* pe *-ê-*.

10) An *-w*, *-ou*, *-iw*

An *-ev*, *-eo*

An *-av*, *-ao*

a) lakaat *ur v* e-lec'h *un o* e gerioù 'zo : *levr*, *revr*, *gavr*...

b) war-lerc'h ur vogalenn :

1) e dibenn ar gerioù, skrivañ *-w* (*braw*, *hiziw* pe *hiriw*, *tew*, *bew*, *piw*, *liw*, *ataw*...) nemet *sav*, *fav*, *gov*, *trev* (*dav*?, *skrev*?) ;

2) e-kreiz ar gerioù, skrivañ *-v* (*bevet*, *bravoc'h*, *livet*...) nemet *deluenn*;

c) war-lerc'h ur gensonenn e dibenn ar gerioù :

1) mirout ar *v* war-lerc'h un *l* (*galu*, *palu*, *malu*...);

2) *o* pe *v* goude ar c'hensonennoù all (*baro/barv*; *dero/derv*; *maro/marv*; *mezo/mezv*; *azo/azv*; *ano/anv*; *garo/garv*; *karo/karv*; *taro/tarv*; *bero/berv*; *ero/erv*; *c'hwervo/c'hwerv*; *bano/banv*; *lano/lanv*; *bezo/bezv*...).

Notenn : Gwenedourien a ginnig : *pevar* e-lec'h *pevar*.

teñval e-lec'h *teñval*.

Dalc'het e vo an daouzekvet bodadeg e Karvez d'an 29 a viz Gwengolo.

Roll-labour : peurechuiñ gant kinnigoù ar Wenedourien; kudenn ar *c'h/h*.

48

EMBANNA DURIOÙ

A - RITUAL AR VADEZIANT : aozet gant Komision Eskopti Sant-Brieg ha Landreger.
Dre offset.

B - GOUELIOU AR SENT (levr-ofereñ) liesskrivet.

Alioù : Al lennadennoù pemdeziek a zo klok evit an daou vloavezh 1 ha 2 :
25,00 pep hini. Un dra vat e vefe d'ar re a ra ganto lakaat keinañ anezho,
bloavezh ha bloavezh.

Tu a zo da geinañ ivez asambles al levrioù ofereñ all : Azvent, Korreiz,
Pask.

Koumanantoù Barr-Heol a grog gant niverenn gentañ ar bloaz.

LEVRIOU AR BIBL

Nevez-deuet er-maez : ar C'hrennlavarioù, Yob, Kantik ar C'hantikoù (Kanenn
ar C'hanennoù), Rout, Klemmoù Yeremias (ar C'hlemmgenoù), Komzoù ar
Prezeger (Koheleth), Levr Ester, Daniel, Esdras, Nehemias, An Danevelloù.

Embannet gant an Aotrou Gall, person Eviaz : seizh levrenn anezho. Graet eo al labour war-
eeun diwar an hebreeg. Pec'hed eo e rank ul labourer evel-se ober pep tra e-unan-penn. Tal-
voudusoc'h ez int eget na seblantont, rak er c'hontrol d'ar ganabenn ez eo gwelloc'h o boue-
denn eget o fluskenn.

Skrivañ war-eeun d'an Ao. Gall, 22-Yvias.

taolenn

1	Klerg : Lazhañ Buhez	3
2	A. Kalvez : Kembre 1971 (III)	7
3	Jus Kozak : Mask Jurig er bed all (troet gant Kirill Giraudon)	13
4	S. an Tieg : Keginerezh	21
5	V.D. : an Tort bihan	22
6	F. Kerrain : ar Vombezenn atomek	25
7	M.A. Kosig : Un devezh war ar maez	30
8	Anjela Duval : Ar Balan - Balan Gwenn	31
9	Levrioù : P. de la Condamine : Pontcallec C. Durandet : Les Maquis Bretons Levrioù Al Liamm	35
10	L. Andouard : Reiñ lañs d'ar c'hoariva	36
11	Emglev an Tiegezhioù	38
12	Keleier : Okitania, Frizia, Kembre, Breizh	42
13	Diell : Doare-skrivañ ar Brezhoneg	48
14	Embannadurioù : Ritual ar Vadeziant, Gouelioù ar Sent, Lennadurioù pemdeziek	
15	Embannadurioù Barr-Heol	

neur : abbe Yv. Le Gall, Copie 22 Pédernec.

Mouler : an Aotrou Gall, person Pedernez.

Directeur de la publication : M. Le Clerc, Buhulien, 22 Lannion, Gérant.

Renner ar gelaouenn : an Aotrou Klerg, person Buhulien, 22 Lannion.

Périodique inscrit à la Commission P.P.P. sous le N° 29 746.

Embannadurioù Barr-Heol

1	Bloavezh A (Sulioù ha Gouelioù) dre offset	16 Lur
2	Bloavezh B (Sulioù ha Gouelioù ha Pask)	6 Lur
3	Bloavezh B (Sulioù ordinal ha Gouelioù)	9 Lur
4	Bloavezh B (Ofisoù Sulioù an Azvent hag an 9 Sul)	3 Lur
5	Bloavezh C	16 Lur
6	Levr-Oferenn : Azvent-Nedeleg Epifaniezh (21x27)	9 Lur
7	Levr-Oferenn : Koraiz Pasion Pask	9 Lur
8	Levr-Oferenn : Amzer Fask	9 Lur

LENNADENNOU PEMDEZIEK

9	Bloavezh 1 (4 levrenn pep hini)	7 Lur
10	Bloavezh 2 (4 levrenn pep hini)	7 Lur
	Pep bloavezhiad klok	25 Lur

RITUALIOU ROMAN

11	Ritual ar Vadeziant, liesskrivet	2 Lur
12	Ritual Sakramant ar Briedelezh	6 Lur

EMBANNADURIOU ALL

1	Seurez Kerwenan ha Chapeled ar Plac'h varv (tresadenn an Timeur - mouladur nevez)	7 Lur
2	Otello (tresadenn an Timeur)	7 Lur
3	Mervel evit bevañ (Saig ar Gov) pezh-c'hoari relijiel	7 Lur

Goulenn an holl levrioù-se dre chekenn-bost pe chekenn-bank

Revue **Barr-Heol**, 22300 LANNION C.C.P. 245-453 Roazhon.

Merkit war gein ar chekenn ar pezh a vennit kaout hag e vlot servijet kerkent, hag erbediñ a reot amzer ar re a ra war-dro ar gelaouenn.

KOUMANANTIT DA VARR-HEOL

ur gelaouenn bev-buhezek moulet dre offset
en ur yezh aes ha glan war un dro

KOUMANANT-BLOAZ :	20 Lur	Breizh ha Frañs
	18 Lur	Studierien
	23 Lur	Estrañjour